

L. LECLERC

Yezadur rannyez Treger

Embannet e oa bet e 1908, hag eun eil moulladur e 1911, eur “Grammaire bretonne du dialecte de Tréguier“ gand an Aotrou Leclerc. Adembannet e oa bet e 1986 gand Ar Skol Vrezoneg (Emgleo Breiz).

Soñjet em-eus e vefe mad adembann al leor-ze, pa ne jom skwerenn ebed ken anezañ, med e brezoneg.

Keñveria a ra dibaouez Leclerc gand ar galleg. Ar pez a zo a-bouez eo ar skweriou.

Lakaet ez eus bet skweriou ouspenn pa zoñje din e vanke unan bennag.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Ober a ra gand **c’h** pa skrivom bremañ gand **h**. Lakaet eo bet **h**.

Ar z mud e tregerieg a zo bet lakaet (z).

Al liester en **-o** a zo bet skrivet **o(u)**.

An doare-skriva a vez greet gantañ bremañ a zo bet lakaet etre (...)

Ne vez ket skrivet gand Leclerc ar memez ger bepred gand ar memez doare (**ê, eo, glav, glao** da skwer). Ober a ra gand **eur** pe **eul** dirag **l**.

Eur beleg e oa Leclerc. Alese eur bern skweriou relijiel.

A. ar Merser

TAOLENN

Evid kavoud tra pe dra, kopia an dra ha lakaad anezañ war “Klask”.

DISTAGADUR

BOGALENNOU BERR PE HIR

Ar vogalenn “é”

Ar vogalenn “è”

Ar vogalenn “e”

Distagadur an “o”

Ar vogalennou-fri

“*eñ*” a zo brezoneg-rik

Friet eo “*in*” e gerioù ‘zo

“*on*” a zo friet pe hanter-friet

“*un*” n’eo ket friet, nemed er ger “*puñs*”

Leoneg ha Tregerieg

Distagadur *GW*

Pouez-mouez gerioù ‘zo

AR HEMMADURIOU

Ar hemmadurioù dre fri

Ar hemmadurioù dre wannaad

Kemmadurioù dre greñvaad

Kemmadurioù mesket

AR GER-MELL

AN ANO-KADARN

AR REIZ

Reiz an anoioù traou

LIESTER AN ANOIOU-KADARN

Al liesterioù diabarz

Anoioù-kadarn meur a zilabenn enno

Liesterioù e *i*

Cheñchet e vez ar vogalennou diabarz

Liesterioù en *o, io*

Liesterioù en *-ed, -ien, -ier*

Liesterioù en *-ed*

Liester en *-en*

Anoioù en *-ez* pe *-iz*

Liesterioù en *-on*

Liesterioù en *-ier* hag en *-eier*

Liesterioù en *-e* (*-ez* e Leon), en *-on, -iz, -idi*

Liesterioù disheñvel

An unanderenn

Daou her evid al liester
An niver-daou
Ar geriou bihannaad
Liester ar geriou bet bihannaet
Anoioù-karan daou-ha-daou

AN TRAOU DIFETIZ

AN ANOIOU-GWAN

An derez uhell hag an derez uhella
Dereziou uhella implijet drezo o-unan
An derez kement-ha-kement
An derez izel
An anoioù-gwan-verb
An derez klok
Ar bihannaad
An estlamma

AN ANOIOU GWAN NIVER

An niverou kevrenneg
Niverou liezkementet
Niverou rannet
Niver ha niver
Eur gont war-dro
An niverou en *-enn*

AR RAGANOIOU-GOUR

Ar raganoioù renerien
Ar raganoioù renadennoù
Gand ar verb *am-eus*
An araogennoù staget

ANOIOU-GWAN PERHENNA

AR RAGANOIOU PERHENNA

ANOIOU-GWAN DISKOUEZA

AR RAGANOIOU-DISKOUEZA

AN ANOIOU-GWAN GOULENNATA

AR RAGANOIOU-GOULENNATA

AR RAGANOIOU STAGA

AN ANOIOU-GWAN AMRESIZ

AR RAGANOIOU AMRESIZ

AR VERB

Ar verb *beañ* (*beza*)

Doare disklêria

An doare-divizoud

Doare gourhemenn

An doare-suja

An ano-verb

An ano-gwan-verb

Ar stummou boaz

Ar stummou leh

Ar stummou amstriz

Doare-disklêria

Doare-divizoud

Bez' implijet evid lakaad an evez war ar verb

Implij ar **B** hag ar **G**

Ar verb *am-eus*

Doare disklêria

An doare-divizoud

An doare-gourhemenn

Ano-verb

Ano-gwan verb

Stummou boaz

Ar verb “*ober*“

Doare disklêria

An doare divizoud

An doare gourhemenn

An ano-verb

Ano-gwan-verb

Stummou boaz

Stummou diresiz

An doare disklêria

Displegadur gand ar rener dirag ar verb

An doare disklêria

An doare divizoud

Displegadur ar verbou gand skoazell “*ober*“

Ar verb “*karoud*“

Doare disklêria

An doare divizoud

Doare gourhemenn

Ano-verb

Ano-gwan verb

Stummou boaz

Stummou amresiz

Doare disklêria

Doare divizoud
Displegadur gand ar rener dirag ar verb
Doare disklêria
Doare divizoud
An doare-gouzañv
Doare divizoud
Ano-verb
Ano-gwan verb
Ar stummou boaz
Doare-disklêria
Stummou amresiz
Doare disklêria
Doare divizoud
Displegadur gand ar rener dirag ar verb
Doare divizoud
Stummou boaz
Doare disklêria

Verbou dioberiuz

An ano-verb hag an ano-gwan-verb
Anoiou-verb a vez kemmet o gwrizienn
Anoiou-verb heb dibenn-ger
Anoiou-gwan verb
An anoiou-gwan verb tremenet hag an anoiou-gwan

Ar verbou emober

Verbou direiz

Mond, moned

Doare disklêria
Doare divizoud
Doare gourhemenn
Ano verb
Stummou boaz
Stummou amresiz
Doare divizoud
Displegadur gand ar rener dirag ar verb
Doare disklêria
Doare divizoud

Dond, doned

Doare disklêria
Doare divizoud
Doare gourhemenn
An ano-verb
Ano-gwan verb
Doare disklêria
Stummou boaz
Displegadur gand ar rener dirag ar verb

Gouzoud

Doare disklêria

Doare divizoud

Ano-verb

Ano-gwan verb

Ano-gwan verb tremenet

An doare-gourhemenn

Displegadur gand ar rener dirag ar verb

Doare disklêria

Doare divizoud

Displegadur reiz ar verb *gouveoud*

Felloud

Goulenn

Karoud

Galloud

eme

Verbou gand meur a wrizienn

Cheñchamant vogalenn ar wrizienn

Ar verbou diberson

falloud, felloud

Mankoud

Kavoud, plijoud, soñjal, kredi

eo : euz ar verb *beañ* (*beza*)

ra (stumm ar verb *ober*)

ober

AR RAKVERB

Rakverbou lehiou

Rakverbou goulennata

Ragverbou amresiz

Ragverbou diskoueza

Ragverbou staga

Ragverbou lehia

Ragverbou amzer

Bremañ, Dremened, Amzer da zond

Er memez amzer, En a-raog, Da houde

Padelez. Aliez

Ragverb "*perag*"
Ragverbou doare
Ragverbou urz
Ragverbou kementad
Ragverbou displega
Goulenn
Asur
Naha
Doueti. Gwirheñvel

AN ARAOGENNOU

Araogennou gand *di*
Araogennou kevrenneg
Lavarennou heb araogennou
An araogennou gand eur ragono gour

AR STAGELLOU

Ar re a verk an unaniez
Ar re verk daou dra disheñvel
Ar re a verk daou dra kontrol
An hini a verk eun abeg
Ar re a verk ez eo echu
An is-stagellou
Stagellou abeg
Stagellou dibenn
Stagellou da heul
Stagellou aotreüz
Stagellou divizoud
Stagellou dibad
Stagell diouz re all

AN ESTLAMMA

AN EREADUREZ

ERREADUREZ AR GER-MELL

Ar ger-mell striz
Ar ger-mell amstriz
Ar ger-mell lodenneg

ERREADUREZ AN ANO-KADARN

Anoiou-gwan hag anoiou-gwan verb implijet evel pa vefent anoiou-kadarn
Dirag an anoiou-tud
Eun ano-kadarn renadenn eun ano-kadarn
Heb araogenn pe gand *da, euz*
Gand *da, euz, deuz, dimeuz*
Gand *euz, euz a*
Araogennou all
An ano-verb evel renadenn

EREADUREZ AN ANOIOU-GWAN

Kemmaduriou en ano-gwan

Peleh e vez lakaet an ano-gwan ?

An anoiou-gwan dirag an ano-kadarn, doare kevrenneg

Gand *a*

Renadenn an ano-gwan

An derez uhellouh

An derez keverata

An derez-uhella

AN ANOIOU-GWAN NIVER

An niverou pegementi

EREADUREZ AR RAGANOIOU

Ar raganoiou-gour

An anoiou-gwan hag ar raganoiou-perhenna

An anoiou-gwan hag an anoiou-diskoueza

Anoiou-gwan ha raganoiou goulennata

Ar raganoiou-staga

Raganoiou-staga amstriz

Anoiou-gwan ha raganoiou amstriz

Ar gour amresiz er verbou

EREADUREZ AR VERB

Ar verb hag e rener

Displegadur ar verb, gand ma ne vo ket lakaet ar rener dirag ar verb

Ar rener goude ar verb

Ar rannouigou verb

Ne vez ket greet gand ar rannouigou-verb

Ar verb *beañ* (*beza*)

Implij *zo*

Implij *eus*

geus

Implij *eo*

Implij *emañ* (*ema*), *emaint*

An doare-disklêria

An amzer-vremañ

Daoust ma

An amzer-da-zond

Ra ; Da

An doare-divizoud

Ar pezh a hell beza : *-fen...* ; ar pezh na hell ket beza : *-jen...*

oen (euz ar verb *beañ* (*beza*) + ano-gwan verb

Arru oah ? (Erru 'oah ?)

Implij an ano-verb

Stummou goulennata hag estlamma

An ano-verb gand eun araogenn

en eur, *'n eur*, *o* dirag an ano-verb

RENADENNOU AR VERB

Ar renadenn eeun
Ar renadenn dieeun
Renadennoù divizoud
Al leh
An amzer
An doare, an abeg, eur benveg, ar perag, an darn
Kementad (muzulia, pellder). Talvoudegez

EREADUREZ AR RAGVERB

Pegementad
Ragverbou doarea
Ragverbou “ya“
Ragverbou naha
Ragverbou goulennata

EREADUREZ AN ARAOGENNOU

Doareou-lavar

EREADUREZ AR STAGELLOU

EREADUREZ AL LAVARENNOU

Poueza war eur ger en eur frazenn asant
Frazennoù naha
Frazennoù goulennata
Frazennoù estlamma

IMPLIJ DOAREOU AR VERBOU

Implij an doare divizoud
An doare-gourhemen
Implij an amzer-da-zond
Doare heta

EREADUREZ AN IZ-LAVARENNOU

Ar goulennata dieeun
Ar goulennata eeun
Izlavarennoù abeg
Izlavarennoù pal eun dra
Izlavarennoù hed-ha-hed
Izlavarennoù aotreenn
Lavarennoù gand eur ster divizoud
Lavarennoù amzer
Lavarennoù keñveria
Izlavarennoù suj

DISTAGADUR

Bogalennou berr pe hir

| Berr | Hir |
|---------------|----------------|
| <i>dall</i> | <i>tal</i> |
| | <i>furraad</i> |
| <i>sell</i> | <i>êl</i> |
| <i>intañv</i> | <i>dir</i> |
| <i>koll</i> | <i>kaol</i> |
| <i>dastum</i> | <i>druz</i> |
| <i>treud</i> | <i>meud</i> |
| <i>toull</i> | <i>soul</i> |

Ar vogalenn “é“

(bet skrivet “*e*“ gand an darn-vrasa euz an dud).

E dibenn ar gerioù : *mare*.

E-barz ar gerioù unsilabenneg ha ne vezont ket liammet pe gand ar ger a deu en-raog pe da houde : *bed* (*béd*).

Ar gerioù a echu gand *-ez* e Leoneg (hag er yez evel ma vez skrivet bremañ), a zo en *é* e Tregerieg : *karantez*, *feiz*.

Ar vogalenn “è“

(bet skrivet “*e*“ gand an darn-vrasa euz an dud).

An *è*-ze a vez implijet dirag diou gensonenn : *penn* ; *nerz* ; gwechou ‘zo dirag eur gensonenn nemetken : *devi*.

Ar vogalenn “e“

(heñvel ouz hini ar galleg e-barz ar ger “*je*“)

En ano-gwan-verb : *karet*.

Er stumm *-et* e Tregerieg, a zo *-it* e Leoneg (ha skrivet *-it* gand an darn vrasa euz an dud) : *karet* (= *karit*).

E-barz : *ket*, *n’eus ket* ; *en*, *er*, *el* ; *ne*.

E silabenn diweza eur ger pa’z eus eun *e* gand eur gensonenn war-lerh : *moereb* ; *paotred* ; *haleg* ; *brezel* ; *gwaremm* ; *bosenn* ; *amzer* ; *kernez*.

Distagadur an “o“

| “o“ serr | “o“ hanter-zerr | “o“ digor | “o“ hanter-digor |
|-------------|-----------------|--------------|------------------|
| <i>kole</i> | <i>lorh</i> | <i>koll</i> | <i>kaol</i> |
| <i>skod</i> | <i>roh</i> | <i>tost</i> | <i>taol</i> |
| <i>mor</i> | | <i>eskob</i> | <i>paotr</i> |
| <i>koz</i> | | | |

Eveziadenn : *ao* a vez distaget *o* e Tregerieg.

Ar vogalennou-fri

(gand an oll skrivagnerien e vez greet bremañ gand “*añ*“, friet, ha gand “*an*“ hanter-friet).

| | |
|-------------------|----------------------------|
| “ <i>añ</i> “ fri | “ <i>an</i> “ hanter-friet |
|-------------------|----------------------------|

| | |
|---|--|
| <i>anezañ ; evitañ ; goañv ; hañv ; klañv ; skañv ; Frañsez ; dañs ; noblañs.</i> | <i>kargan.</i> Pa vez heuliet gand “ <i>d</i> ” pe “ <i>t</i> ” : <i>Sant ; Landreger</i> . Hag e-barz geriou unsilabenneg ‘zo : <i>koan ; moan ; poan ; tan.</i> Ma vez berr ar ger unsilabenneg e vez lakaet “ <i>nn</i> ” : <i>lann.</i> |
|---|--|

“*am*”, dirag “*p*” pe “*b*” a vez hanter-friet : *ambroug* ; pa vez berr e lakaer “*mm*” : *kamm.*

“*eñ*” a zo brezoneg rik :

eñ ; deñved ; neñv.

Friet e vez “*in*” e geriou ‘zo :

priñs ; e karin ; din ; ouzin ; int.

Gand tud ‘zo e vez lavaret : *dign, ouzign ; ignet.*

“*on*” a zo friet pe hanter-friet

| | |
|---------------------------|---|
| “ <i>on</i> ” friet | “ <i>on</i> ” hanter-friet,dirag “ <i>d</i> ” ha “ <i>t</i> ”, ha e geriou ‘zo unsilabenneg |
| <i>davedon ; eveldon.</i> | <i>spont ; son ; don.</i> |

. Ma vez berr e vez lakaet “*nn*” : *sonn ; bonn.*

“*un*” n’eo ket friet, nemed er ger “*puñs*”

| | |
|--------------------|---------------------|
| Leoneg | Tregerieg |
| <i>en em hever</i> | <i>en em heñver</i> |
| <i>kregi</i> | <i>kregiñ</i> |
| <i>ar brasa</i> | <i>ar brasañ</i> |
| <i>karga</i> | <i>kargañ</i> |
| <i>ema</i> | <i>emañ</i> |
| <i>an den-ma</i> | <i>an den-mañ</i> |

Leoneg ha Tregerieg

| Leoneg | Tregerieg | Skrivet bremañ |
|-----------------------------|------------|------------------------------------|
| <i>ea :</i> | <i>ê</i> | <i>ê : flêr ; lêz</i> |
| <i>ao</i> | <i>ô</i> | <i>kaol</i> |
| <i>e</i> | <i>i</i> | <i>ger</i> |
| <i>ea</i> | <i>e</i> | <i>beh</i> |
| <i>ou</i> | <i>o</i> | <i>brezoneg ; goulou</i> |
| <i>oun</i> | <i>oun</i> | <i>lonka</i> |
| <i>u, goude k, g, c’h</i> | <i>w</i> | <i>gwenn</i> |
| <i>v</i> | <i>w</i> | <i>re wenn</i> |
| <i>f</i> | <i>v</i> | <i>fur</i> |
| <i>s, er penn kenta</i> | <i>z</i> | <i>seh (zeh goude ar ger-mell)</i> |
| <i>ez, e fin geriou ‘zo</i> | <i>é</i> | <i>karantez</i> |

| | | |
|----------------------------------|----------------|-------------------------------|
| z, e fin ar ger <i>bloaz</i> | bla | <i>bloaz</i> |
| z, e- kreiz eur ger | mond a ra kuit | <i>dezi ; Roazon ; bazad.</i> |
| <i>tr</i> , e dibenn eur ger | mond a ra kuit | <i>paotr</i> |
| <i>v</i> , goude “ <i>daou</i> ” | mond a ra kuit | <i>daou vloaz</i> |
| <i>a</i> , e fin ar geriou | <i>añ</i> | “gweled uheloh” |

Distagadur GW

ar wreg a vez distaget **ar roeg** ; *gwrazez*, a vez distaget **grage**. E Leon hag e Kerne e vez distaget : *greg*, *vreg*, *gragez*.

Pouez-mouez geriou ‘zo

Pouezet e vez war ar zilabenn diweza :

pesort ? bennag, ebed.

ganin, ganit, ganimp (ganim), ganah (ganeoh).

petra ? eben.

emei (eme(z)i), emê (emeze, emezo).

peleh ? nebleh, a-raog, e-barz, dindan, a-dreñv, war-lerh.

pegoulz ? pegeid ? fete (feteiz), fenoz, gwejall (gwechall), arhoaz, diagent, kenkent (kerkent), abred, dioustu, raktal, bremazon, emberr, aboe (abaoe), dalhmad, ato (atao).

perag ?

penaoz ? ervad, a-hend-all, kenkoulz, evel.

a-awalh, nemeur (goude eun nahadenn), ouspenn, marvad (moarvad), emichañs, war-dro.

etre, evid, paneved, nemed, e-barz, e-pad.

zoken, avad, vise, ‘velkent, eta.

nebon ! (nebaon !)

E Bro-Oelo

Greet e vez evel ma oa bet lavaret uheloh e Bro-Dreger, hag e Goelo, tro-dro da Bempoull.

E-kichenn al Leñv ha Plouha, n’ema ket bepred ar pouez-mouez war an eil silabenn diweza : gwechou ‘zo e vez lakaet ar pouez-mouez war ar zilabenn diweza : *itron, ledan*.

Er geriou teir silabenn e vez lakaet aliez ar pouez-mouez war ar zilabenn genta : *brezoneg, Larodeg, skubelenn*.

Er ger *itronezed* e chom ar pouez-mouez war *tron*.

Ma’z eus teir silabenn, an hini genta o veza pouez-moueziet, e vo lakaet eun eil pouez-mouez war ar bederved silabenn : *Larodegiz, skubelenaou (skubellennou)*, (ar pouez-mouez o veza war eun dro war ar zilabenn genta ha war ar bederved).

pedenn : war *pe* ema ar pouez-mouez ; *pedenaou (pedennou)* : chom a ra ar pouez-mouez war *pe*, mez e vez greet war *naou* ivez.

pedenno, e tregerieg a vo pouez-moueziet war *den* ; *kanelaou (kanellou)* war *ka* ha war *laou*.

kelenn : *me a gelenne*, amzer dremenet e tregerieg, *me a gelene*, gand daou bouez-mouez, e Goelo.

Marteze e teu an doare distaga-ze deuz m’ema ar Goelo-ze tost d’ar vro Hallo.

E-tro Bempoull ema kalz tostoh distagadur ar brezoneg diouz hini an tregerieg : *ledan, skubelen (skubellenn)* a vo pouez-moueziet war ar zilabenn diweza.

Trohet e vez ar geriou er Goelo tost d’ar vro-Hallo : *chapeled* a deu da veza *chapled* ; *gousperou, gouspraou* ; *kovesaad, kosad* (gand ar pouez-mouez war *ko*) ; *avallo, alaou* ; *buhon (buan) bion ; bihan, bian*).

Al liester tregerieg en **-o** a deu da veza **-aou**. E Pempoull ema al liesteriou-ze e **-ou** evel e leoneg. Med e vo pouez-moueziet **pedenou** (**pedennou**) war **pe**, hag eun eil pouez-mouez war **nou**.

AR HEMMADURIOU

| | | | | | | | |
|----------|----------|----------|----------|----------|----------|----------|----------|
| | K | P | T | G | B | D | M |
| gwannaet | <i>G</i> | <i>B</i> | <i>D</i> | <i>H</i> | <i>V</i> | <i>Z</i> | <i>V</i> |
| kreñvaet | | | | <i>K</i> | <i>P</i> | <i>T</i> | |
| friet | <i>H</i> | <i>F</i> | <i>Z</i> | | | | |

Notennoù : Le **H** a zeu euz **G** a zo doush eged an hini a zeu deuz **K**.

“**gw**“ (*gwad*- a zeu da veza *da wad* ; *gwreg da wreg* ; *gouiziegez da ouiziegez*.

E-barz gerioù ‘zo, e teu ar “**g**“ da vez “**y**“ : *geot, yeot* ; *genver, yenver*.

E Tregerieg ne vez ket greet bepred ar hemmadur **D/Z** : *douar, da zouar, da douar*.

F a vez distaget **V** aliez, hag **S** gand eur vogalenn war-lerh, **Z** : *sant, ar zant*.

Ar hemmadurioù dre fri

| | | |
|----------|----------|----------|
| K | T | P |
| <i>H</i> | <i>Z</i> | <i>F</i> |

Greet e vezont goude

ma : ano-gwan perhenna, ragano gour.

am : ano-gwan perhenna, ragano gour.

em : ano-gwan perhenna, ragano gour.

he : ano-gwan perhenna (pa vez perhennet an dra gand eur plah) ; ragano gour gwregel.

on : ano-gwan perhenna, pe ragano gour.

o : ano-gwan-perhenna pe ragano gour.

| | | |
|---|---|---|
| <i>kalon</i> : <i>ma halon</i> ; <i>em halon</i> ; <i>on halon</i> ; <i>he halon</i> (<i>dezi</i>) : <i>o halon</i> . | <i>tad</i> : <i>on zad</i> (pe : <i>on tad</i>). | <i>penn</i> : <i>he fenn dezi</i> <i>prenañ</i> : <i>eñ am frenas</i> ; <i>hi o frenas</i> ; <i>eñ on frenas</i> . <i>penn</i> : <i>on penn</i> , pe : <i>on fenn</i> |
| Goude ar gerioù-mell <i>ar</i> hag <i>eur</i> , pa vez gourel an ano en unander ; ha pa vez liez an ano, hag eñ gwregel. <i>kalve'</i> : <i>ar halve'</i> <i>kog</i> : <i>ar hog</i> . <i>kigi</i> : <i>ar higi</i> . <i>kroaz</i> : <i>ar hroaziou</i> . <i>kiez</i> : <i>ar hiezed</i> . <i>kazetenn</i> : <i>ar hazetennou</i> . | | |

S a vez distaget **Z** : *sah* , *ma zah* , *e zah* (*dezañ*) ; med *he sah* (*dezi*).

Ar hemmadurioù dre wannaad

| | | | | | | | |
|----------|----------|----------|----------|-----------|----------|----------|----------|
| K | P | T | G | GW | B | D | M |
| <i>G</i> | <i>B</i> | <i>D</i> | <i>H</i> | <i>W</i> | <i>V</i> | <i>Z</i> | <i>V</i> |

En anoiou gwregel unan, hag en anoiou tud gourel liez, e vez greet ar hemmaduriou-ze, nemed *D/Z*, goude

ar, eur, eun : geriou-mell ;

er, en : geriou-mell kevrenneg (nemed *D/Z*).

mamm, ar vamm ; *paotr, ar baotred* ; *merh, ar verh* ; *gwe(z)enn, eur we(z)enn* ; *toenn, an doenn* ; *toer, an doerien* ; *keginer, ar geginerien* ; *kambr, er gambr* ; *taol, en daol*.

Anoiou merhed el liester : *ar mammo(u)* ; *ar gwrage(z)* ; *ar merhed*.

Memestra e vez lavaret : *Gallez, ar Hallezed* ; *Gwenedourez (ar Wenedourezed)*¹.

mad : lavaret e vez *ar vad*.

mein : lavaret e vez, gand tud 'zo : *ar vein*.

Ne vez ket ket a gemmaduriou er geriou-mañ :

plah, eur plah ; *ar mêrio(u)* ; *an testo(u)* ; *an tado(u)* ; *ar priejo(u)* ; *an Turked* ; *ar mibien* ; *ar breudeur*².

Gand ar geriou gwan e vez greet memez mod hag evid an anoiou : *an denerrañ* (gwregel unan) ; *eur gaer a iliz* (gwregel unan).

D/Z : ne vez greet jamez goude ar ger-mell : *direnn, an direnn*.

Dor a deu da veza : *an nor*.

Tra ; gourel eo, med e vez greet ar hemmadur evel pa vefe gwregel : *eun dra*.

An anoiou-gwan niver : greet e vez ar hemmadur, pe e vefent gwregel pe hourel : *pevarved, ar bevarved*³.

Da : ano-gwan perhenna : *tok, da dok* ; *da vizied*.

Da : ragano : *ma da wel*.

E : ano-gwan perhenna, pa vez perhennet an dra gand eur paotr : *e dok*.

E : ragano (evid eur paotr) : *me e wel*.

D/Z : ne vez ket ket greet bepred e tregerieg : *da douar, pe da zouar*.

a : araogenn : *poan, eun den a boan*.

a : rannig-verb : *karoud* : *ni a gar Doue*. Greet e vez ar hemmadur memez pa ne vez ket distaget ar rannig : *ni 'gar Doue*.

da : araogenn : *Per* : *me a ro da Ber*.

dre : araogenn : *Gwengamp, dre Wengamp*.

war : *marh, war varh*.

(*war* a zo *ar* : *Argoad, Arvor* – anoiou lehiou).

diwar : *kein, diwar gein ar marh*.

en eur, 'n eur : *kerzed, en eur gerzed*.

na, ne : *komz* : *ne gomzan ket*.

re (adverb) : *braz, re vraz*.

¹ *Gallez, ar Hallezed* ; *Gwenedourez (ar Wenedourezed)* : hervez Leclerc. Bremañ e vez skrivet ar *Gallezed*, ar *Gwenourezed*.

² an *Turked* ; ar *mibien* ; ar *breudeur* : bremañ e vez skrivet : an *Durked* ; ar *vibien* ; ar *vreudeur*.

³ ar *bevarved* : er yez skrivet a-vremañ, ne vez ket greet ar hemmadur-ze.

seul (*sal* e tregerieg) : *mui* : *seul vui*.
pe : (stagell) : *Paol, Per pe Baol*.
pa : *kanan, pa ganan*.
ra, da (geriou het) : *be(z)añ, ra vo meulet Doue !*
pe ? : *koulz, pegoulz ?*
an hini (gwregel) : *braz, an hini vraz*.
ar re : *braz, ar re vraz*.
re : *Benah, re Venah*.
unan (gwregel) : *braz, unan vraz*.
daou, tri, pevar : *paotr, daou baotr*.
 (med e vez lavaret : *kant* : *daou hant, tri hant, pevar hant*).
diou, teir, peder : *plah, teir blah*.
nao : *paotr, nao baotr*.
 (nemed *GW* : *tri gwenneg, pevar gwenneg, nao gwenneg*).
en em, 'n em : *gweled* : *ni en em wel*.
hanter : *poaz, hanter boaz*.
oll : *mado(u)* : *ma oll vado(u)*.
am (ragger) : *kristen* : *amgristen*.
dam, dem (raggeriou) : *tost, damdost*.
di (ragger) : *gaou, dihaou*.
di (skrivet bremañ *de*), ragger : *kas, digas (degas)*.
gour : ragger : *tado(u)* : *gourdado(u)*.
gour : ragger : *treust, gourdreust*.
peur : ragger : *greet, peurhreet*.
gwall : *klañv, gwall glañv*.
neve(z) : *neve(z) hreet*.

Eveziadennoù :

ad (*had* e tregerieg) : gwechou 'zo : *meinañ, hadveina* pe *hadmeinañ*; bepred : *merenn, hadverenn*.
eil : *eil-mamm* pe *eil-vamm* ; *eil-tad* pe *eil-dad* (*eil tad*).
pell : *pell-kar*, pe *pell-gar*.
dindan : *dindan poan* pe *dindan boan, dindan treid* pe *dindan dreid*.

An anoiou pe an anoiou-gwan, goude eur ger, a zo bet kemmet o hensonenn genta goude ar ger-mell :

Mamm, mad, eur vamm vad ; *bugale, bihan, bugale vihan* ; *taol, brao, eun daol vrao* ; *koad, eun daol goad* ; *yalh, butun* : *eur yalh vutun*.

Eveziadennoù : Ne vez ket kemmet an ano-gwan pe an ano goude eun ano bet kemmet ma echu hennez gand *k, p, t* ; greet e vez ar hemmadur pa echu ar ger bet kemmet goude ar ger-mell gand eur vogalenn, pe *l, m, n, r*.

merh, klañv : *ar verh klañv* ; *botez, koad* : *eur votez-koad* ; *penn, poan* : *poan-benn*.

Pa echu an ano gand *d*, ne vez greet dre vraz nemed ar hemmadur *B/V*, ha *M/V* : *medisined, gouieg (gouezeg), ar vedisined gouieg* ; *mad, ar vedisined vad*.

E-barz ar geriou a zo greet gand daou ano, ne vez greet ar hemmadur en eil ano nemed ma vez stag ouz an hini kenta e-keñver e ster : *bran, morvran*.

Med e vez lavaret : *Sul Fask ; laer-vor*.

Goude eur ragano paotr e vez greet ar hemmadur aliez : *Pipi (Per), koz : Pipi goz*.

Med e vo lavaret : *Fañch koz*.

Gand *braz, mad, kaer* e vez greet ar hemmadur dre wannaad, memez goude eun ano gourel : *vikel-vraz ; labour vad ; c'hoari gaer*.

Anoiou-gwan 'zo, unsilabenng anezo, a vez lakaet dirag an ano. Greet e vez ar hemmadur dre wannaad en ano-ze : *gwall, paotr : eur gwall-baotr ; briz, brezoneg : briz vrezoneg ; koz, marh : eur hoz varh ; gwir, bro : gwir vro ; berr, komzo(u) : e berr gomzo(u)*.

Bloaz a deu da veza *vloaz (vla* e tregerieg), goude an oll niveri, ha goude *ped ?* nemed goude *eur, tri, pevar, nao : daou vla*, pe *daou la*, med *tri bla*.

Goude *pemp* e teu da veza *pla : pemp bloaz, pemp pla*.

Bremañ : bete vremañ ; piou, e ti biou ? mad, ober vad.

Kemmaduriou dre greñvaad

| | | |
|----------|----------|----------|
| G | B | D |
| K | P | T |

az, ho : geno(u) : ez keno(u), en az keno(u), ho keno(u).

distagañ : me az tistago ; gweled : me ho kwel.

Eveziadenn : kaledet e vez gwechou 'zo diou gensonenn heul-da-heul e daou her disheñvel : *braz, hent : an hent praz ; gwenneg, pemp : pemp kwenneg ; c'hweh kwenneg, seiz kwenneg, eiz kwenneg, dek kwenneg. Bennoz Doue, Bennoz Toue*.

ho a deu da veza *hoh* dirag eur vogalenn : *hoh iliz ; me hoh ador*. E Goelo e vez lavaret : *hoh loer, hoh nez (neiz)*.

Kemmaduriou mesket

| | | | |
|----------|-----------|------------|----------|
| G | GW | B M | D |
| H | W | V V | T |

o, en ano-gwan-verb : *gweled, o weled ; debri, o tebri ;*

e : rannig verb : *dornañ, arhoaz e tornin ;*

ma : stagell : *gweled, evid ma welo*.

Eveziadenn : *o, e, ma* a deu da veza *oh, eh, ma'h* (ez, *ma'z* e leoneg) dirag eur vogalenn : *eh evan ; eh an ; evel ma'h on*.

AR GER-MELL

an, ger-mell striz, a vez greet gantañ dirag ar vogalennou, an *h* mud, *d*, *t*, *n*.

An amzer ; *an hent* ; *an tad* ; *ar harr* ;

ar, ger-mell striz, a vez greet gantañ dirag ar hensonennou all, *y* (gand eur vogalenn war-lerh),
w. : *ar yar* ; *ar waz*.

al, ger-mell striz, a vez greet gantañ gwechou 'zo dirag *l* : *al levr*.

Eveziadenn : *an*, *ar*, *al* a deu da veza *en*, *er*, *el* pa vezont kemmesket gand an aroagenn *e* : *en tan* ; *er mor* ; *el levr*.

Gand *eun* , *eur*, *eul*, ger-mell amstriz memez mod ha gand ar ger-mell striz : *eun tad*, *eur harr* ; *eur yar* ; *eur waz* ; *eul levr*.

Notenn gand an embanner brezoneg : amañ e skriv Leclerc *eul levr*. Pelloh e skriv *eur loa*.Sañset e vefe lavaret *eur* dirag *l* e tregerieg.

N'eus ger-mell lod ebed e brezoneg : *bara* ; *bleud* ; *pesked* ; *gwin mad*.

Eveziadenn : pa vez heuliet an ano gand eur renadenn, e vez greet gand *euz* heuliet gand ar ger-mell : *Me am-eus debret euz ar bara hoh-eus kavet*.

AN ANO-KADARN.

AR REIZ

Diou reiz a zo e brezoneg : an hini hourel hag an hini wregel.

Gand an dibennou **-ez** hag **enn** e vez merket an alies ar reiz wregel :

| | |
|------------------|--------------------|
| <i>sant</i> | <i>santez</i> |
| <i>niz</i> | <i>nizez</i> |
| <i>bleiz</i> | <i>bleizez</i> |
| <i>kaner</i> | <i>kanerez</i> |
| <i>marhadour</i> | <i>marhadourez</i> |

| | |
|--------------------|-----------------------|
| <i>Ar Pourhied</i> | <i>Ar Bourhiedenn</i> |
| <i>Robig</i> | <i>eur Robigenn</i> |
| <i>krennard</i> | <i>krennardenn</i> |
| <i>du</i> | <i>an duenn</i> |

Gwechou 'zo ez eus anoioù disheñvel evid an diou reiz :

| | |
|--|--|
| <i>breur</i> | <i>c'hoar</i> |
| <i>tad</i> | <i>mamm</i> |
| <i>yontr (econtr)</i> | <i>moereb</i> |
| <i>tonton</i> (ger implijet gand ar vugale). | <i>tintin</i> (ger implijet gand ar vugale). |
| <i>mab</i> | <i>merh</i> |
| <i>paotr</i> | <i>plah</i> |
| <i>mevel</i> | <i>matez</i> |
| <i>Aotro(u)</i> | <i>Itron</i> |
| <i>roue</i> | <i>rouanez</i> |
| <i>paeron</i> | <i>maeron, maeronez</i> |
| <i>marh</i> | <i>kazeg</i> |
| <i>kole, taro</i> | <i>annaouar (ounner e Leon).</i> |
| <i>ejen, ejon</i> | <i>buoh</i> |
| <i>maout</i> | <i>dañvadez</i> |
| <i>bouh</i> | <i>gavr</i> |
| <i>ouh</i> | <i>gwiz</i> |
| <i>kog</i> | <i>yar</i> |

Kalz anevaled o-deus ar memez stumm evid an diou reiz : *eur sparfell* ; *eur preñv* a zo gourel. *bran, eur vran*, a zo gwregel.

merien, ano-stroll, a zo e unander *merienenn, eur verienenn*.

Evid al loened e vez merket ar reiz gwechou 'zo gand *tad, tar* (evid *tarv, taro*) pe *mamm* : *moualh*, gwregel : *eur voualh. Eun tarmoualh*, gourel. *Eur vamm voualh*, gwregel. *eun targaz*, gourel (*eur haz*).

Reiz an anoiou traou

Gourel e vez

an anoiou metal : *houarn* ; *kouevr*.
rannou ar bloaz : *miz* ; *hañv* ; *koareiz* ;
an anoiou menezioù : *Ar Halvar*.

Gwregel e vez

anoiou ar hêriou : *Pariz* ; *An Oriant* ;
an darn-vrasa euz an anoiou broioù : *Breiz*.

Merket e vez aliez ar reiz dre zilabenn genta ar ger, mez ne vez ket gwir bepred :

gourel : *-aj* : *evaj* (med gwregel eo *belegiaj*, *ar velegiaj*).

gourel : an oll heriou en *-adur* : *breinadur* ; *krouadur*. (Med *plijadur* a zo gwregel : *ar blijadur*).

gwregel e vez an anoiou en *-ell* : *kontell* ; *skudell* ; *mantell* ; *kaouidell* ; *troidell* ; *fornigell* ; *dorikell*.

gwregel e vez an anoiou a echu gand :

-enn : unander ar gerioù-stroll : *piz*, *eur bizenn* ; *merien*, *eur verienenn*.

-adenn, a verk eun dra bet greet, pe ar pezh a zeu deuz an dra a oa bet greet : *touadenn* ; *gweladenn* ; *kavadenn* ; *gouziadenn* ; *lahadenn* (*lazedenn*).

-adeg : a verk eun dra a oa bet greet a-stroll : *lahadeg* (*lazedeg*).

-ded, *-ted*, *-der* : a verk an anoiou amresiz : *lealded* ; *pasianted* ; *tommder* ; *douster*.⁴

-egez, *-elez*, *--erez*, *-adurez*, *-idigez* : *goui(z)iegez* ; *madelez* ; *tromplerez* ; *deskadrurez* ; *silvidigez*.

-erez : a verk michourerezed : *kigerez*.

-eg : traou heñvel lakaet asamblez : *kanabeg*.

-e (e tregerieg ; *-ez* e Leon) : *buhe* (*buhez*) ; *gwirione* (*gwirionez*) ; *true* (*truez*).

-ante (e tregerieg ; *-antez* e Leon) : *karante* (*karantez*) ; *paourante* (*paourantez*).

-enti, *-oni*, *-ni* : *meventi* (*mezeventi*) ; *kasoni* ; *kozni*.

-añs, *-eri*, *-iz* (a deu euz ar galleg) : *fiañs* (*fiziañs*) ; *kigeri* ; *frankiz*.

Eveziadennoù :

An anoiou en *-ad*, a verk ar pezh a zo e-barz ; e *-vez*, a verk ar badelez ; hag e *-ig*, a verk ar ger-bihannaad a zalh reiz ar ger orin :

dorn, gourel, *eun dornad* ; *deiz*, gourel, *devez* ; *dornig*.

bag, gwregel : *bagad*, *eur vagad* ; *bagig*, *eur vagig* ; *noz*, *eun novez*.

Ar ger *tra* : gwregel eo goude ar ger-mell : *eun dra* ; hag evid an ano-gwan a deu da houde : *eun dra vad*. Med e vez lavaret : *daou dra*, *tri dra*...

Gerioù all a zo gwregel : *giz*, *karreg*, *kened*.

Gerioù all a zo gourel : *kurun*. (gwregel eo *kurun* e leoneg, ha neuze er yez evel ma vez skrivet bremañ).

⁴ er yez evel ma vez skrivet bremañ e vez gwregel an anoiou e *ed*, ha gourel ar re e *-er*.

LIESTER AN ANOUIOU-KADARN

Lakaet e vez *-o*⁵, *-ed*, *-ien*, e dibenn an ano-kadarn.

Al liesteriou diabarz

Notenn : ar stummoù bet implijet bremañ er yez skrivet a zo bet lakaet goude ar stummoù bet skrivet gand Leclerc.

| Unander | Liester |
|-------------------|--------------------------|
| <i>dant</i> | <i>dent</i> |
| <i>gavr, gaor</i> | <i>gev, geor</i> |
| <i>yar</i> | <i>yer</i> |
| <i>sant</i> | <i>sent</i> |
| <i>korn</i> | <i>kern, kernio(u)</i> |
| <i>houarn</i> | <i>hern, houarnio(u)</i> |
| <i>louarn</i> | <i>lern</i> |

| Unander | Liester |
|------------------------------------|-------------------|
| <i>ea</i> ⁶ , <i>oa</i> | |
| <i>drên</i> | <i>drein</i> |
| <i>mên</i> | <i>mein</i> |
| <i>oan</i> | <i>ein, oaned</i> |
| <i>troad</i> | <i>treid</i> |

Anoioù-kadarn meur a zilabenn enno

a a deu da veza *e*.

| Unander | liester |
|-----------------|--|
| <i>askell</i> | <i>eskill, iskilli</i> |
| <i>azen</i> | <i>ezen, azened</i> |
| <i>kabell</i> | <i>kebell, kabelle(u)</i> |
| <i>kabestr</i> | <i>kebestr</i> |
| <i>karreg</i> | <i>kerreg</i> |
| <i>kastell</i> | <i>kestell, kastello(u)</i> |
| <i>kazeg</i> | <i>kezeg</i> (liester <i>marh</i> ivez). |
| <i>gwastell</i> | <i>gwestell, gwastello(u)</i> . |
| <i>planken</i> | <i>plenken</i> |
| <i>rastell</i> | <i>restell, rastellou</i> |
| <i>skabell</i> | <i>skebell, skabelle(u)</i> . |

o a deu da veza *e* :

| Unander | Liester |
|----------------|---------------------------|
| <i>kordenn</i> | <i>kerden</i> |
| <i>rohell</i> | <i>rehell, rohello(u)</i> |

a hag *o* a deu da veza *e* er memez ger : (hag *añ* a deu da veza *eñ*)

⁵ *-o* : *ou* er yez skrivet bremañ.

⁶ *ea* : skrivet bremañ *ê*.

| | |
|---------------------------|---------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>abostol</i> | <i>ebestel</i> |
| <i>êrouant (aerouant)</i> | <i>erevent</i> |
| <i>alar</i> | <i>eler, alario(u)</i> |
| <i>askorn</i> | <i>eskern</i> |
| <i>bastard</i> | <i>besterd, bastarded</i> |
| <i>dañvad</i> | <i>deñved</i> |
| <i>manah</i> | <i>meneh</i> |
| <i>ozah</i> | <i>eze</i> |

Liesteriou e i

Ne vez ket cheñchet ar vogalenn diabarz.

| | |
|--------------------------|--------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>blei</i> ⁷ | <i>bleidi</i> |
| <i>gwa</i> ⁸ | <i>gwai</i> ⁹ |
| <i>gwerzid</i> | <i>gwerzidi</i> |
| <i>gwiz</i> | <i>gwizi</i> |
| <i>meill</i> | <i>meilli</i> |

Cheñchet e vez ar vogalennou diabarz

a

| | |
|--------------------|----------------|
| Unander | Liester |
| <i>bran</i> | <i>brini</i> |
| <i>bouhal</i> | <i>bouhili</i> |
| <i>karv (karo)</i> | <i>kirvi</i> |
| <i>karr</i> | <i>kirri</i> |
| <i>drask</i> | <i>driski</i> |
| <i>klujar</i> | <i>klujiri</i> |
| <i>garz</i> | <i>girzi</i> |
| <i>gast</i> | <i>gisti</i> |
| <i>houad</i> | <i>houidi</i> |
| <i>levran</i> | <i>levrini</i> |
| <i>marr</i> | <i>mirri</i> |
| <i>moualh</i> | <i>mouilhi</i> |

e

| | |
|------------------------|--------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>kenderv</i> | <i>kendirvi</i> |
| <i>kolven (golvan)</i> | <i>kolvini (golvini)</i> |
| <i>dred</i> | <i>dridi</i> |
| <i>erv (ero)</i> | <i>irvi</i> |
| <i>lestr</i> | <i>listri</i> |

⁷ *blei* : *bleiz*, liester *bleizi*, evel ma vez skrivet bremañ.

⁸ *gwa* : *gwaz*

⁹ *gwai* : *gwazi*

| | |
|---------------|----------------------------|
| <i>mestr</i> | <i>mistri, mestro(u)</i> |
| <i>polez</i> | <i>polizi</i> |
| <i>komper</i> | <i>kompiri (komperien)</i> |

o

| | |
|-------------|-----------------------|
| Unander | Liester |
| <i>kloh</i> | <i>klehi (kleier)</i> |
| <i>krog</i> | <i>krigi</i> |

e hag e

| | |
|----------------|-----------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>brezell</i> | <i>brizilli (brizelli).</i> |
| <i>enez</i> | <i>inzi</i> |
| <i>ezel</i> | <i>izili</i> |
| <i>legestr</i> | <i>ligistri</i> |

Liesteriou en *o, io*¹⁰
après *a, e, i* :

| | |
|--------------|--------------------|
| Unander | Liester |
| <i>bara</i> | <i>barao(u)</i> |
| <i>tra</i> | <i>treo, traou</i> |
| <i>gwele</i> | <i>gweleo(u)</i> |
| <i>fri</i> | <i>frio(u)</i> |

Eveziadenn : pa vez *-ez* e Leon, (*-e* e Treger), e vez lakaet *io* :

| | |
|---|-------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>bla (bloaz)</i> | <i>blaio (bloaziou)</i> |
| <i>skoa (skoaz)</i> | <i>skoao (skoaziou)</i> |
| <i>loa</i> (bet lakaet heñvel ouz ar re all). | <i>loio (loaiou)</i> |
| <i>be (bez)</i> | <i>beio (beziou)</i> |
| <i>de (deiz)</i> | <i>deio (deiziou)</i> |

Goude *k, p, t, g, b, d* :

| | |
|----------------|-----------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>tok</i> | <i>toko (tokou)</i> |
| <i>lamp</i> | <i>lampo (lampou)</i> |
| <i>c'hwist</i> | <i>c'hwisto (c'hwistou)</i> |
| <i>bag</i> | <i>bago (bagou)</i> |
| <i>krib</i> | <i>kribo (kribou)</i> |
| <i>pod</i> | <i>podou (podou)</i> |

Eveziadenn : *d* ha *t* a deu gwechou 'zo da veza *j* ha *ch*. Gweled pelloh.

Goude *s, v, f* e dibenn ar ger, gand ma vefe eur gensonenn *j, ch* dirag :

| | |
|-------------|-----------------------|
| Unander | Liester |
| <i>gras</i> | <i>graso (grasou)</i> |
| <i>neñv</i> | <i>neñvo (neñvou)</i> |

¹⁰ Liesteriou en *o, io* : *ou, iou* e Leon, Kerne-Izel, Goelo braz. E Kerne-Uhel : *aou, iaou*.

| | |
|---------------|---------------------------|
| <i>skilf</i> | <i>skilfo (skilfou)</i> |
| <i>soñj</i> | <i>soñjo (soñjou)</i> |
| <i>rebech</i> | <i>rebecho (rebechou)</i> |

Goude *m, mm, nn, ll, rr, r* e dibenn eur ger, gand eur gensonenn en a-raog :

| | |
|----------------|-----------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>skoulm</i> | <i>skoulmo (skoulmou)</i> |
| <i>tamm</i> | <i>tammo (tammou)</i> |
| <i>penn</i> | <i>penno (pennou)</i> |
| <i>toull</i> | <i>toullou (toullo)</i> |
| <i>fuzuill</i> | <i>fuzuillo (fuzuillou)</i> |
| <i>gopr</i> | <i>gopro (goprrou)</i> |
| <i>barr</i> | <i>barro (barrou)</i> |

Goude *l* ha *n* (bet skrivet *l, n* gand Leclerc, *-ell, -nn* en doare-skriva a-vremañ) :

| | |
|-------------------|------------------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>troidell</i> | <i>troidello (troidellou)</i> |
| <i>fornigell</i> | <i>fornigello (fornigellou)</i> |
| <i>c'hoariell</i> | <i>c'hoariello (c'hoariellou)</i> |
| <i>rohell</i> | <i>rohello (rohellou ; rehell)</i> |

Goude an dibenn *-enn* :

| | |
|--------------------------|-------------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>toenn</i> | <i>toenno (toennou)</i> |
| <i>kavadenn</i> | <i>kavadenno (kavadennou)</i> |
| <i>yeotenn</i> | <i>yeotенno (yeotennou)</i> |
| <i>oferenn (overenn)</i> | <i>oferenno (overennou)</i> |

Liesteriou e *jo, cho*, e-leh *z, d, t* :

| | |
|------------------------|--------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>gwaz</i> (= ster) | <i>gwajo (gwaziou)</i> |
| <i>pouez</i> | <i>pouejo (poueziou)</i> |
| <i>miz</i> | <i>mijo (miziou)</i> |
| <i>roz</i> (= tuchenn) | <i>rojo (roziou)</i> |

d, gand ma vefe dirazañ *a, e, o*, a deu da veza *j* ivez :

| | |
|-------------|-------------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>prad</i> | <i>prajo (prajou, pradou)</i> |
| <i>pred</i> | <i>prejo (prejou, predou)</i> |
| <i>rod</i> | <i>rojo (rojou, rodou)</i> |

t, gand *n* dirazañ, a deu da veza *ch* :

| | |
|-------------|-----------------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>hent</i> | <i>hencho (hentchou, heñchou)</i> |
| <i>pont</i> | <i>poncho (poñtchou)</i> |

Eveziadenn : *boest, boecho (boestou)*.

Memez mod gand ar gerioù a zo o dibenn e *-nt*, *-st*, gand eun *r* da heul, na vez ket distaget :

| Unander | Lierter |
|---------------------------|--|
| <i>montr</i> | <i>moncho (montrou)</i> |
| <i>prenestr (prenest)</i> | <i>prenecho (prenestou, prenesti, prenester)</i> |

-ss e dibenn ar gerioù a deu da veza *cho* :

| Unander | Lierter |
|---------------------|------------------------|
| <i>klass (klas)</i> | <i>klacho (klasou)</i> |
| <i>press (pres)</i> | <i>precho (presou)</i> |

Al liesterioù e *-io*

-io a vez implijet goude *-o* hag *-u* :

| Unander | Lierter |
|------------------------|-------------------------------|
| <i>hano (ano, anv)</i> | <i>hanoio (anoiou, anvou)</i> |
| <i>tro</i> | <i>troio (troiou)</i> |
| <i>ru</i> | <i>ruio (ruiou)</i> |

Eveziadenn : *u* (= *vi*) a deu da veza *uo* (= *viou*).

Goude *c'h* (*h*) hag *f*, gand eur vogalenn dirazo :

| Unander | Lierter |
|--------------------|---------------------------------|
| <i>beh</i> | <i>behio (behiou)</i> |
| <i>boulh</i> | <i>bouhio (boulhiou)</i> |
| <i>kef</i> | <i>kefio (kefiou)</i> |
| <i>kraf (krav)</i> | <i>krafio (kraviou, kreven)</i> |

Goude *l*, *n* e dibenn ar gerioù :

| Unander | Lierter |
|------------------------|--|
| <i>stal</i> | <i>stalio (staliou)</i> |
| <i>brezel</i> | <i>brezelio (brezeliou)</i> |
| <i>sul</i> | <i>sulio (suliou)</i> |
| <i>oferñ (overenn)</i> | <i>oferñio, overenno, (overennou).</i> |
| <i>kêr</i> | <i>kêrio (kêriou)</i> |
| <i>stur</i> | <i>sturio (sturiou)</i> |
| <i>bar (barr)</i> | <i>bario (barrou)</i> |
| <i>bern</i> | <i>bernio (berniou)</i> |

Eveziadennoù : *l* hag *n* a vez distaget *ll* ha *gn* dirag *-io* : *sulio* a vez distaget *suillo* ; *bernio*, *bergno*.

E Treger Izel e vez greet gand *llo* e-leh *lio* : *kontel (kontell)*, *kontello* e-leh *kontelio (kontelliou)*.

Traou disheñvel :

| Unander | Lierter |
|-------------|-----------------------|
| <i>kein</i> | <i>keino (keinou)</i> |
| <i>ivin</i> | <i>ivino (ivinou)</i> |
| <i>lein</i> | <i>leino (leinou)</i> |

| | |
|-----------------------------|--|
| <i>aval</i> | <i>aval</i> (<i>avalou</i>) |
| <i>hual</i> | <i>hual</i> (<i>hualou</i>) |
| <i>douar</i> | <i>douaro</i> (<i>douarou</i>) |
| <i>bannah</i> | <i>bannaho</i> (<i>bannahou</i>) |
| <i>koef</i> | <i>koefo</i> (<i>koefou</i>) |
| <i>banniel</i> | <i>bannielo</i> (<i>banneliou</i>) |
| <i>boul</i> | <i>boulo</i> (<i>boulou</i>) |
| <i>kaier</i> | <i>kahiero</i> (<i>kaierou</i>) |
| <i>davañcher (tavañjer)</i> | <i>davañchero</i> (<i>tavañjerou</i>) |
| <i>mouchouer</i> | <i>mouchouero</i> (<i>mouchouerou</i>) |
| <i>paner</i> | <i>panero</i> (<i>panerou</i>) |
| <i>ober</i> | <i>obero</i> (<i>oberiou</i>) |

Eveziadenn : E gwirionez e vez greet gand *o* pe *io* hervez al lehiou, dreist-oll evid ar re a zo *l* pe *er* o dibenn.

-ad pe *-iad* :

| Unander | Liester | <i>-ad</i> | <i>-iad</i> |
|-------------------------------|--------------------------------------|------------------|------------------------------------|
| <i>skudell</i> | <i>skudello</i> (<i>skudellou</i>) | <i>skudellad</i> | |
| <i>pel</i> (= <i>pezell</i>) | <i>pelio</i> (<i>pezellou</i>) | | <i>pelriad</i> (<i>pezellad</i>) |
| <i>Kernev</i> | | <i>Kernevad</i> | |
| <i>Treger</i> | | | <i>Tregeriad</i> |

O hag *io* pa ya kuit dibenn ar ger en unander :

| Unander | Liester |
|--------------------------------------|---|
| <i>botez</i> | <i>boto</i> (<i>botou</i> , <i>boutou</i>) |
| <i>bragez</i> | <i>brago</i> (<i>bragou</i>) |
| <i>benveg</i> | <i>benvio</i> (<i>benviou</i> , <i>benviji</i>) |
| <i>gwirien</i> (<i>gwirizienn</i>) | <i>gwrio</i> (<i>gwiriziennou</i>) |
| <i>spillenn</i> | <i>spillou</i> (<i>spillennou</i>) |
| <i>treujenn</i> (<i>treuzenn</i>) | <i>treujo</i> (<i>treuzou</i>) |
| <i>gwazienn</i> | <i>gwazio</i> (<i>gwaziou</i> , <i>gwazied</i> , <i>gwaziennou</i>) |

Eveziadenn : al liesteriou en *-ennou* a verk eur re bennag.

O ha *io* evid tud, anevaled...

| Unander | Liester |
|-----------------------------|---|
| <i>kole</i> | <i>koleo</i> (<i>koleou</i>), <i>koleed</i> |
| <i>diaoul</i> | <i>diaoulo</i> (<i>diaoulou</i>) |
| <i>doue</i> | <i>doueo</i> (<i>doueou</i>) |
| <i>loue</i> (<i>leue</i>) | <i>loueo</i> (<i>leueou</i>) |
| <i>mamm</i> | <i>mammou</i> (<i>mammou</i>) |
| <i>maout</i> | <i>maouto</i> (<i>meot</i>) |
| <i>mêr</i> | <i>mêrio</i> (<i>mêriou</i>) |
| <i>mestr</i> | <i>mestro</i> (<i>mestrou</i> , <i>mistri</i>) |
| <i>pab</i> | <i>pabo</i> (<i>pabou</i> , <i>pabed</i> , <i>pibien</i>) |
| <i>pried</i> | <i>priejo</i> (<i>priedou</i> , <i>priejou</i>) |
| <i>tad</i> | <i>tado</i> (<i>tadou</i>) |
| <i>test</i> | <i>testo</i> (<i>testou</i>) |

Liesteriou en *-ed, -ien, -ier*.

Liesteriou en *-ed* :

| | |
|------------------------|----------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>merh</i> | <i>merhed</i> |
| <i>Breton</i> | <i>Bretoned</i> |
| <i>person</i> | <i>personed</i> |
| <i>niz, nizez</i> | <i>nized, nizezed</i> |
| <i>loen</i> | <i>loened</i> |
| <i>koulm</i> | <i>koulmed</i> |
| <i>toñseg (touseg)</i> | <i>toñseged (touseged)</i> |
| <i>pesk</i> | <i>pesked</i> |

Anoioù all a zo e **-ed** o liester :

| | |
|-----------------|--------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>dervenn</i> | <i>dervenned</i> |
| <i>diner</i> | <i>dinered (dinerou)</i> |
| <i>dornerez</i> | <i>dornerezed</i> |

Anoioù 'zo e **-enn** a goll an **-enn-ze** hag a zo o liester e **-ed** :

| | |
|------------------|---|
| Unander | Liester |
| <i>karpenn</i> | <i>karped</i> |
| <i>dluzenn</i> | <i>dluzed</i> |
| <i>gwazienn</i> | <i>gwazied, gwazio(u), gwazienno(u)</i> |
| <i>moudenn</i> | <i>mouded</i> |
| <i>sardinenn</i> | <i>sardined</i> |

Anoioù 'zo a vez lakaet an dibenn-ger **-enn** pe **-ez**, ha goude e vez lakaet **-ed** evid al liester :

| | |
|----------------|----------------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>buoh</i> | <i>buohenned (buohed, saout)</i> |
| <i>kazeg</i> | <i>kezegenned</i> |
| <i>komer</i> | <i>komerezed</i> |
| <i>yar</i> | <i>yarezed (yer)</i> |
| <i>c'hoar</i> | <i>c'hoarezed</i> |
| <i>itron</i> | <i>itronezed</i> |
| <i>annouar</i> | <i>annouarezed</i> |

Lesteriou all :

| | |
|-----------------|------------------|
| Unander | Liester |
| <i>femelenn</i> | <i>femelezed</i> |
| <i>biz</i> | <i>bizied</i> |

| | |
|-------------|----------------|
| Gall | Galloed |
|-------------|----------------|

Liester en **-en** : greet e vez gantañ evid an anoioù-tud (paotred) :

| | |
|--------------------------|--------------------------------|
| Unander | Liester |
| kemener | kemenerien |
| peher | peherien |
| mesaer | mesaerien |
| marhadour | marhadourien |
| devejer (devezer) | devejerien (devezerien) |
| paour | peorien, pevien |

Gand an anoioù-tud en **-eg** :

| | |
|--------------------------|------------------------------|
| Unander | Liester |
| amezeg | amezeien |
| marheg | marheien |
| genoeg (genaoueg) | genoeien (genaoueien) |

Hag ar ger **gwenneg** ivez, a deu da veza **gwenneien** el liester.

Anoioù en **-ez** pe **-iz** :

| | |
|----------------|-------------------------------|
| Unander | Liester |
| kalvez | kilvijen (kilvizien) |
| matez | mitijen (mitizien) |
| lakez | likijen (likizien) |
| Frañsez | Frañsijen (Frañsizien) |
| bourhiz | bourhijen (bourhizien) |

Anioù-gwan bet implijet evel anoioù-kadarn :

| | |
|---------------|------------------|
| Unander | Liester |
| intañv | intañvien |
| sod | sodien |

Anoioù all :

| | |
|----------------|------------------------------|
| Unander | Liester |
| diskibl | diskibien (diskibled) |
| eskob | eskibien |
| mab | mibien |
| mevel | mevelien |
| kristen | kristenien |
| ebeul | ebeulien |
| marmouz | marmouzien |

Lesterioù en **-on** :

| | |
|-------------|---------------|
| Unander | Liester |
| <i>laer</i> | <i>laeron</i> |
| <i>gad</i> | <i>gedon</i> |
| <i>Saoz</i> | <i>Saozon</i> |

Liesteriou en *-ier* hag en *-eier* : al liesteriou-ze a zo en *-o* pe en *-io* ivez, med ez eo brasoh o ster :

| | | |
|----------------|---------------------------------|----------------------------|
| Unander | Liester en <i>-o -io</i> | Liester en <i>i, -eier</i> |
| <i>dour</i> | <i>dourio(u)</i> | <i>doureier</i> |
| <i>park</i> | <i>parko(u)</i> | <i>parkeier</i> |
| <i>kelo</i> | <i>(keloïou)</i> | <i>keleier</i> |
| <i>bizo(u)</i> | | <i>bizeier</i> |
| <i>botez</i> | <i>boto(u)</i> | <i>boteier</i> |
| <i>loer</i> | | <i>lereier (loereier)</i> |
| | <i>al lerou (eur re loerou)</i> | |
| <i>prad</i> | <i>prajo (pradou, prajou)</i> | <i>prajeier (pradeier)</i> |

Liesteriou all en *-eier* :

| | |
|-------------------------------------|------------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>kleze (klevé en Izel-Treger)</i> | <i>klezeier (klevéier)</i> |
| <i>lanneg</i> | <i>lanneier</i> |
| <i>redadeg</i> | <i>redadeier (redadegou)</i> |

Liesteriou en *-eier*, gand ma vefe cheñchet ar vogalennou diabarz (*a* a deu da veza *i* pe *e* ; *o*, *e* ; *aou*, *eu* ; *e i* :

| | |
|----------------|-----------------------------------|
| Unander | Liester |
| <i>baz</i> | <i>bizier, bizeier</i> |
| <i>kaz</i> | <i>kizier</i> |
| <i>garz</i> | <i>girzier</i> |
| <i>falh</i> | <i>filhier, felhier</i> |
| <i>falz</i> | <i>filz hier, felz hier</i> |
| <i>kloh</i> | <i>klehier, klehi, kloho</i> |
| <i>forh</i> | <i>ferhier</i> |
| <i>roh</i> | <i>rehier, (reier)</i> |
| <i>porz</i> | <i>pirzier (porziou, perzier)</i> |
| <i>kraou</i> | <i>krevier, kreüier</i> |
| <i>gaou</i> | <i>gevier, geüier</i> |
| <i>gwalenn</i> | <i>gwalinier, gwalenno(u)</i> |
| <i>kozenn</i> | <i>kozinier</i> |
| <i>pazenn</i> | <i>pazinier (pazенno(u))</i> |

Liesteriou en *-e* (*-ez* e Leon), en *on*, *-iz*, *-idi*

| | |
|---------|---------|
| Unander | Liester |
|---------|---------|

| | |
|---------------------------------------|----------------------------------|
| <i>otro (aotrou)</i> | <i>otrone (aotrounez)</i> |
| <i>bugel</i> | <i>bugale</i> |
| <i>gwreg</i> | <i>gwrage (gwragez)</i> |
| <i>roue</i> | <i>rouane (rouanez)</i> |
| <i>ti</i> | <i>tie (tiez)</i> |
| <i>laer</i> | <i>laeron</i> |
| <i>gad</i> | <i>gedon</i> |
| <i>Saoz</i> | <i>Saozon</i> |
| <i>Kernevad</i> | <i>Kerneviz, Kernevaded</i> |
| <i>Tregeriad</i> | <i>Tregeriz</i> |
| <i>Gwengampad</i> ne vez ket implijet | <i>Gwengampiz</i> |
| <i>Parouzian (parrezian)</i> | <i>parouzianiz (parrezianed)</i> |
| <i>tremeniad</i> | <i>tremenidi</i> |
| <i>diavêziad</i> | <i>diavêzidi</i> |

Liesteriou disheñvel :

| | |
|------------------------------|--|
| Unander | Liester |
| <i>kar</i> | <i>kerent</i> |
| <i>buoh</i> | <i>saout</i> |
| <i>buoh</i> | <i>buohed, buohenned</i> (unan hag unan) |
| <i>kloareg</i> | <i>kloer</i> (dre vraz). |
| <i>kloareg</i> | <i>kloareged</i> (unan hag unan) |
| <i>ki</i> | <i>chas</i> |
| <i>den</i> | <i>tud</i> |
| <i>gwaz</i> | <i>gwersed (gwazed)</i> |
| <i>marh</i> | <i>kezeg</i> |
| <i>marh</i> | <i>marho</i> (strujennou legumachou 'zo) |
| <i>jo (jao)</i> (Kerne-Uhel) | <i>roñsed</i> (unan hag unan) ; <i>kezeg</i> |
| <i>porhell</i> | <i>moh ; porhelled</i> (unan hag unan) |

An unanderenn

| | | |
|---------------|------------------|----------------------|
| A-stroll | Unanderenn | Unan hag unan |
| <i>ed</i> | <i>edenn</i> | <i>edenno(u)</i> |
| <i>stered</i> | <i>steredenn</i> | <i>steredenno(u)</i> |

Eveziadenn : Evid ar gwez-frouez e verk an dibenn **-enno(u)** ken ar wezenn ken ar frouez : **eur gistinenn** a zo ken ar wezenn, ken ar frouezenn. ; **kistineno(u)** a zo ken **kistinennou** hag **ar gwez-kistin**, ar re-ze unan hag unan. Evid nompas kemmeska an daou e vez lavaret : **eur we(z)enn gistin**, ha **gwe(z)enno(u) kistin**, unan hag unan.

Memez mod e vo lavaret : **gwe(z) fo (faou)**, **gwe(z) derv (dero)**, **foenno (faouennou)**, **dervenno(u)**.

Implijet e vez ivez al liester en **-ed** evid ar gwez : **dervenn, dervenned**.

Eveziadenn : Implijet e vez **-enno(u)** evid merka unan hag unan : **gir (ger)**, **giriennou (geriennou)** ; **hini, hiniennou(u)**.

Gerioù 'zo n'int ket anoïou-stroll. Neuze e vez greet gand al liester en **-o(u)** :

| Ano-stroll | Lierster | Lierster unan hag unan |
|-----------------|------------------|---|
| <i>spillenn</i> | <i>spillo(u)</i> | <i>spillenno(u)</i> |
| <i>bleuñ</i> | <i>bleuñiou</i> | <i>bleuñenno(u)</i> (<i>bleuniennou</i>) |

Evezidenn : Evid al loened e vez greet ivez gand *loen* ha *penn* :

| Lierster | Unander |
|--------------|-------------------------|
| <i>moh</i> | <i>penn-moh (pemoh)</i> |
| <i>kezeg</i> | <i>eul loen kezeg</i> |

Daou her evid al liester

| Unander | Lierster dre vraz | Lierster all |
|--------------|-------------------|-------------------|
| <i>den</i> | <i>tud</i> | <i>tudo(u)</i> |
| <i>bugel</i> | <i>bugale</i> | <i>bugaleo(u)</i> |

An niver-daou

| Unander | Niver-daou |
|----------------|-----------------------------------|
| <i>breh</i> | <i>an divreh (diouvreh)</i> |
| <i>skoa(z)</i> | <i>an diskoa (diouскоaz)</i> |
| <i>lagad</i> | <i>an daoulagad</i> |
| <i>skouarn</i> | <i>an diskouarn (diouскоuarn)</i> |
| <i>dorn</i> | <i>an daouarn</i> |
| <i>glin</i> | <i>an daoulin</i> |
| <i>garr</i> | <i>an diouharr</i> |

Eveziadenn :

Pa n'eus ket kaoz deuz tud, e vez greet gand al liester en **-io** :

brehio(u) eur hravaz ; skouarnio(u) eur gaoter.

Evid eul loen e vo lavaret memez mod : *skaio(u) eun dañvad.*

Ar gerioù-bihannaad

Merket e vez gand an dibenn-ger **-ig** :

| Ger orin | Ger bet bihannaet |
|------------------|-----------------------|
| <i>paotr</i> | <i>paotrig</i> |
| <i>min (mên)</i> | <i>minig, (mênig)</i> |
| <i>bugel</i> | <i>bugelig</i> |
| <i>ti</i> | <i>tiig</i> |
| <i>oan</i> | <i>oanig</i> |

Lierster ar gerioù bet bihannaet

Greet e vez gand **-igo(u)** a vez staget ouz liester ar ger dre vraz, gwechou ‘zo ouz an unander.

| | |
|----------------|------------------------------------|
| Ger orin | Liester ar ger bet bihannaet |
| paotred | paotredigo(u) |
| mein | meinigo(u) |
| bugale | bugaligo(u) |
| ti | tiigo (tiigou) |
| oan | oanigo, oanedigo, (einigou) |

Anoiou-kadarn daou-ha-daou

Gand an ano kenta e vez merket ar reiz hag al liester :

| | |
|------------------|---------------------|
| Unander | Liester |
| barr-avel | barrou-avel |
| poull-tro | poull(u)-tro |
| ki-dour | chas-dour |

Eveziadenn : Reou ‘zo a vez skrivet en eur ger. Neuze e vez merket al liester en dibenn :

| | |
|------------------|-----------------------|
| Unander | liester |
| morvran | morvrini |
| pothouarn | pothouarnio(u) |

An ano-kadarn, eet kuit, ha lakaet en e leh ar ragano **hini** en unander, **re** el liester, heuliet gand eun ano-gwan

| | |
|--|-------------------|
| hini | re |
| an hini braz (gourel). An hini vraz (gwregel). | ar re vraz |
| an hini mad (gourel). An hini vad (gwregel). | ar re vad |

Eveziadenn :

re dirag eun ano-kadarn a dalv aliez evid “daou dra heñvel“ :

| | | |
|--------------|--------------------------|-----------------|
| Unander | daou-ha-daou | liester |
| loer | eur re loero(u) | loereier |
| botez | eur re vo(u)to(u) | boteier |

AN TRAOU DIFETIZ

Greet e vezont gand eun ano-kadarn fetiz :

Me glev ar zonerien (e-leh *Me glev ar muzik*).

Komzo(u) an dud dife (*difeiz*) (e-leh *an difeizded*).

a-vihanig e-leh *ar vugaleaj*.

Pourve(z)et ê (eo), e-leh *pourvez en-deus*.

Ne (Na) hoantaet (hoantait) ket re, e-leh *gorrekait ar c'hoant*.

Evid an dra-ze e vefomp (vezim) kasti(z)et stard, e-leh *dedenna kastizou*).

Evid difenn ar gêr, e-leh *divenn*, ano-kadarn).

Spered an den a zigor 'n eur studiañ ha 'n eur zoñjal ervad, e-leh *ar brederiadenn, ar studiadenn*).

Ar pezh a fell dim ober, e-leh *or pal*.

An hini a bleustr re an dud a zinerz e galon, e-leh, e galleg, hervez Leclerc : *un commerce trop assidu avec la créature affaiblit l'âme*.

Pa govesaer eur pehed, eh ê (eo) red lared petra ê (eo), perag eh ê (eo) bet greet ha pegeid an-deus (en-deus) padet, e-leh, e galleg, hervez Leclerc : *Il faut, dans l'accusation d'un péché, en dire la nature, le motif, la durée*.

An dra-ze a ziskoue(z) eh ê (eo) eun den fur, e-leh *e furnez*.

Eñ a lare ne oa Doue ebed, e-leh *Eñ a nahe bezañs Doue*.

E-pad ma oad o selaou an testo(u), e-leh *abadenn-selaou an testou*.

Pa dosta an neve(z)-amzer, e-leh *tostadur an nevez-amzer*.

Ne gavfet (Ne gavot) ket ar peoh mar ne bleget (blegit) ket da zenti, e-leh *eur zujidigez uvel*.

AN ANOIOU-GWAN

Ne cheñch ket an anoiu-gwan hervez ar reiz hag al liester. N'eus nemed kemmaduriou a vo gwelet pelloh.

An derez uhelloh hag an derez uhella

Greet e vez an derez-uhelloh der staga **-oh** ouz an ano-gwan (ouz an anoiou-gwan-verb implijet evel anoiou-gwan, hag ouz adverbou), hag an derez uhella dre staga **añ (a)** :

| Ger orin | derez uhelloh | derez uhella |
|--------------------|--------------------------|--------------------------------|
| <i>braz</i> | <i>brasoh</i> | <i>ar brasañ (ar brasa)</i> |
| <i>karet</i> | <i>karetoh</i> | <i>ar haretañ (ar hareta)</i> |
| <i>buon (buan)</i> | <i>buonnoh (buannoh)</i> | <i>ar buhonnañ (ar buanna)</i> |

Notenn : pa'z echu an ano-gwan gand eur gensonenn vlod e vez kaledet, (hag *l,n, m* a vez cheñchet e *ll, nn, mm*) ; hag *o* e *v* :

| Ger orin | Derez uhelloh | Derez uhella |
|------------------|----------------------|--------------------------------------|
| <i>noaz</i> | <i>noasoh</i> | <i>an noasañ (an noasa)</i> |
| <i>koz</i> | <i>kosoh</i> | <i>ar hosañ (ar hosa)</i> |
| <i>gleb</i> | <i>glepoh</i> | <i>ar glepañ (ar glepa)</i> |
| <i>brao</i> | <i>bravoh</i> | <i>ar bravañ (ar brava)</i> |
| <i>teo, teñv</i> | <i>tevoh, teñvoh</i> | <i>an tevañ, an teñvañ (an teva)</i> |
| <i>garo</i> | <i>garvoh</i> | <i>ar garvañ (ar garva)</i> |

Dereziou uhelloh hag uhella direiz

| Ger orin | Derez uhelloh | Derez uhella |
|---------------|----------------------------|--|
| <i>mad</i> | <i>gwell, gwelloh</i> | <i>ar gwellañ (ar gwella)</i> |
| <i>fall</i> | <i>gwall, gwaz, gwasoh</i> | <i>ar gwasañ, ar fallañ (ar gwasa, ar falla)</i> |
| <i>meur a</i> | <i>mui a, muioh a</i> | <i>ar muiañ a (ar muia a)</i> |

Dereziou uhella implijet drezo o-unan

| Ger orin | An derez uhella |
|--|-------------------------|
| <i>kent</i> | <i>kentañ (kenta)</i> |
| <i>nez</i> | <i>nesañ (nesa)</i> |
| <i>diwez</i> | <i>diwezañ (diweza)</i> |
| <i>hen</i> (ne vez ket implijet ken ; kavet e vez aliez en anoiou-lehiou). | <i>henañ (hena).</i> |

An derez kement-ha-kement

Lakaet e vez *ken* dirag an ano-gwan, an anao-gwan-verb pe an adverb, hag *ha* dirag ar renadenn :

Per a zo ken kreñv ha Paol.

An derez izel

Greet e vez gand *nebeutoh, an nebeutañ (an nebeuta)*.
Me a gan nebeutoh bremañ.

Eveziadenn :

E-leh *moins* e galleg :

E brezoneg e vez greet gand an derez kement-ha-kement gand an naha :

Per n'eo ket ken kreñv ha Paol : Per a zo gwannoh eged Paol.

E-leh *le moins* e galleg :

Per a zo an hini gwannañ.

An anoïou-gwan-verb :

Lavaret e vo *muioh karet* kentoh eged *karetoh* hag *ar muiañ karet* eged *ar haretañ*.

An derez klok

Greet e vez gand ar geriou *braz, meurbed, mad, gwall, kaer* : *klañv-braz, gwall-glañv*.

Eveziadenn : Lakaet e vez **gwall** dirag an ano-gwan ; ar re all goude.

Tu a zo ivez da ober diou wech gand an ano-gwan : **tomm-tomm**.

Gwechou 'zo e vez greet gand eur ger ispisial hervez an ano-gwan :

| | |
|---------------|--|
| Ano-gwan | Derez klok |
| <i>gwenn</i> | <i>gwenn-kann ; gwenn-sign (gwenn-sin)</i> |
| <i>me(z)o</i> | <i>me(z)o-dall</i> |
| <i>du</i> | <i>du-pod</i> |
| <i>glaz</i> | <i>glaz-dour</i> |
| <i>melen</i> | <i>melen-koar</i> |
| <i>noaz</i> | <i>noaz-pill</i> |
| <i>tomm</i> | <i>tomm-skaot</i> |

Ar bihannaad

Lakaet e evz **-ig** goude an nao-gwan : *braz, brazig*.

Implijet gand an derez uheloh e talv kement hag *eun tammig* : *brazikoh, eun tammig brazikoh*.

-Implijet gand an derez-uhella e talv kement hag *an hini brasa* : *ar brazikañ (ar brazika), an hini brasa*, med nemed eun tammig

Eveziadenn : *o-daouig = an daou zen ; bremaig = a-benn eun nebeud amzer*.

An estlamma

Gand tud 'zo e vez implijet an dibenn-ger **-ad** : *dous, dousad mouez !*

Eveziadenn : Evel gand an dibennou **-oh, añ (a)**, e vez kaledet ar gensonenn diweza gand **-ad** : *braz, brasad ! koz, kosad !*

AN ANOIOU GWAN NIVER

| | An niverennou pegementi | An nirevennou pedvedel |
|-----|---|--|
| 1 | <i>unan ; eur, eun</i> (ger-mell amresiz) | <i>kentañ, (kenta)</i> . Gand an niverennou kevrenneg e vez greet gand <i>unanved</i> |
| 2 | <i>daou</i> (gourel) ; <i>diou, diw</i> (<i>diou, div</i>), gwregel | <i>daouved</i> , gourel ; <i>diwed (dived)</i> gwregel. Greet e vez gand <i>eilved</i> gand an niverennou kevrenneg. |
| 3 | <i>tri</i> ; gourel ; <i>teir</i> , gwregel. | <i>trived</i> , gourel, <i>teirved, an deirved</i> gwregel. |
| 4 | <i>pevar</i> , gourel ; <i>peder</i> , gwregel. | <i>pevared (pevarved)</i> , gourel ; <i>pederved, ar bederved</i> , gwregel. |
| 5 | <i>pemp</i> | <i>pemved, pemped (pempved)</i> |
| 11 | <i>uneg (unneg)</i> | <i>unegved (unnegved)</i> |
| 12 | <i>trizeg</i> | <i>trizegved</i> |
| 14 | <i>pevarzeg, parzeg (pevarzeg)</i> | <i>pevarzegved, parzegved (pevarzegved)</i> . |
| 15 | <i>pemzeg</i> | <i>pemzegved</i> |
| 16 | <i>c'hwezeg</i> | <i>c'hwezegved</i> |
| 17 | <i>seiteg</i> | <i>seitegved</i> |
| 18 | <i>triweh, triwah (triweh)</i> | <i>triwahved (triwehved)</i> |
| 19 | <i>naonteg</i> | <i>naontegved</i> |
| 20 | <i>ugent</i> | <i>ugentved</i> |
| 21 | <i>unan warn-ugent</i> | <i>unanved warn-ugent</i> |
| 22 | <i>daou, diou warn-ugent</i> | <i>eil warn-ugent (daouved, diouved warn-ugent)</i> |
| 30 | <i>tregont</i> | <i>tregontved</i> |
| 31 | <i>unan ha tregont</i> | <i>unanved ha tregont</i> |
| 32 | <i>daou, diou ha tregont</i> | <i>eil ha tregont (daouved, dived ha tregont)</i> |
| 72 | <i>daouzeg ha tri-ugent</i> | <i>daouzegved ha tri-ugent</i> |
| 80 | <i>pevar-ugent</i> | <i>pevar-ugentved</i> |
| 90 | <i>deg ha pevar-ugent</i> | <i>degved ha pevar-ugent</i> |
| 100 | <i>kant</i> | <i>kantved</i> |
| 101 | <i>unan ha kant</i> | <i>unanved ha kant</i> |
| 101 | <i>unan ha kant</i> | <i>unanved ha kant</i> |
| 110 | <i>deg ha kant, (kant deg)</i> | <i>degved ha kant, (kant degved)</i> |
| 115 | <i>(kant pemzeg)</i> | <i>pemzegved ha kant ; pemzeged ha kant</i> |
| 120 | <i>c'hweh-ugent (kant ugent)</i> | <i>c'hweh-ugentved (kant ugentved)</i> |
| 130 | <i>deg ha c'hweh-ugent (kant tregont)</i> | <i>degved ha c'hweh-ugent (kant tregontved)</i> |
| 135 | <i>pemzeg ha c'hweh-ugent ; kant pemp ha tregont</i> | |
| 140 | <i>seiz-ugent</i> | <i>seiz-ugentved</i> |
| 150 | <i>deg ha seiz-ugent (kant hanter-kant)</i> | <i>degved ha seiz-ugent (kantved ha seiz-ugent)</i> |
| 160 | <i>eiz-ugent</i> | <i>eiz-ugentved</i> |
| 180 | <i>nao-ugent</i> | <i>nao-ugentved</i> |
| 200 | <i>daou-hant</i> | <i>daou-hantved</i> |
| 235 | | <i>daou-hantved pemp ha tregont</i> |
| 245 | <i>daou-hant pemp ha daou-ugent</i> | |
| 300 | <i>tri-hant</i> | <i>tri-hantved</i> |

| | | |
|-------|--------------------|-----------------------|
| 400 | <i>pevar-hant</i> | <i>pevar-hantved</i> |
| 500 | <i>pemp-kant</i> | <i>pemp-kantved</i> |
| 600 | <i>c'hweh-kant</i> | <i>c'hweh-kantved</i> |
| 900 | <i>nao-hant</i> | <i>nao-hantved</i> |
| 1.000 | <i>mil</i> | <i>milved</i> |
| 1.100 | <i>unneg-kant</i> | <i>unneg kantved</i> |

E-leh unan, dirag eun ano, e reer gand ar ger-mell amstriz ; *eur, eun, eul*.

Unan euz ar hezeg

Eñ en-deus eur mab ha teir verh (teir merh).

An niverou kevrenneg

Staget e vez *-ved* pe *-ed* ouz an niver. Lavaret e vez *kenta(ñ)* hag *eil*.

Niverou liezkementet

Teir chadenn. Pemp gwech kemend all.

Niverou rannet

an hanter, an drederenn, ar hart.

Peotramant e vez greet gand an niverou kevrenneg :
ar bemped, diou lodenn diwar bemp.

Niver ha niver

daou ha daou, peb eil bla (bloaz), pep tri bla (bloaz)

Eur gont war-dro

Lakaet e vez *bennag* war-lerh an niver :
eun ugent bennag, eun hanter-kant bennag.

An niverou en -enn :

eun dousenn, eun degenn, eur bempenn.

AR RAGANOIOU-GOUR

| | | | | |
|-----------------------|---------------|----------------|--------------------|----------------------|
| | renerien | renadennou | gand araogennou | gand araogennou |
| kenta gour unan | <i>me</i> | <i>ma, am</i> | <i>-on</i> | <i>-in</i> |
| eil gour unan | <i>te</i> | <i>da, az</i> | <i>-out</i> | <i>-it</i> |
| trede gour gourel | <i>eñ</i> | <i>e, hen</i> | <i>-añ, -eañ</i> | <i>-i, -ei</i> |
| trede gour gwregel | <i>hi</i> | <i>he, heh</i> | <i>-i, -ei</i> | <i>-i, -ei</i> |
| kenta gour liez | <i>ni</i> | <i>on</i> | <i>-om</i> | <i>-im</i> |
| Eil gour liez | <i>c'hwi</i> | <i>ho, hoh</i> | <i>-oh</i> | <i>-oh, -ah, -eh</i> |
| Trede gour liez | <i>i, int</i> | <i>o</i> | <i>-e</i> | <i>-e</i> |

Ar raganoioù renerien

Me a lavar...

Greet e vez ganto ivez goude *setu, evid* : *setu-me tapet, evid te, ne gani ket.*

Goude eur stagell pa vez goloet ar verb : *Eñ e-neus kavet Per ha me. Piou a glasket (glaskit) ? Te !*

Evid poueza goude eur ragano all, eur verb, an ano-gwan perhenna : *din-me, pa lavaran-me, ma lero-me (loerou).*

hu a vez lakaet gwechou 'zo e plas *c'hwi* pa vez greet gantañ evel-se : *Piou a glasket-hu ? (a glaskit-hu).*

Ar raganoioù renadennou

Lakaet e vezont dirag ar verb. Greet e vez kemmadurioù war o lersh :

Doue am har ; Doue ho kar ; evid da weled ; evid az kweled.

Gand ar verb am-eus

Me am-eus arhant ; Dre m'o-deus arhant ; Aon am-eus.

An araogennou staget

| | | | | | | | |
|-------------|---------------|------------------|-------------------------|--------------------------|-----------------------|---------------------------|--------------------------|
| | gour kenta | eil gour unan | trede gour gourel | trede gour gwregel | kenta gour liez | eil gour liez | trede gour liez |
| <i>da</i> | <i>din</i> | <i>dit</i> | <i>dañ, de(z)añ</i> | <i>dei (dezi)</i> | <i>dim</i> | <i>dah (deoh)</i> | <i>de (dezo)</i> |
| <i>ouz</i> | <i>ouzin</i> | <i>ouzit</i> | <i>outañ</i> | <i>outi</i> | <i>ouzim</i> | <i>ouzoh</i> | <i>oute (outo)</i> |
| <i>gand</i> | <i>ganin</i> | <i>ganit</i> | <i>gantañ</i> | <i>ganti</i> | <i>ganim</i> | <i>ganah (ganeoh)</i> | <i>gante (ganto)</i> |

diouz a vez displeget evel *ouz*, ha *digand* evel *gand*.

E Treger-braz e teu *diouz* da veza : *diwin, diwit, diontañ, dionti, diwimp, diwoh, dionte.*

| | | | | | | | |
|--|---------------|------------------|---------------|---------------|--------------------|------------------|-----------------------|
| | kenta gour | eil gour unan | trede gour | trede gour | gour kenta liez | eil gour liez | trede gour liez |
|--|---------------|------------------|---------------|---------------|--------------------|------------------|-----------------------|

| | | | | | | | |
|---------------|---------------------|-----------------------|--|---------------------------|-----------------------------|--------------------|--------------------------------|
| | | | gourel | gwregel | | | |
| <i>a</i> | <i>anon, ahanon</i> | <i>anout, ahanout</i> | <i>anañ, 'nañ, aneañ, 'neañ (anezañ)</i> | <i>anei, 'nei (anezi)</i> | <i>anom ahanom (ahanom)</i> | <i>anoh ahanoh</i> | <i>aneze, ane, 'ne (anezo)</i> |
| <i>dre</i> | <i>drezon</i> | <i>drezout</i> | <i>drezañ</i> | <i>drezi</i> | <i>drezom</i> | <i>drezoh</i> | <i>dreze (drezo)</i> |
| <i>dindan</i> | <i>dindanon</i> | <i>dindanout</i> | <i>dindanañ</i> | <i>dindani</i> | <i>dindanom</i> | <i>dindanoh</i> | <i>dindane (dindano)</i> |

etre a vez displeget evel *dre*, nemed *etredom (etrezom)*.

war : lakaet e vez *n* goude *war* : *warnon... warnañ, warneañ (warnezañ)*.

en a deu da veza *ennon...*

E Tregerieg e vez lavaret : *eñ a wel ahanon*, e leh *eñ am gwel*.

| | | | | | | | |
|--|----------------|----------------|-------------------|--------------------|-----------------|----------------|------------------------|
| | kenta gour | eil gour unan | trede gour gourel | trede gour gwregel | gour kenta liez | eil gour liez | trede gour liez |
| <i>evel</i> | <i>eveldon</i> | <i>evelout</i> | <i>eveltañ</i> | <i>evelti</i> | <i>eveldom</i> | <i>evelдох</i> | <i>evelte (evelto)</i> |
| <i>evid</i> (goude an derez uheloh (<i>eged</i>)) | <i>evidon</i> | <i>evidout</i> | <i>evitañ</i> | <i>eviti</i> | <i>evidom</i> | <i>evidoh</i> | <i>evite (evito)</i> |

eme : *emeon (emezom), emeout (emezout)*

Eveziadenn : Gand an doare-gourgemenn e heller lakad da houde *-añ (-eñ)*, *-hi*, *e (o)* : *kemeret-hi (kemerit-hi)*.

Lakaet e vez *din...* goude eun nebeud araogennou :

| | |
|-------------------------|---|
| <i>a-dreñ (a-dreñv)</i> | <i>a-dreñ (a-dreñv) din</i> |
| <i>a-raog</i> | <i>a-raog dit</i> |
| <i>a-uz</i> | <i>a-uz dezañ</i> |
| <i>daoust</i> | <i>daoust dezi</i> |
| <i>dreist</i> | <i>daoust dim</i> |
| <i>eneb</i> | <i>eneb dah (deoh)</i> |
| <i>etrezeg, 'trezeg</i> | <i>etrezeg, 'trezeg de (deze, dezo)</i> |
| <i>gouez</i> | <i>gouez dit</i> |
| <i>tost</i> | <i>tost dim</i> |

am, em, az, ez, ho : *en am goude, em goude, en az raog, ez raog, en ho keñver*.

ANOIOU-GWAN PERHENNA

| | | |
|--------------------|----------------------|----------------------------|
| | dirag eun ano-kadarn | goude <i>da</i> (araogenn) |
| gour kenta | <i>ma</i> | <i>d'am</i> |
| eil gour unan | <i>da</i> | <i>d'az</i> |
| trede gour gourel | <i>e</i> | <i>d'e</i> |
| trede gour gwregel | <i>he, heh</i> | <i>d'he, d'heh</i> |
| kenta gour liez | <i>on</i> | <i>d'on</i> |
| eil gour liez | <i>ho, hoh</i> | <i>d'ho</i> |
| trede gour liez | <i>o</i> | <i>d'o</i> |

en a hell dond da veza *em, ez* : *em halon, en em halon, en az kalon, ez kalon*
heh, hoh a vez greet ganto dirag eur vogalenn, ha dirag *l, m, n, r* : *heh iliz, hoh nez (neiz)*.

AR RAGANOIOU PERHENNA

| | Unander | da / e, em, ez | liester | da / e, em, ez |
|--------------------|--------------------------|------------------------------|----------------------|--------------------------|
| gour kenta | <i>ma hini</i> | <i>d'am hini / em hini</i> | <i>ma re</i> | <i>d'am re / em re</i> |
| eil gour unan | <i>da hini</i> | <i>d'az hini / ez hini</i> | <i>da re</i> | <i>d'az re ! ez re</i> |
| trede gour gourel | <i>e hini</i> | <i>d'e hini</i> | <i>e re</i> | <i>d'e re</i> |
| trede gour gwregel | <i>he hini, heh hini</i> | <i>d'he hini, d'heh hini</i> | <i>he re</i> | <i>d'he re</i> |
| kenta gour liez | <i>on hini</i> | <i>d'on hini</i> | <i>on re (or re)</i> | <i>d'on re (d'or re)</i> |
| eil gour liez | <i>ho hini, hoh hini</i> | <i>d'ho hini, d'hoh hini</i> | <i>ho re, hoh re</i> | <i>d'ho re, d'hoh re</i> |
| trede gour liez | <i>o hini</i> | <i>d'o hini</i> | <i>o re</i> | <i>d'o re</i> |

Eveziadenn : evid poueza e heller lakaad ar raganoiou renerien goude an ano-kadarn, *hini, re* : *ma zi-me, da hini-te...*

ANOIOU-GWAN DISKOUENZA

Greet e vezont gand ar ger-mell striz (*ar, al, an*) ha *-mañ, -se, -ze, -hont* lakaet goude an ano : *an den-mañ, an den-ze, an den-hont*.

Gand *-mañ* e vez merket eun dra a zo e-kichenn ; gand *-se, -ze*, eun dra tost a-walh ; gand *-hont* eun dra a zo pell.

Dond a ra *-se* da veza *-ze* dirag eur vogalenn, pe *l, m, n, r* : *an tok-se*. Mes e vez lavaret *evel-se*.

unan a vez greet gantañ evid poueza war an ano-kadarn pe ar ragano-rener a zo kaoz anezañ : *ar roue e-unan, me ma-unan, drezañ e-unan*.

heveleb a vez lakaet dirag an ano-kadarn : *an heveleb den*. Aliez e vez greet gand *memez* e leh *heveleb* : *ar memez den*.

eun heveleb, eur sort : *eun heveleb tad, eur sort tad*. El liester : *heveleb tado(u), sort tado(u)*.

Evid merka eun dra anad e vez greet gand ar raganoiou-diskoueza *hennez, honnez, ar re-ze*, pe *setu aze* : *hennez eo nerz ar vade(z)iant, setu aze nerz ar vade(z)iant*.

Evid merka eur choaz e vo greet evel-henn : *an dra-mañ-dra* (*an dra-mañ-tra*), *an den-mañ-den*, *an ti-mañ-ti*.

AR RAGANOIOU-DISKOUEZA

| | Tost-tre | Tost a-walh | Pell |
|--------------------|-------------------|------------------|--------------------|
| gourel unan | <i>hemañ</i> | <i>hennez</i> | <i>henhont</i> |
| gwregel unan | <i>homañ</i> | <i>honnez</i> | <i>honhont</i> |
| liester | <i>ar re-mañ</i> | <i>ar re-ze</i> | <i>ar re-hont</i> |
| gand <i>tra</i> | <i>an dra-mañ</i> | <i>an dra-ze</i> | <i>an dra-hont</i> |
| gand <i>kement</i> | <i>kement-mañ</i> | <i>kement-se</i> | |

Eveziadennou :

kement-mañ, *kement-se* e vez greet ganto evid eun dra amresiz. *An dra-mañ*, *an dra-ze*, evid eun dra fetiz.

-ze a vez greet gantañ evid eun dra nemetken ; *kement-se* evid meur a dra.

Aliez a-walh e vez lavaret *ar re-mao*, *ar re-zeo*, *ar renez* = *ar re-ze*, *ar renont* = *ar re-hont*.
heveleb, *memez* : *an heveleb hini*, *ar memez hini*.

Evid unan bennag, hag e vez gouezet mad piou eo, e vo lavaret : *hen-ha-hen* : *hen-ha-hen an eus* (*en-eus*) greet ze (*se*).

Eur ragano-diskoueza dirag eun ano pe eur ragano divizet

| | | |
|-------------------------------|---------------------|------------------------|
| <i>hini</i> (gourel) | <i>hini ma zad</i> | <i>an hini a garan</i> |
| <i>hini</i> (gwregel) | <i>hini ma zad</i> | <i>an hini a garan</i> |
| <i>re</i> (liester) | <i>re ma zad</i> | <i>ar re a garan</i> |
| <i>ar re a</i> | <i>ar re a lenn</i> | |
| <i>ar pez</i> , <i>'pez a</i> | <i>ar pez a rin</i> | |

AN ANOIOU-GWAN GOULENNATA

Pe ? (*Pe baotr eo hennez ?*)

Pesort ? petore ? a vez implijet e Tregerieg e leh *pe ?*

ar bedved ? a vez greet gantañ evid goulenñ an deiziad.

pebez ! a zo eur ger estlamma.

AR RAGANOIOU-GOULENNATA

| |
|--|
| <i>Piou ? piv ?</i> evid an oll dud |
| <i>pehini ?</i> gourel ha gwregel unan, evid ar re veo |
| <i>pere ?</i> liez, gourel ha gwregel, evid ar re veo |
| <i>petra ?</i> gourel ha gwregel, evid an traou. |

AR RAGANOIOU STAGA

Raganoiou-staga fetiz : *a, hag a : Petra a lazez ? Eur paotr hag a labour mad.*

Beteg penn an ugentved kantved, gand levezon ar galleg, e veze greet gand *pehini, pere* evel raganoiou-staga.

Raganoiou-staga amresiz :
kement... a : kement den a ra an dra-ze.
kement hini a ra an dra-ze.
an neb a ra an dra-ze.
piou bennag a ra an dra-ze.

AN ANOIOU-GWAN AMRESIZ

bennag : eun den bennag.
ebed : den ebed.
all : an den all.
pep, beb : peb den.
oll : an oll dud.
kement : kement den.

Eveziadenn : Gand Leclerc e vez lakaet *a-bez* evel pa vefe eun ano-gwan amresiz. E gwirionez ez eo eun adverb.

AR RAGANOIOU AMRESIZ

an den, an nen.
unan bennag, unanig bennag, eur re bennag, hinienzo(u)
liez a hini, meur a hini.
den ebed, hini ebed ; netra, mann, mann ebed.
unan, unanig.
egile, egile all (gourel).
eben, eben all (gwregel).
an hini all.
eur re, darn ; ar re all.
eun all, re all, darn all.
an eil hag egile (gourel) ; *an eil hag eben* (gwregel).
an eil egile (gourel) ; *an eil eben* (gwregel).
pep unan, pep hini.
an oll ; kwitibunan (gwitibunan) : *an oll baotred gwitibunan.*

AR VERB

Ar verb *beañ* (*beza*)

Doare disklêria

| | | | |
|-----------------------|--------------------------|-----------------------|------------------------------|
| Amzer-vremañ | Amzer-vremañ | Amzer amdremenet | Amzer amdremenet |
| <i>me a zo fur</i> | <i>fur on</i> | <i>me a oa fur</i> | <i>fur e oan</i> |
| <i>te a zo fur</i> | <i>fur out</i> | <i>te a oa fur</i> | <i>fur e oas</i> |
| <i>eñ a zo fur</i> | <i>fur eo, fur eo eñ</i> | <i>eñ a oa fur</i> | <i>fur e oa, fur e oa eñ</i> |
| <i>hi a zo fur</i> | <i>fureo, fur eo hi</i> | <i>hi a oa fur</i> | <i>fur e oa, fur e oa hi</i> |
| <i>ni a zo fur</i> | <i>fur om</i> | <i>ni a oa fur</i> | <i>fur e oam</i> |
| <i>c'hwi a zo fur</i> | <i>fur oh</i> | <i>c'hwi a oa fur</i> | <i>fur e oah</i> |
| <i>int a zo fur</i> | <i>fur int</i> | <i>int a oa fur</i> | <i>fur e oant</i> |

Eveziadennoù : *zo* a vez distaget *zou* e Goelo. *zo* a vez distaget *so* ma n'echu ket ar ger dirag gand *l, m, n, r* pe eur vogalenn : *miz zo* a vez distaget *mis so*. Lavaret e vez ivez *tri de so, tri bla so, (tri deiz so, tri bloaz so)*.

Rener amresiz : *tud zo ? N'eus den !*

E tregerieg e vez lavaret : *bremañ e zo tud (bremañ ez eus tud)*.

(Notenn : *fur* a zo bet lakaet gand an hini e-neus troet yezadur Leclerc).

| | | | |
|-------------------------|------------------------------|-----------------------|-------------------------------|
| Amzer-dremenet resiz | Amzer-dremenet resiz | Amzer-da-zond | Amzer-da-zond |
| <i>me a oe fur</i> | <i>fur e oen</i> | <i>me a vo fur</i> | <i>fur e vin</i> |
| <i>te a oe fur</i> | <i>fur e oes</i> | <i>te a vo fur</i> | <i>fur e vi</i> |
| <i>eñ a oe fur</i> | <i>fur e oe, fur e oe eñ</i> | <i>eñ a vo fur</i> | <i>fur e vo, fur e vo eñ</i> |
| <i>hi a oe fur</i> | <i>fur e oe, fur e oe hi</i> | <i>hi a vo fur</i> | <i>fur e vo, fur e vo hi</i> |
| <i>ni a oe fur</i> | <i>fur e oem</i> | <i>ni a vo fur</i> | <i>fur e vefom</i> |
| <i>c'hwi a oe fur</i> | <i>fur e oeh</i> | <i>c'hwi a vo fur</i> | <i>fur e vefet</i> |
| <i>int a oe fur</i> | <i>fur e oent</i> | <i>int a vo fur</i> | <i>fur e vefont, e voint.</i> |

Eveziadennoù : Aliez e vez greet gand an amzer beurdremenet e leh an amzer dremenet resized.

Amzer da zond : e Leon e vez greet gand *vezin, vezi, vezo, vezim, vezoh, vezint*.

vo a vez distaget *vou* e Goelo.

| | | | |
|-----------------------------|-----------------------------|------------------------|----------------------|
| Amzer dremenet kevrenneg | Amzer dremenet kevrenneg | Amzer da zond kent | Amzer da zond kent |
| <i>me a zo bet fur...</i> | <i>fur on bet...</i> | <i>me a vo bet fur</i> | <i>fur e vin bet</i> |

| | |
|---------------------------|-------------------------|
| Amzer beurdremenet | Amzer beurdremenet |
| <i>me a oa bet fur...</i> | <i>fur e oan bet...</i> |

An doare-divizoud

| | | | |
|----------------------|--------------------|----------------------|--------------------|
| Amzer stumm kenta | Amzer stumm kenta | Amzer eil stumm | Amzer eil stumm |
| <i>me a vefe fur</i> | <i>fur e vefen</i> | <i>me a vije fur</i> | <i>fur e vijen</i> |

| | | | |
|-------------------------|----------------------------------|-------------------------|----------------------------------|
| <i>te a vefe fur</i> | <i>fur e vefes</i> | <i>te a vije fur</i> | <i>fur e vijes</i> |
| <i>eñ a vefe fur</i> | <i>fur e vefe, fur e vefe eñ</i> | <i>eñ a vije fur</i> | <i>fur e vije, fur e vije eñ</i> |
| <i>hi a vefe fur</i> | <i>fur e vefe, fur e vefe hi</i> | <i>hi a vije fur</i> | <i>fur e vije, fur e vije hi</i> |
| <i>ni a vefe fur</i> | <i>fur e vefem</i> | <i>ni a vije fur</i> | <i>fur e vijem</i> |
| <i>c'hwi a vefe fur</i> | <i>fur e vefeh</i> | <i>c'hwi a vije fur</i> | <i>fur e vijeh</i> |
| <i>int a vefe fur</i> | <i>fur e vefent</i> | <i>int a vije fur</i> | <i>fur e vijent</i> |

| | |
|-----------------------------|---------------------------|
| Amzer stumm kenta kevrenneg | Amzer eil stumm kevrenneg |
| <i>me a vije bet fur...</i> | <i>fur e vijen bet...</i> |

Doare gourhemenn

| | |
|-----------------|-----------------------|
| eil gour unan | <i>bez (be)</i> |
| trede gour unan | <i>beet (bezet)</i> |
| kenta gour liez | <i>beomp (bezom)</i> |
| eil gour liez | <i>beet (bezit)</i> |
| trede gour liez | <i>beent (bezent)</i> |

An doare-suja

Gand Leclerc ez eus kaoz euz an doare-suja. E gwirionez e vez greet gand an doare-divizoud.

An ano-verb

| | |
|--------------------|----------------------------|
| Amzer-vremañ | Amzer amdremenet |
| <i>beañ (beza)</i> | <i>beañ bet (beza bet)</i> |

An ano-gwan-verb

| | |
|------------------------|--------------------------------|
| Amzer-vremañ | Amzer amdremenet |
| <i>o veañ (o veza)</i> | <i>o veañ bet (o veza bet)</i> |

Ar stummoù boaz

| Amzer-vremañ | Amzer amdremenet | Amzer dremenet amstriz | Amzer beurdremenet |
|---------------------------------|-----------------------------------|--|--|
| <i>fur e ven (fur e vezan)</i> | <i>fur e vijen (fur e vezen)</i> | <i>fur e ven bet (fur e vezen bet)</i> | <i>fur e vijen bet (fur e vezen bet)</i> |
| <i>fur e ves (fur e vezez)</i> | <i>fur e vijes (fur e vezes)</i> | <i>fur e ves bet (fur e vezes bet)</i> | <i>fur e vijes bet (fur e vezes bet)</i> |
| <i>fur e ve (fur e vez)</i> | <i>fur e vije (fur e veze)</i> | <i>fur e ve bet (fur e veze bet)</i> | <i>fur e vije bet (fur e veze bet)</i> |
| <i>fur e vemp (fur e vezom)</i> | <i>fur e vijemp (fur e vezem)</i> | <i>fur e vem bet (fur e vezem bet)</i> | <i>fur e vijem bet (fur e vezem bet)</i> |
| <i>fur e veh (fur e</i> | <i>fur e vijeh (fur e</i> | <i>fur e veh bet (fur e</i> | <i>fur e vijeh bet (fur e</i> |

| | | | |
|----------------------------------|------------------------------------|---|--|
| <i>vezit</i>) | <i>vezeh</i>) | <i>vezit bet</i>) | <i>vezeh bet</i>) |
| <i>fur e vent (fur e vezont)</i> | <i>fur e vijent (fur e vezent)</i> | <i>fur e vent brt (fur e vezit bet)</i> | <i>fur e vijent bet (fur e vezent bet)</i> |

Ar stummou leh

E tregerieg ne reer nemed gand : *emañ, emeint (emaint) : emañ en ti ; emaint o lenn.*
Evid ar gouriou all e reer gand *on, out, omp, (om), oh.*

Ar stummou amstriz

Doare-disklêria

| | | | | | | | |
|-----------------|------------------------|---------------------|---------------------------|--------------------------------|-----------------------|--------------------------|----------------------------------|
| Amzer vremañ | Amzer- vremañ boaz | Amzer amdremenet | Amzer dremenet boaz | Amzer dremenet striz | Amzer beurdremenet | Amzer da zond | Amzer da zond kent |
| <i>e oar</i> | <i>e ver (e vezer)</i> | <i>e oad</i> | <i>e vijed</i> | <i>e ver bet (e vezer bet)</i> | <i>e oad bet</i> | <i>e vefer (e vezor)</i> | <i>e vefer bet (e vezor bet)</i> |

Doare-divizoud

| | | | |
|-----------------------|------------------------------|--|--------------------|
| Amzer vremañ | Amzer dremenet (diwirion) | Amzer dremenet striz | Amzer beurdremenet |
| <i>e ved, e vefed</i> | <i>e vijed</i> | <i>e ved bet, e vefed bet, e vefer bet</i> | <i>e vijed bet</i> |

Bez' implijet evid lakaad an evez war ar verb

Evid lakaad an evez war ar verb e vez lakaet *beañ, bezañ (bez')* e penn ar frazenn, hag ar verb dioustu goude : *beañ e vin fur (bez' e vin fur).*

Implij ar B hag ar G

Goude ar rannig verb *e*, ar ger naha *ne*, hag ar stagell *pa* e teu *B* da veza *V* (Setu perag e vez skrivet *ver*, hag ar re all en taolennou a-uz).

Med e teu en-dro ar **B** pe ar **G** evid respont *eo ! (geo ! geus !)* :

Ne vo ket brao an amzer ? Bo !

Ne oan ket gleb ? Boas !

N'out ket fur ? Gon !

Mar boan.

Mar gon (mar don).

N'out ket skuiz ? Eus ! (geus ! geo !).

Ar verb *am-eus*

Doare disklêria

| | Amzer-vremañ | Amzer amdremenet | Amzer dremenet striz | Amzer da zond |
|-----------------------|--------------------------|--|----------------------------------|-----------------------------------|
| kenta gour | <i>am-eus</i> | <i>am-oa</i> | <i>am-oe</i> | <i>am-mo (am-bezo)</i> |
| eil gour | <i>a-teus (az-teus)</i> | <i>a-toa, tevoa (az-tevoa)</i> | <i>a-toe (az-toe), az-tevoe</i> | <i>a-to (a-tevo (az-tevezo))</i> |
| trede gour gourel | <i>an-neus (en-deus)</i> | <i>an-doa, an-nevoa, an-noa (en-doa)</i> | <i>an-doe (en-doe), en-devoe</i> | <i>an no, an-nevoa (en-dezo)</i> |
| trede gour gwregel | <i>he-deus</i> | <i>he-doa, he-devoa</i> | <i>he-doe, he-devoe</i> | <i>he-do, he-devo (he-devezo)</i> |
| kenta gour liez | <i>on-deus</i> | <i>on-doa, on-devoa</i> | <i>on-doe, on-devoe</i> | <i>on-do, on-devo (on devezo)</i> |
| eil gour liez | <i>ho-peus (hoh-eus)</i> | <i>ho-poa</i> | <i>ho-poe</i> | <i>ho-po</i> |
| trede gour liez | <i>o-deus</i> | <i>o-doa, o-devoa</i> | <i>o-doe, o-devoe</i> | <i>o-do, o-devo (o-devezo)</i> |

Eveziadenn : *-mo* a vez distaget *-mou* e Goelo.

| Amzer dremenet kevrenneg | Amzer beurdremenet kent | Amzer dremenet striz kent | Amzer da zond kent |
|-----------------------------|----------------------------|------------------------------|--------------------|
| <i>am-eus bet</i> | <i>am-oa bet</i> | <i>am-oe bet</i> | <i>am-mo bet</i> |

An doare-divizoud

| Amzer stumm kenta | Amzer eil stumm | Amzer stumm kenta kevrenneg | Amzer eil stumm kevrenneg |
|---------------------------------|--------------------------|--------------------------------|------------------------------|
| <i>am-me, am-mefe</i> | <i>am-mije</i> | <i>am-mefe bet</i> | <i>am-ije bet</i> |
| <i>a-te, a-tefe (az-tefe)</i> | <i>a-tije (az-tije)</i> | | |
| <i>an-ne, an-nefe (en-defe)</i> | <i>an-nije (en-dije)</i> | | |
| <i>he-de, he-defe</i> | <i>he-dije</i> | | |
| <i>on-de, on-defe</i> | <i>on-dije</i> | | |
| <i>ho-pe, ho-pefe</i> | <i>ho-pije</i> | | |
| <i>o-de, o-defe</i> | <i>o-dije</i> | | |

An doare-gourhemenn

| | |
|-----------------|------------------------------|
| eil gour | <i>bez (az-pez)</i> |
| trede gour unan | <i>beet (bezet)</i> |
| dour kenta liez | <i>beomp (bezom)</i> |
| eil gour liez | <i>beet, ho-peet (bezit)</i> |
| trede gour liez | <i>beent (bezent)</i> |

Ano-verb

| | |
|----------------------------|----------------------------|
| Amzer-vremañ | Amzer-amdremenet |
| <i>kavoud, kaoud, kad.</i> | <i>beañ bet (beza bet)</i> |

Ano-gwan verb

| | |
|-----------------------|--------------------------------------|
| Amzer-vremañ | Amzer-amdremenet |
| <i>o kaoud, o kad</i> | <i>bet, o vezañ bet (o veza bet)</i> |

Stummou boaz

| Amzer-vremañ | Amzer-amdremenet | Amzer-dremenet striz | Amzer beurdremenet |
|-------------------------------------|----------------------------|--|---|
| <i>am-me (am-bez)</i> | <i>am-mije (am-beze)</i> | <i>am-me bet (am-mez bet)</i> | <i>am-mije bet (am- beze bet)</i> |
| <i>a-te, tefe, (az-pez)</i> | <i>az-tije (az-peze)</i> | <i>az-te, tefe bet (am- mez bet)</i> | <i>az-tije bet (az-peze bet)</i> |
| <i>an-ne, nefe, (en- devez)</i> | <i>an-nije (en deveze)</i> | <i>an-ne, nefe bet (en- devez bet)</i> | <i>an-nije bet (en devez bet)</i> |
| <i>he-de (defe), he- devez</i> | <i>he-dije (he-deveze)</i> | <i>he-de (defe) bet, he- devez bet</i> | <i>he-dije bet (he- deveze bet)</i> |
| <i>on-de (defe), or bez</i> | <i>on-dije (or-beze)</i> | <i>on-de (defe) bet, or bez bet</i> | <i>on-dije bet (or-beze bet)</i> |
| <i>ho-pe (ho-pez)</i> | <i>ho-pije (ho-peze)</i> | <i>ho-pe bet (ho-pez bet)</i> | <i>ho-pije bet (ho-peze bet)</i> |
| <i>o-de, defe (o-devez)</i> | <i>o-dije (o-deveze)</i> | <i>o-de, defe bet (o- devez bet)</i> | <i>o-dij ebet (o-deveze bet)</i> |

Ar verb “ober“

Doare disklêria

| | | | |
|-----------------------|-----------------------|--------------------------|----------------------------------|
| Amzer-vremañ | Amzer-amdremenet | Amzer-dremenet striz | Amzer da zond |
| <i>gran</i> | <i>grên, (green)</i> | <i>gris</i> | <i>grin</i> |
| <i>grez</i> | <i>grês (gres)</i> | <i>grejout</i> | <i>gri</i> |
| <i>gra</i> | <i>grê (gree)</i> | <i>greas, (rês)</i> | <i>grei (gray)</i> |
| <i>greomp (greom)</i> | <i>grêmp (greem)</i> | <i>grejomp (grejom)</i> | <i>grefom, greim (graim)</i> |
| <i>gret (grit)</i> | <i>grêc'h (greeh)</i> | <i>grejoc'h (grejoh)</i> | <i>grefet (grafoh)</i> |
| <i>greont</i> | <i>grênt (greent)</i> | <i>grejont</i> | <i>grefont (grafont)</i> |

Notenn : ar *g* a ya kuit goude ar rannouigoù *a, e, ne, na, pa, ma* : *me a ra, ne ran ket, pa ran, evid ma rin.*

| | | | |
|-----------------------------------|-----------------------------------|---------------------------------|----------------------------|
| Amzer-vremañ kevrenneg | Amzer-dremenet striz kevrenneg | Amzer beurdermenet kevrenneg | Amzer da zond kevrenneg |
| <i>am-eus grêt (am-eus greet)</i> | <i>am-oe greet</i> | <i>am-oa greet</i> | <i>am-mo greet</i> |

An doare divizoud

| | | |
|--------------------------|--------------------------|---------------------------------------|
| Amzer stumm kenta | Amzer eil stumm | Amzer dremenet kevrenneg |
| <i>grafen</i> | <i>grajen</i> | <i>am-mije grêt (am-ije greet)</i> |
| <i>grafes</i> | <i>grajes</i> | <i>az-tije grêt (az-peze greet)</i> |
| <i>grafe</i> | <i>graje</i> | <i>an-nije grêt (en deveze greet)</i> |
| <i>grafe (grafe)</i> | <i>graje (grafe)</i> | <i>he-dije grêt (he-deveze greet)</i> |
| <i>grafemp (grafem)</i> | <i>grajemp (grajem)</i> | <i>on-dije grêt (or-beze greet)</i> |
| <i>grafec'h (grafeh)</i> | <i>grajec'h (grajeh)</i> | <i>ho-pije grêt (ho-peze greet)</i> |
| <i>grafent</i> | <i>grajent</i> | <i>o-dije grêt (o-deveze greet)</i> |

An doare gourhemenn

gra
greet
greomp (greom)
gret (grit)
greent

An ano-verb

| | |
|--------------|-------------------------------|
| Amzer-vremañ | Amzer amdremenet |
| <i>ober</i> | <i>beañ grêt (beza greet)</i> |

Ano-gwan-verb

| | |
|----------------|---|
| Amzer-vremañ | Amzer amdremenet |
| <i>geo, deus</i> (eo) | <i>koulz lared, evel pa larfen</i> |
| <i>ma !</i> | <i>heb mar</i> |
| <i>en gwirione (en gwirionez)</i> | <i>heb mank</i> |
| <i>sur</i> | <i>en-eün (end-eeun)</i> |
| <i>da laret ê (da laret eo)</i> | <i>zoken</i> |
| <i>koulz lared, evel pa larfen</i> | <i>navise ? (na (vid-se ?))</i> |

Naha

| | |
|----------------------|---|
| <i>nann</i> | <i>ne, na... a-grenn</i> |
| <i>ne, na... ket</i> | <i>e neb doare, e neb feson, e feson ebed</i> |
| <i>ne, na kammed</i> | <i>tamm ebed</i> |
| | <i>ne, na... nemed</i> |

Doueti. Gwirheñvel

| | |
|---|--|
| <i>maruze</i> | <i>'m-eus aon, en-walh, med eur chañs e ve</i> |
| <i>marvad (moarvad), emichañs, 'michañs</i> | <i>evid doare, herve (hervez), hervez kont</i> |

Notennou : *braz, meurbed, a-walh, braz-a-walh* a vez lakaet goude an ano-gwan.
gwall a vez lakaet dirag an ano-gwan : *gwall-vraz*.
netra a vez lakaet e diwez ar frazenn : *n'am-eus gwelet netra*.

AN ARAOGENNOU

| | |
|--------------------|---|
| <i>a</i> | <i>gand</i> |
| <i>anez (se)</i> | <i>goude</i> |
| <i>da</i> | <i>hep, heb</i> |
| <i>dre</i> | <i>paneved, merak, 'med rak e Goelo</i> |
| <i>dreist</i> | <i>herve (hervez)</i> |
| <i>dindan</i> | <i>kent (+ an ano-verb)</i> |
| <i>e, en</i> | <i>ouz</i> |
| <i>etre, entre</i> | <i>rak, rak-se, (rag-se)</i> |
| <i>euz, euz a</i> | <i>war</i> |
| <i>evit</i> | |

Notenn : *deus* a vez greet gantañ e leh *euz* aliez-kenañ.

Araogennoù gand *di*

| | |
|-------------------------|--------------|
| <i>digand</i> | <i>dirag</i> |
| <i>dimeuz, dimeuz a</i> | <i>diwar</i> |
| <i>diouz</i> | |

Displegadur an araogennoù : gweled uhellh.

Araogennoù kevrenneg

| | |
|---------------------------------|--|
| <i>abalamour da</i> | <i>en tu-hont da</i> (dirag an niverou pegementi) |
| <i>adal da</i> | <i>a-dreuz da</i> |
| <i>a-dreñv da, a-dreg da</i> | <i>a-du gand</i> (e-keñver ar pezh a ra pe a zoñj unan bennag) |
| <i>a-eneb da</i> | <i>er-mêz a, euz a</i> |
| <i>a-raog da</i> | <i>euz a-dre</i> (orin) |
| <i>a-uz da</i> | <i>ez-eün da (ez-eeun da)</i> |
| <i>daoust da</i> | <i>gand aon da</i> |
| <i>e-biou da</i> | <i>hed-ha-hed gand</i> |
| <i>en abeg da, en askont da</i> | <i>hepoud da (= heb goud da)</i> |
| <i>en despèt da</i> | <i>pell diouz</i> |
| <i>en-dro da</i> | <i>stok da, raz da</i> |
| <i>en tu all da</i> | <i>tost da, nes da</i> |
| <i>en tu-mañ da</i> | <i>war benn hent da</i> |

Lavarennou heb araogennoù

| | |
|-----------------------|---|
| <i>aboe (abaoe)</i> | <i>e-mesk</i> |
| <i>adaleg</i> | <i>e-pad</i> |
| <i>a-benn</i> | <i>e-skeud se</i> |
| <i>a-hed</i> | <i>e-skoa</i> |
| <i>a-raog, e-raog</i> | <i>euz a gê</i> (e-kichenn eun dra pe eun den dañjeruz ; Goelo) |

| | |
|--|--|
| <i>da gê</i> (war-du eun dra dañjeruz. (Goelo) | <i>e-tal</i> |
| <i>daved</i> (war-du eun den) | <i>e ti</i> |
| <i>david</i> (war-du eun dra) | <i>e-touez</i> |
| <i>diwar-benn</i> | <i>etrezeg</i> |
| <i>e-barz</i> | <i>ouspenn</i> |
| <i>diabarz</i> | <i>setu amañ</i> |
| <i>e-keit-se</i> | <i>setu aze</i> |
| <i>e-kerz</i> | <i>setu a-hont</i> |
| <i>e-kichenn</i> | <i>tremen ; tremen poent eo</i> |
| <i>e-giz</i> (<i>e-kiz</i> e Treger bihan) | <i>war digare (war digarez)</i> |
| <i>e-kreiz</i> | <i>war-lein</i> |
| <i>e-harz</i> | <i>war-lerh</i> |
| <i>e-leh</i> | <i>‘vid kelo, kelo (kelou)</i> (evid merka n’eus pouez ebed gand eun dra). |

Notenn : *a* hag *e* a zo dirag ne vezont ket distaget an darn-vrasa euz an amzer, hag e vez lakaet eun ‘ en o flas pa skriver : *a-hed ar mor* = *‘hed ar mor*.

An araogennoù gand eur ragono gour

| | |
|-----------------|----------------------------|
| <i>da gê</i> | <i>d’am hê</i> |
| <i>e-keñver</i> | <i>en ho keñver</i> |
| <i>e-mesk</i> | <i>en on mesk</i> |
| <i>e-raog</i> | <i>ez raog, en az raog</i> |
| <i>war-dro</i> | <i>war e dro</i> |
| <i>war-lerh</i> | <i>war o lerh</i> |

E Treger e vez greet memez mod gand :

| | |
|---------------------|---------------------------|
| <i>goude</i> | <i>en em goude</i> |
| <i>bete (beteg)</i> | <i>en ho pete (peteg)</i> |

Notenn gand an embanner e brezoneg :

Tu a zo da lakaad an oll houriou gand ma vo greet ar hemmaduriou red.

AR STAGELLOU

Ar re a verk an unaniez

| | |
|-----------------------|---|
| <i>ha, hag</i> | <i>memez</i> |
| <i>na, nag</i> | <i>zoken</i> (goude an ano-kadarn) |
| <i>ive, ie (ivez)</i> | <i>end-eün (end-eeun)</i> (goude an ano-kadarn) |
| <i>c'hoaz</i> | <i>evid</i> |
| <i>a-hend-all</i> | <i>evid gwir</i> |

Ar re verk daou dra disheñvel

| |
|--|
| <i>pe</i> |
| <i>petramant (peotramant), pe a-hend-all</i> |

Ar re a verk daou dra kontrol

| | |
|---|--|
| <i>avad</i> (goude eur ger) | <i>'velkent (evelkent)</i> . Goude <i>'velkent</i> e vez lakaet <i>ha goude</i> gwechou 'zo. |
| <i>vise</i> (goude eur ger) | <i>'velkent (evelkent)</i> . Goude <i>'velkent</i> e vez lakaet <i>ha goude</i> gwechou 'zo. |
| <i>mes, med</i> | <i>evelato</i> (leoneg) |
| <i>hogen</i> (leoneg) | <i>er hontrel (er hontrol)</i> |
| <i>koulskoude, memez tra (memestra)</i> | <i>en eneb</i> |

An hini a verk eun abeg

| |
|------------------|
| <i>rak (rag)</i> |
|------------------|

Ar re a verk ez eo echu

| | |
|---------------------------------|--|
| <i>rak-se (rag-se), dre-ze</i> | <i>ken merak-se (ken me rak-se) (kend-aze)</i> |
| <i>eta, 'ta</i> (goude eur ger) | |

An is-stagellou

1) E-barz eun is-lavarenn :
e, rannig-verb goude ar verbou *lavared, kredi*, hag e se :
Neuze e lavaras e oamp (oam) deut.

Dirag eur vogalenn e reer gand *eh* :
Me 'gred eh an.

Ne reer ket gand *e* en naha :
Me 'gred ne gano ket.

ma, goude ar verbou *urzia, goulenn* :
neuze e houlennas ma teujen.

Dirag eur vogalenn e reer gand *ma'h*
Neuze e houlenas ma'h ajen.

ha, hag, hag-eñ, mar ? geriou goulenn etre daou verb :
Lavar din ha te a deuio. Ha te a deuio ?

2) E-barz eun islavarenn divizoud :

Stagellou abeg

| | |
|---|---------------|
| <i>dre ma, abalamour ma, en damant ma, en abeg ma</i> | <i>pa, pe</i> |
| | <i>perag</i> |

Stagellou dibenn

| | |
|-----------------------------|--|
| <i>evid ma, ma, evid ne</i> | <i>gand aon ne, (gand aon na), bete goud ne (beteg gouzoud ne, na)</i> |
|-----------------------------|--|

Stagellou da heul

| | |
|---|----------------------------------|
| <i>en heveleb doare ma,</i> | <i>heb ma</i> |
| <i>ken, ken ...e, kement, kement ... e.</i> | <i>ken ... ma, kement ... ma</i> |

Stagellou aotreüz

| | |
|--|---|
| <i>daoust ma, daoust da ... da (+ ano-verb), evid ... da (+ ano-verb), petra bennag ma</i> | <i>daoust pe ... pe..., ha pa, pe ; hag e</i> |
|--|---|

Stagellou divizoud

| | |
|-------------------|---|
| <i>mar, ma</i> | <i>gand ma, med ma, beteg ma</i> |
| <i>paneved ma</i> | <i>nemed ha, nemed (+ ano-verb, pe ober evel verb-skoazell)</i> |

Stagellou dibad

| | |
|-----------------------|----------------------------------|
| <i>pa, pan, pa'h</i> | <i>kenkent ha ma, dioustu ma</i> |
| <i>pe, pen, p'eh</i> | <i>e-leh ma</i> |
| <i>e-pad ma</i> | <i>a-raog ma, kent ma</i> |
| <i>beb ma, dre ma</i> | <i>goude ma</i> |
| <i>a-greiz ma</i> | <i>ken ma</i> |
| <i>a-benn ma</i> | <i>keid ma</i> |
| <i>abaoe ma</i> | <i>endra ma</i> |
| <i>adaleg ma</i> | <i>a-veh, a-boan... ma</i> |

Stagellou keñveria

| | |
|---|--|
| <i>evel</i> (derez kevatal) | <i>evel pa, pe</i> |
| <i>evid, eged</i> (Leoneg) (goude an derez uhelloh) | <i>ken ... ha ma, kement ... ha ma</i> |
| <i>evel ma</i> | <i>seul vui ma... seul vui ma</i> |
| <i>diouz ma, herve ma (hervez ma)</i> | <i>seul vui ... ma</i> |

Stagell diouz re all

| |
|-----------|
| <i>ma</i> |
|-----------|

AN ESTLAMMA

| | |
|---|--|
| <i>ai ! aou !</i> | <i>arsa !</i> |
| <i>allo !</i> | <i>harao !</i> |
| <i>ah ! ha !</i> | <i>dao dei (dezi)</i> |
| <i>aha !</i> | <i>nebon !</i> |
| <i>ahanta ! 'hanta)</i> | <i>ola !</i> |
| <i>allaz ! siwaz !</i> | <i>he ! du-hont !</i> |
| <i>êc'h ! (eh !), foei !</i> | <i>hop !</i> |
| <i>mad ! ma !</i> | <i>bah !</i> |
| <i>diwall ! diwallet ! (diwallit !)</i> | |
| <i>peuc'h ! (peoh !), chut ! mik !</i> | <i>des 'ta ! det 'ta ! (dit 'ta) (deus 'ta !, deuit 'ta !)</i> |
| <i>brao !</i> | <i>harz al laer !</i> |
| <i>icheikon ! (Goelo) (beza bamet)</i> | <i>d'an tan !</i> |
| <i>feta ! (suezenn)</i> | <i>forz ma bue ! (buhez)</i> |

AN EREADUREZ

ERREADUREZ AR GER-MELL

Greet e vez gand ar ger-mell dirag an anoiou-kadarn, hag ar geriou all a hell dond da veza anoiou-kadarn :

an den ; eur zod ; ar herzed.

Ar ger-mell striz

Lakaet e vez dirag an anoiou-kadarn pe dirag geriou bet implijet evel pa vefent anoiou-kadarn.

Lakaet e vez dirag *aotrou, itron, dimezell* : *an aotrou Person, an aotrou Yann, an itron Rannou.*

An Aotrou 'n Eskob : an '*n* dirag *Eskob* n'eo ket ar ger-mell. Lakaet e vez eno evid ma vefe êsoh da zistaga.

Ne vez ket lakaet ar ger-mell pa gomzer ouz an den : *Kenavo, Aotrou Person.*

Greet e vez gand ar ger-mell gand lavarou 'zo : *disul ar beure, soubenn ar hig ; chom war ar bale.*

Ne vez ket lakaet ar ger-mell dirag :
eun ano-kadarn dirediz : *hep poan.*

Pa vez niveret an anoiou-kadarn :
ed, foenn, plouz, oll int devet.

Er hrennlavariou :
Kamm ki pa gar.

Dirag an naoiou-gwan bet staget ouz eun ano-kadarn :
Anna vihan, Napoleon yaouank.

Dirag an anoiou broiou gand *Bro-Breiz-Izel, Bro-Hall, Bro-Zaoz.* Med e vo lavaret *ar Frañs, an Itali.*

Dirag an anoiou-tud e -iz :
Tregeriz, Lanrodegiz.

Dirag ar ger *kêr* :
eh om en kêr (emaom e kêr).
Ma talv *kêr* kement ha *du-mañ*, e vo lakaet ar ger-mell :
ec'h (eh) ez d'ar gêr.

Ne vez ket lakaet ar ger-mell e :
labourad douar, prest eo koan, ober skol, c'hoari boulo (boulou).

Memez tra e vo greet ar hemmadur gwechou 'zo :
c'hoari harto (hartou).

Memez mod e vo evid *er, en* :

Divun ah a en kêr hag a lez e doull er gêr ? An alhoue (alhwez).

Implij *hini, re* :

Ma vez lakaet ar ger-mell *an, ar, al* dirag eun ano-gwan, e vez lakaet *hini*, en unander, *re* el liester, e-leh an ano-kadarn :

an hini brao (gourel unan) ; *an hini vrao* (gwregel unan) ; *ar re vrao* (liester).

Ar ger-mell amstriz

eun, eur, eul.

eun tok.

Ar ger-mell lodenneg

N'eus ket anezañ.

Bara, dour, edenno (edennou), gwin mad, tôko (tokou).

Pa n'eus nemed eun dra, e vez greet gand *unan*, gourel pe wregel :

Roet (roit) din unan mad ; roet din unan vad.

Gwechou 'zo e vez greet gand *hini* evid an unander :

Bara ha hini mad.

EREADUREZ AN ANO-KADARN

Anoioù-gwan hag anoioù-gwan verb implijet evel pa vefent anoioù-kadarn

Sod, eur sod ; mud, ar mud ; maro, marv, ar maro, ar marv ; paour, ar paour.

Dre vraz e vez lakaet eun ano-kadarn dirag an ano-gwan, pe *unan, hini* :

Eun den klañv = eur hlañvour.

Tud klañv = klañvourien.

Ar re varo.

An dud paour, ar beorien, ar bevin.

Ar zodiac.

Ar zodiac : liester an anoioù-gwan implijet evel pa vefent anoioù-kadarn a zo e *-ien*.

Reoù 'zo a zo e *-ed* : *mud, ar vuded ; diod, an dioded.*

Dirag an anoioù-tud

Ar Fur ; Ar Hamm.

Notenn gand an embanner brezoneg : e gwirionez e lakaer ar ger-mell dirag eun ano-den pa'z eus eun dra bennag dirazañ : *Yann ar Fur, an aotrou Ar Fur*. Med ne vez ket lakaet ar ger-mell pa gomzer outo : *Devez mad, Aotrou Fur*.

Lavaret e vez : *ar wirione (ar wirionez), an treou (traou) uhel ; ar gwir.*

Evid poueza war an ano-gwan :

Eur haer a di.

An ano-verb a hell beza sellet outañ evel pa vefe eun ano-kadarn :

An dibri (debri), an evañ (an eva), eur herzed skañv, ar gweled, ar hleved, an tennañ (tenna) lin, eun tamm nettât (nêtaad), ar peuri.

Eun ano-kadarn renadenn eun ano-kadarn

Ar stumm :

| | |
|------------------------------------|-----------------------------|
| <i>eur loa arhant</i> | <i>eur vilin avel</i> |
| <i>eun tamm bara</i> | <i>eur zê (zae) soudard</i> |
| <i>eur vandenn vleidi (vleizi)</i> | <i>eun ever jistr</i> |
| <i>eun dornad kistin</i> | <i>eur marhadour kezeg</i> |
| <i>eur marh brezel</i> | |

Gand an araogenn *a* :

| | |
|--|--------------------------------------|
| <i>eun den a galon</i> | <i>ar gador a wirione (wirionez)</i> |
| <i>an draouien-mañ a zaero (an draonienn-mañ a zaerou)</i> | |

Notenn : *eur bugel daoulagad glaz dezañ = eur bugel glaz e zaoulagad.*

Ar vicher :

Eun den a Iliz ; an dud a vor.

Evid jedenni :

Eun ti a bevar-hant skoued (skoed).

Eur walenn a hweh troatad.

Eun den a netra, a vann.

Med e vo lavaret :

Eur bugel tri blâ (bloaz).

Ar hementad, pa vez lakaet eun ano-gwan gand an ano-kadarn :

eur vandenn vraz a vleidi (vleizi), eun dornad mad a gistin, eur mor a zaero(u).

Gand *netra, mann, eun dra bennag* :

Eun dra bennag a neve (nevez).

Anoiou stag-ha-stag :

An hano (ano) a roue, Eun diaoul a zen.

Eveziadenn : *eur haer a zen, pemp mad a gezeg.*

Heb araogenn pe gand *da, euz*

| | |
|---------------------------|-------------------------|
| <i>tôk ma zad (tog)</i> | <i>sul Fask</i> |
| <i>dillad da hini</i> | <i>merher al Ludu</i> |
| <i>kernio(u) ar zaout</i> | <i>kêr Wengamp</i> |
| <i>roue ar vro</i> | <i>kêr Wengamp</i> |
| <i>mado(u) an douar</i> | <i>mene (menez) Bre</i> |

Notenn gand an embanner e brezoneg : *mene Bre* : iskiz eo an ano-ze, pa lavar diou wech ar memez tra. D'am zoñj ne vez ket komprenet ar ger "Bre" gand an dud a zo o chom e-kichen. Ganto e vez lavaret "*Tuchenn Vre*".

Gand *da, euz, deuz, dimeuz*

Pa vez ar renadenn eun ano tra e reer gand *euz* :

Ar roue euz ar vro ; En eur euz (deuz, dimeuz) on maro.

Eun troad euz an daol.

Da a vez greet gantañ evid an dud :

Eur mab d'ar roue.

Eveziadenn : *Paotr e vragou berr.*

Gand *euz, euz a*

Merket e vez an orin gand *euz* :

Eun den euz ar vro. An horolojer-mañ euz a Boñdi.

Al lodenn vrasañ (vrasa) euz an dud. An hanter euz ma zorz vara.

Eveziadenn : Ne reer nemed gand *euz*, ha nompas gand *euz a, a*, pa vez implijet ar ger-mell pe eun ano-gwan perhenna.

Memez mod gand renadenn ar gouriou a verk eun darn euz eun dra, pe gand an derez-uhella :

Hinienn(u), hini 'bed euz ar Vretoned. Ar gaerrañ (gaerra) euz ar broiou.

Araogennou all

| | |
|---|---|
| <i>Ar vez euz ar pehejo (pehejou)</i> | <i>Ar c'hoant d'an aour</i> |
| <i>Ar has ouz ar binvidien</i> | <i>Ar heu (heun, heuz), ar glahar d'ar pehejo (pehejou)</i> |
| <i>An istim, an dispriz evid mado(u) an douar. (Gwelloc'h e vefe ober gand ouz)</i> | <i>An aon rag an tan</i> |
| <i>Ar garante(z) evid, e-keñver e nesañ (nesa) (Gwelloc'h e vefe ober gand ouz)</i> | <i>Ab drue(z) ouz ar bevien</i> |

Gand, eneb, diwar

Eur zoudard gand eur hleze. Eur pehed eneb da Zoue. An dud diwar ar mêz.

An ano-verb evel renadenn.

Greet e vez gand an araogenn *da* :

An amzer da lenn. Eur mekanik da zornañ (zorna). Lavaret e vez ivez : eur mekanik dornañ.

EREADUREZ AN ANOIOU-GWAN

Kemmaduriou en ano-gwan

Eun tad mad. Tado(u) mad. Eur vamm vad. Mammou mad.

Peleh e vez lakaet an ano-gwan ?

Dre vraz e vez lakaet goude an ano-kadarn :

Eur gêr vraz. Eur marh koz. Eur paotr yaouank. On Tad Santel ar Pab.

Lakaet e vez dirag an ano-kadrarn an anoiou-gwan-mañ :

| | |
|---|--|
| <i>briz : briz vrezoneg</i> | <i>fals : Eur fals Doue.</i> |
| <i>koz : eur hoz varh (Distaga o digor pa vez hoz eur ragger pa'z eus diou gensonenn war e lerh).</i> | <i>hanter : Eur pikol den.</i> |
| <i>krak : eur hrak aotrou.</i> | <i>heveleb :</i> |
| <i>gwall : gwall deodo(u).</i> | <i>pikol : pikolo(u) mein</i> |
| <i>gwell : Eur gwell baotr.</i> | <i>pez : eur pez den. pezio(u) mein.</i> |

An anoiou-gwan dirag an ano-kadarn, doare kevrenneg

| | |
|-----------------------------------|-------------------------------------|
| <i>berr : en berr gomzo(u)</i> | <i>paour-kêz : ar paour-kêz den</i> |
| <i>gwir : eur gwir gristen</i> | <i>oll : an oll dreo(u)</i> |
| <i>neve(z) : an neve(z) amzer</i> | <i>pell : da bell vro</i> |
| | <i>treuz : treuz-yeot</i> |

Gand a

| | |
|-------------------------------------|---------------------------------|
| <i>kaer : eun ti kaer</i> | <i>= eur c'haer (haer) a di</i> |
| <i>kaer : pemp buoh gaer (kaer)</i> | |
| <i>brao : eur vrao a hini</i> | <i>brao : eur vrao a re</i> |
| <i>brao : eur vrao a unan</i> | |

Renadenn an ano-gwan

Lakaet e vez *a, euz, euz a* goude an anoiou-gwan a vez lavaret an orin ganto, ar buillentez, an dienez ar blijadur , ar boan, an dellid, an dizellid, ar c'hoant, ar zurentez :

a, euz, euz a

| | |
|---|---|
| <i>ginidig : ginidig a Wened</i> | <i>laouen : laouen euz an dra-ze</i> |
| <i>leun : leun a dra</i> | <i>dellezezeg, dign : dellezeg a enor</i> |
| <i>goulllo : goulllo a zour</i> | <i>c'hoantuz : c'hoantuz euz a arhant</i> |
| <i>dibourve(z) : dibourve(z) a arhant</i> | <i>sur : sur euz an dra-ze</i> |

Notenn : ar skweriou a zo bet savet gand an embanner brezoneg.

da a vez greet gantañ goude an anoiou-gwan pa vezer techet d’ober eun dra bennag, ar geneilled, an enebiez, an dalvoudegez, an êzted :

| | |
|--|--|
| <i>tuet : tuet eo da ober an dra-ze ; techet : techet eo da laerez</i> | <i>mad : mad eo dezañ</i> |
| <i>kar : kar eo dezañ</i> | <i>êzet : êzet eo dezañ</i> |
| <i>par : par eo dezañ ; ingal : ingal eo dezañ</i> | <i>diêz : diêz eo dezañ</i> |
| <i>tost : tost eo dezañ</i> | <i>barreg : barreg eo d’ober an dra-ze</i> |
| <i>enebour : enebour eo dezañ</i> | <i>gouest : gouest eo d’ober an dra-ze</i> |

Notenn : ar skweriou a zo bet savet gand an embanner brezoneg.

Notenn (gand Leclerc) : **barreg**, implijet e-unan, a dalv kement ha “gouest d’erruoud en amzer vad“. **Foulet** eo ar hontrol.

E, en a vez implijet gand **krog** : **krog eo ennon**.

Notenn : ar skwer a zo bet savet gand an embanner brezoneg.

Ouz a vez implijet gand an anoiou-gwan : e-kichenn, heñvel, enebiez, santimant :

| | |
|--|--------------------------------|
| <i>stag : stag ouz eur gordenn</i> | <i>truezuz : truezuz outañ</i> |
| <i>hañval : hañval ouzin</i> | <i>kriz : kri(z) outañ</i> |
| <i>kounnaret : kounnaret ouz an hini all</i> | <i>fêuz (faeüz) outañ</i> |

Notenn : ar skweriou a zo bet savet gand an embanner brezoneg.

Notenn gand Leclerc : **diouz** a vez implijet evid merka ar pellder. Greet e vez gand **diouz** evid merka e-keñver unan pe eun dra bennag :

| | |
|--------------------------------------|--------------------------------|
| <i>dishañval : dishañval diouzin</i> | <i>pell : pell diouz Brest</i> |
| <i>kreñv : kreñv diouz e vent</i> | |

Notenn : ar skweriou a zo bet savet gand an embanner brezoneg (nemed **kreñv**)

Evid, e-keñver :

| | |
|----------------------|---------------------------------------|
| <i>evid : evidon</i> | <i>e-keñver : e-keñver an dra-ze.</i> |
|----------------------|---------------------------------------|

Notenn : ar skwer a zo bet savet gand an embanner brezoneg.

Gand : a vez implijet gand an anoiou-gwan-mañ :

| | |
|---------------------------------|---------------------------------|
| <i>skuiz : gand skuiz m’ema</i> | <i>nehet : gand nehet m’ema</i> |
| <i>klañv : gand klañv m’ema</i> | |

Notenn : ar skweriou a zo bet savet gand an embanner brezoneg.

Merzit ouz an doareou-mañ d’ober :

Pêr ah ê (ah eo) mezuz dezañ tehel.

Eun den mad ver (vezer) mad en e geñver.

An derez uhelloh

Lakaet e vez an derez-uhelloh goude an ano-kadarn :
Eun ti brasoh.

Ma n'eus ger-mell ebed e hell dond an derez-uhelloh dirag an ano-kadarn :
Biskoaz n'am-eus gwelet brasoh tud.

Renadenn an derez-uhelloh a vez lakaet gand *evid* (*eged* e Leon) :
Paol a zo furoh (furroh) evid e vreur.

Notenn gand Leclerc : e frazennou naha : ***Pêr n'eo ket evid e vreur.***

Lavarennou all :

| |
|--|
| <i>gwell pe well</i> |
| <i>(helebini a zo etre Pêr ha Yann da houd pehini a labour ar gwellañ (gwella).</i> |
| <i>gwell ouz gwell, gwell war well, gwelloh gwell.</i> |
| <i>gwaz ouz gwaz, gwasoh gwaz.</i> |
| <i>mui ouz mui, muioh mui.</i> |
| <i>tomm ouz tomm, tommoh tomm, tommoh-tommañ (tomma).</i> |

Goude an derez-uhelloh e vez lakaet *a ze* gwechou 'zo :
An dour na (ne) vo tommoh a ze.
Gwell a ze.
Gwaz a ze.

An derez keverata

Lakaet e vez *ken* dirag an ano-gwan hag *ha* dirag an eil tra a geñverier :
Ken fur ha Yann.

Eveziadenn :

| |
|--|
| <i>ken mad = kenkoulz</i> |
| <i>ken hir = keit (keid). Ma breh a zo keit ha da hini.</i> |
| <i>ken braz = kement.</i> |

Kenkoulz, keit (keid) ha kement a zo ragverbou ivez.

An derez-uhella

Tu a zo da lakaad an ano-gwan dirag pe goude an ano-kadarn :
Ar hreñvañ (hreñva) den ; An den kreñvañ.
Ne vefe ket ken mad lavared : ***An den ar hreñvañ.***

Pa vez lakaet an derez-uhella e penn ar frazenn e heller chom heb lakaad ar ger-mell :
gwasañ (gwas) zo.

Kreñvañ (Kreñva) den am-eus gwelet.

Renadenn an derez-uhella e vez lakaet *euz* dirazi nemed e vez greet gand *a* pa vez ar renadenn eur ragano gour liez : *ahanomp (ahanom), ahanoh, aneze, ane (anezo)*. Gand tud 'zo e vez greet gand : *diouzimp, diwim (diouzim), diouzoh, dionte (diouto)* :

Ar gwellañ (gwella) euz an dud ; ar gwellañ ahanoh.

Merzit : ***Eun ti euz ar haerañ (haerra), pe eun ti euz ar re gaerañ (gaerra).***

Tu a zo lakaad ar ger-mell striz dirag an derez-uhella :

Greet am-eus ze euz ma gwellañ (gwella).

An tangwall a oa en e wasañ (wasa).

Bez' e heller lakaad daou zerez-uhella an eil goude egile :

Ar hosañ (hosa) ar gwellañ (gwella).

Ar pep :

Ar pep brasañ (brasa).

AN ANOIOU-GWAN NIVER

Unander pe liester :
Kant den, pe *Kant a dud*.

Implij *war* hag *ha* :
350 den : *tri-hant hanter-kant den*, pe *tri-hant den ha hanter-kant*.
25 leo : *pemp leo warn-ugent*.
969 bloaz : *nao hant nao blâ (bloaz) ha tri-ugent*.

An niverou pegementi

Loeiz XIV : *Loeiz pevarzeg*.
Frañsez 1^a : *Frañsez kentañ (kenta)*.
An deg euz ar miz, pe *an degved euz ar miz*.
1919 : *Ar blâ (bloaz) naonteg kant*.
2 eur : *diou eur pe div eur*.

eur, *eun* a vez greet ganto dirag eun ano-kadarn e-leh *unan* :

Ar moneiz : (e gwirionez an doare-koz da gonta, a vez kavet e skridoù koz 'zo. Bremañ e reer gand Euroioù).

Euz 0,05 e konted e *gwenneg* : 0,05 F = *eur gwenneg*.
0,10 lur : *daou wenneg*.
0,95 lur : *naonteg kwenneg*.

Euz 1 lur da 6 lur e konted dre *skoed* (3 lur), *real* ha *gwenneg* :
1 lur : *pevar real*.
1,05 lur : *eur gwenneg warn-ugent*.
1,25 lur : *pemp real*.
1,30 lur : *c'hweh kwenneg warn-ugent*, pe *pemp real hag eur gwenneg*.
1,45 lur : *nao gwenneg warn-ugent*, pe *c'hweh real nemed eur gwenneg*.
1,50 lur : *c'hweh real*.

Euz 3 lur betek 6 lur e konted dre *skoed*, *real* ha *gwenneg*
3 lur : *eur skoed*.
3,25 lur : *trizeg real*.
5 lur : *ugent real*.
5,25 lur : *eur real warn-ugent*.
5,75 lur : *tri real warn-ugent*.
6 lur : *daou skoed*.

Goude 6 lur e konted dre *lur (livr, lir)*, ha gand *gwenneg*.

6,25 lur : *daou skoed pemp kwenneg*, pe *daou skoed pemp*.
7,80 lur : *eiz lur c'hwezeg kwenneg*.
180 lur : *tri-ugent skoed*.

Eveziadenn : niverou diweza peb unanenn (*lur*, *real*) a vez greet gand *nemed*.

EREADUREZ AR RAGANOIOU

Ar raganoiou-gour

| | |
|-------------------------|----------------|
| Gour kenta unan | <i>ma, am</i> |
| Eil gour unan | <i>da, az</i> |
| Trede gour unan gourel | <i>e, hen</i> |
| Trede gour unan gwregel | <i>he, heh</i> |
| Eil gour liez | <i>ho, hoh</i> |
| Trede gour liez | <i>o</i> |

Dirag ar verb e vez lakaet ar ragano-gour ma vez en eun amzer digevrenneg : *Me ho ped.*

Lakaet e vez dirag an ano-gwan-verb ma vez en eun amzer kevrenneg :
Eñ an-neus (e-neus, en-deus) ma fedet, pe am fedet an-neus.

am, az a vez implijet dreist-oll dirag an amzeriou digevrenneg :
Me az ped. Memestra e vez lavaret, en doare-gourhemenn : *ma zikouret (zikourit).*

Ma ha *da* a vez greet ganto dreist-oll gand an amzeriou kevrenneg, ha gand an ano-verb pa ne vez ket lakaet *da* dirazañ : *Me am-eus da bedet ; evid da weled.*

E, hen : e-leh *e* e vez greet aliez gand *hen* : *me hen gwel = me e wel.* Red eo ober gand *hen* pa dalv kement hag an dra-ze : *Me hen goar.*

En doare-gourhemenn, evid an trede gour, e vez lakaet ar ragano-gour goude ar verb :
Kemeret-añ (kemerit-eñ) ; kemeret-i (kemerit-hi) ; kemeromp-e (kemerom-o).

Doare goulennata en doare naha :
N'ho-peus an (eñ) ket gwelet ? N'am-eus ket an (eñ) gwelet.

An trede-gour unan gwregel gand ar ster “an dra-ze“, pe evel pa vefe “gourlienuz“ :
Beh a vo ganti ; e ver (vezer) ganti, e oar ganti ; deomp dei (deom dezi).

An anoieu-gwan hag ar raganoiou-perhenna

Droug am-eus d'am garr, em garr ; Pêr a ra e zod.

Da evid merka eo kar *din* : *Eur henderv din.*

Implij ar ger-mell striz pe an ano-gwan-perhenna :
Red eo karoud an nesañ (nesa) ; pep hini a dle karoud e nesañ ; dleoud 'ra an nen (an den) karoud e nesañ ; ne dle ket an nen kazañ (kasaad) e nesañ.

Gand an niverou pegementi :
Me ma-unan ; da-unan, da-unan-penn, e-unan, e-unan-penn ; o-daou, on zri.
Dond a refont (raint) o-unan d'ar gêr ; dond a refont o-daou.

Gerioù bihannaad a zo ivez : *ma-unanig, o-daouig.*

An anoiou-gwan hag an anoiou-diskoueza

Pehini ? an hini braz pe an hini bihan ?

ar pez a : ar pez a bareo ahanoh ; ar pez a welan.

eo : Kleier Sant-Pever eo a glevan ; C'hwi eo a gomz amañ ; Deoh eo a gomzan ; Amañ eo e choman.

Eveziadenn : e *Kleier Sant-Pever eo a glevan*, ar rener a zo *ar re*, *Kleier Sant-Pever* o veza eur ger-doareenn, alese *eo* en unander.

Memez mod evid *C'hwi eo a gomz amañ = c'hwi eo an hini a gomz amañ.*

Me eo.

Eñ eo a oa.

Me eo a ve (vez) bepred.

Ar vugale ê (eo) a oa.

C'hwi ê (eo) a vo.

Ar rener eo *an hini*, *ar re*, *ar vugale*, *c'hwi* a zo gerioù doarennet.

Me eo an hini, ha n'eo ket te ; me eo an hini a oa, he n'eo ket te ; n'eo ket te an hini a oa, me eo ; n'eo ket aze eo an hini e chome, amañ eo.

Evid poueza war eil darn ar frazenn, e vo lakaet *an hini* eno : *N'eo ket aze e chome, amañ an hini eo.*

Gwechou 'zo ne vez ket lakaet *an hini* : *N'eo ket aze e chome, amañ eo.*

eo a vez lakaet gwechou 'zo e-barz an darn genta euz ar frazenn :

Pan eo (Pa'z eo) c'hwi a deu ; Me 'gred eh (ez) eo ni eh (ez) eo ; Me 'lar dah (deoh) eh eo ni eh eo.

Eveziadenn : *i eo ma bugale* (ger doareenn eo *ma bugale*) ; *ma bugale int* : ar verb gand ar rener ennañ eo *int*.

Memez mod :

i e oa ma re, ma re e oant ; i a zo tud vad, tud vad eh (ez) int.

Hemañ, hennez, gerioù-doareenn : *Hemañ eo ma mab ; honnez eo buhez an den war an douar.*

ha ma, hag e :

Lezenn Doue a zo hirie an heveleb hini ha ma oa gwejall (gwechall)

Pe : Lezenn Doue a zo hirie ar memez hini hag e oa gwechall.

hañval :

Hañval eo ouz e dad = mab e dad eo = patrom e dad eo.

Anoiou-gwan ha raganoiou goulennata

Pe, pesort ? (peseurt ?), petore ?

Pe oad hoh-eus ? = Pesort oad hoh-eus ?

Laret (Larit) din pe da goulz e teufet ? (e teuot) , pe : pegoulz e teufet ?

Evid merka ar reñk, e reer gand *pedved ? peded ? : ar bedved*, pe *ar bedved de (deiz) euz ar miz ?*

Evid an eur hag an oad e vez greet gand *ped ? Ped eur eo ? Ped vlâ (vloaz) oc'h (oh) ?*

An estlamma :

Pebez !, ger estlamma : *Pebez den ! Pebez hini !*

Bez' e heller ober gand an derez-uhella pe an derez estlamma gand eun ano-gwan :

Kaerrañ iliz ! Kaerad iliz ! Kaerad re !

Evid an dud e reer gand *piou ?* a zo unan ha liez.

Piou a glasket (glaskit) ? , Piou eo ho kerent ?

Evid an traou e reer gand *Petra ?* :

Petra a glasket (glaskit) ? A betra e komzer ?

Pa vez kaoz euz tud pe deuz traou unan-hag-unan, e reer gand *pehini ?* en unander, ha *pere ?* el liester :

Pehini a gemerfet (gemerot) ? Pere eo ho tier ?

Ar raganoiou-staga

a a zo eur rannig verb, pe *hag a* evid poueza.

Greet e vez gand *a* pa vez merket ar ger-kent, gand *hag a* pa ne vez ket merket ar ger-kent ha pa vez disklêriet al lavarenn :

An den a gar Doue a zo laouen.

Eun den hag a gar Doue a zo laouen.

Yann, hag a oa koulskoude eur paotr fin, a zo bet tapet.

Pêr, a oa klasket gand e vreur, a zo bet kavet.

Pêr, a glaske e vreur ane(z)añ, a zo bet kavet.

Ne reer ket gand *a* er frazennoù naha, dirag ar raganoiou-gour renadennoù anezo, ha dirag *en em* :

Ar re na welent ket ; Ar re ho kwel ; Ar re en em wel.

Memez tra e heller skriva : *Ar re a 'n em wel.*

peadra :

Peadra d'ober eul lizer.

Deut eo *peadra* da veza eun ano-kadarn : *Kollet am-eus ma feadra.*

a, hag a renadennoù eeun :

An den a glaskan ; Eul laer braz, hag a glasken, a zo bet kavet.

anezañ, anezi, anezo, outañ, outi, outo :
An den a gomzan anezañ a zo braz.
An den a gomzan outañ.
Eun nor hag ah ê (hag eo) kollet an alhwez ane(z)i.
Eun den hag a oa kollet e dok.

Tu a zo da lavared :
Eun den hag a oa kollet e dok gantañ.

Eun nor, kollet an alhwez ane(z)i.
Eun den kollet e dok gantañ.
Eun den kollet gantañ e dok.

Notenn gand an embanner brezoneg :
Implijoud a ra Leclerc, evel an darn-vuia euz ar skrivagnerien a-raog amzer Gwalarn, *pehini* ha *pere* e-leh *an hini, ar re* :

On Tad pehini a zo en neñv a vefe e brezoneg reiz : *On tad, an hini a zo en neñv.*
Yann ha Per, pere am-eus gwelet a vefe e brezoneg reiz : *Yann ha Per, ar re am-eus gwelet.*

An den da behini am-eus roet arhant, a vefe e brezoneg reiz : *an den d'an hini am-eus roet arhant.*

Ha gwelloh e vefe : *On Tad a zo en neñv ; Yann ha Per am-eus gwelet. An den am-eus roet arhant dezañ.*

ma, evid eul leh, pe eun dra a zoñjer ennañ :
An toul ma'h (ma'z) eo bet ennañ.
An nor ma tremenis drezi.
An dra ma soñjan ennañ.

Raganoiou-staga amstriz

kement :
Kement den, kement tra a welfet (weloh).

a gement a
Ne dremene den dre eno a gement na zaluden.

n'eus forz pesort (peseurt) :
N'eus forz pesort bugel a gavfet (gavoh).
N'eus forz pesort levr a lenni.

piou bennag a, kement den a, kement hini a, an neb a :

Piou bennag a dremene dre eno, e saluden anezañ.
Me a zalude kement den a dremene.

kement a :
Kement a lugern n'eo ket aour.

n'eus forz piou, n'eus forz petra :
N'eus forz piou eh (ez) oh.
pe : *N'eus forz piou e vefeh.*

E Kerne hag e Gwened e vez lavaret *ne vern* e-leh *n'eus forz*.

Anoiou-gwan ha raganoiou amstriz

ebed :
Den ebed.

neb :
en neb leh.

hini, hini ebed :
N'em-eus gwelet hini ebed.
N'em-eus gwelet hini ebed anê (anezo).

den, den ebed, nikun :
N'em-eus gwelet den ; N'em-eus gwelet den ebed ; N'em-eus gwelet den nikun.
Notenn : skweriou bet lakaet gand an embanner brezoneg.

tra, netra, netra ebed, mann, mann ebed :
Ne laran tra. Ne laran tra ebed.

all :
An den all ; Eun all.
Ken mad hag all.
En tu all da...
Kemend-all ; Kenkoulz all ; Keid all ; ken ker all ; hag all ; gwech ha gwech all.

... all ebed :
Levr all ebed.

evel :
N'eo ket evel e vreur.
Dishañval eo diouz e vreur.
Eur vro ha n'ê (n'eo) ket Breiz eh (ez) eo.

egile(gourel), eben (gwregel) :
Unan ... eben ; eur re... ar re all ; lod... lod all ; darn... darn all ; darn all.
Unan a lar ya, egile a lar nann.
Lod a dav, lod a gomz.

An eil hag egile ; an eil pe egile ; an eil hag eben ; an eil pe eben.
Deuet (deuit) an eil hag egile.
En em garoud a reont an eil egile.
An eil da zikour eben.

etrede :
En em garoud a reont etrede (etrezo).

pep, bep, pop (pep) :
pep hini :
peb den ; peb de, bemde (bemdez) ; peb noz, bemnoz.
Pep hini ahanomp (ahanom).
Ni on-deus kemeret pep hini e dok.

peb unan :
An amzer vrao a blij da beb unan.

peb a :
peb a hini ; peb a unan ;
Peb a wenneg o-deus bet.
Peb a hini o-desu bet.

ar pep gwellañ (gwella).

peb eil, a beb eil, peb eil tro, pep hini d'e dro :
Skei pep hini d'e dro war an anne (anneo).

Ar gour amresiz er verbou

Pa garer Doue e ver (vezer) evuruz.
(Gweled ar verbou).
Karet ê (eo) Doue en neñv.
Degaset e zo (ez eus) bet lizero(u).

an den, an nen ; an dud ; peb unan ; ni, c'hwi, int ; an nep, an neb ; an hini :
A-wechou e c'hoarz an nen. (lakaet e vez bepred *an nen* goude ar verb).
An neb n'an-deus (n'en-deus) netra, n'hall rei netra.

bennag, bennaked.
Me a skrivio dah (deoh) eur gir (ger) bennag.
Eur pemp-kant den bennag.
Unan bennag ; eur re bennag.

Eun nebeud gand an ano-kadarn en unander pe el liester.
Eun nebeud girio (geriou) ; Eun nebeud gouiziegez.

-ad :
toullad, tokad, torkad : eun toullad gwe(z).

-enn : *girienco (geriennou) ; edenno(u) ; hinienco(u).*

eun :
Eun den ; Eun de (deiz) a oe.

zo :

Kêrio(u) a zo ; En levrio(u) a zo ; Tud ‘zo hag a lar ; Beañ ‘zo (Bez’ ez eus) tud hag a lâ (lar, lavar).

Tud ‘zo a zo yah hirie hag a vo klañv arhoaz.

-mañ- :

An den-ma-den (an den-mañ-den) ; an dra-mañ-dra.

meur a, liez a gand eun ano-kadarn en unander :

Meur a vugel ; liez a vugel a zo dizuj.

Meur a hini, liez a hini :

Me am-eus gwelet meur a hini war droad.

liesoh :

Liesoh a hini...

oll :

E oll vugale ; an oll dud, an dud oll ; arhoaz e teufont (teuint) oll.

pep, peb, bep, beb :

Bep blâ (bloaz) ; peb den an-neus (en-deus) e si ; e pep giz.

oll ; a-bez :

an ti oll a oe devet ; an ti a-bez a oe devet.

en e bez, en he fez, en o fez :

An oan en e bez.

oll ragverb :

glaharet-oll.

oll, ragano :

Oll e teuont.

Me ‘gred e teuont oll.

An oll a lavar ze.

pep tra :

Henez a oar pep tra.

EREADUREZ AR VERB

Ar verb hag e rener

Ma ne vez ket distag ar rener diouz ar verb e vez greet gand dibenn ar verb : *hirie e kanin, e kano*.

Ma vez lakaet ar rener dirag ar verb, ne jeñch ket dibenn ar verb :

Me a gano ; eñ a gano hirie.

Hirie e kano ma breudeur, arhoaz e kano da re.

Displegadur ar verb, gand ma ne vo ket lakaet ar rener dirag ar verb

Merket e vez ar gour gand eun dibenn-verb.

Pa deufont (deuint) ; pa deufont-i.

Er stumm naha e vez greet bepred gand an displegadur-ze :

Ne laran ket.

An dud-mañ ne labouront ket.

E gwirionez *an dud-mañ* n'eo ket rener ar verb : *ont* eo ar rener gwirion.

En doare-gourhemenn e vez greet eveljust memez mod :

Karet (Karit) ho mamm. Bezet (Bezit) truezuz.

Gand eur ger-doarena :

Klañv e vefet (vioh).

Goude eur renadenn eeun :

Doue a garan ; Piou a garet-hu ? (a garit-hu) ; Kridi a ran (Kredi a ran).

Goude eur stagell-islavarenn :

Me 'gred e teuin ; evid ma teui.

An alies a goude eur rakverb, eur renadenn dieeun, eun islavarenn :

Aliez e ouelan ; Da Zoue e kanan meulodi (meuleudi), pe Doue a ganan de(z)añ meulodi ; Mar deuet (deuit) e vefet (vioh) lahet (lazet).

Tu a zo da lakaad an islavarenn, pe eur rakverb pe eur renadenn dieeun e penn ar frazenn :

Mar deuet (deuit), me ho laho, e-leh mar deuet, ho lahin. Arhoaz me ho kwelo.

Goude *koulskoude, kentoh, rak-se, pe, petramant (peotramant), hag :*

Selaouet (Selaouit) hag e klevfet (e klevoh).

Tu a zo da lavared :

Selaouet (Selaouit) ha c'hwi a glevo.

Goude *rag, mez, hogen :*

Rag ni a varvo, pe rag mervel ar refomp (raim).

E penn ar frazenn, goude *e, eh* evid ar verbou *beañ (beza)* ha *mond :*

Eh on en em gwele ; eh ên (een) du-ze.

Ar rener goude ar verb

Ma n'eo ket ar rener eur ragano-gour e vez lakaet goude ar verb hag hennez a jom en unander :

Deuet oll diaoulo(u) an ifern !

N'ey (n'ay) ket ma breudeur.

Med ma vez lakaet *ma breudeur* dirag ar verb, er stumm naha, e vo lavaret :

Ma breudeur n'efont (n'aint) ket...

Pa splann ar stered.

Klañv e vo ma breur.

Ni a welo arhoaz.

Ma breudeur a lavar.

Ar rannouigou verb

a a vez lakaet dirag ar verb goude eur rener, eur renadenn eeun :

Doue a gar.

Doue a garan.

Doue a veulan e vadelez.

e a vez lakaet dirag ar verb goude eur ger-doarena, goude eur renadenn ha n'eo ket eeun, pe goude eun islavarenn :

Klañv e oan.

Arhoaz e tiskuizfet (e tiskuizoh).

D'ar Werhez e ouestlan ma mab.

Pa ven (vezan) skuiz, e kouskan.

Implijet e vez *e* goude ar verbou *kredi, lavared* :

Me 'gred e teuo (teuio).

Gand ar verb *beañ (beza)* e vez greet gand *eh* en amzer-vremañ, en amzer dremenet, en amzer da zond pa vez lakaet e penn ar frazenn :

E vin em gwele.

Memez mod gand ar verb *moned (mond)* en amzer-vremañ hag en amzer-dremenet :

Eh (ez) an du-ze.

Ne vez ket greet gand ar rannouigou-verb

En doare-gourhemenn :

Deuomp (deuom) ; Karet (karit).

Er stumm naha ha goude ar stagellou isdoareenn :

Ne lâran ket ; Pa lâran.

Dirag ar raganoiou-gour renadennoù anezo bet lakaet dirag ar verb, ha gand *en em* :

Pêr ho kwelo. Ar hi en em dago.

Tu a zo da nompas ober gand *eh (ez)* gand ar verb *beañ (beza)* etre an ano-gwan isdoareenn hag an amzer-vremañ :

Klañv on pe Klañv eh on.

Ar verb beañ (beza)

Implij zo

Implijet e vez *zo* goude ar rener :

Me a zo yah ; Ma zud a zo yah ; Ha c'hwi a zo yah ?

Marhadourien a zo en kêr pe En kêr e zo (ez eus) marhadourien.

Beañ 'zo (Bez' ez eus) marhadourien en kêr.

Degaset e zo (ez eus) bet lizero(u).

Erwan a zo toull e lêro (loerou).

Implij eus

N'eus ket arhant er yalh.

N'eus den aze.

geus

Implijet e vez *geus* evid respont *ya* d'eur goulenn naha :

N'eus ket arhant er yalh ? Geus ! (Tu a zo da respont *eus*).

Implij eo

Klañv eo.

Me 'gred eh (ez) eo klañv.

Klañv eo ma zad.

Klañv eo ma breudeur.

Me 'gred eh (ez) eo klañv ma breudeur.

Degaset eo bet al lizero(u).

Doareou-lavar : *gwir eo ; poent eo ; arabad eo ; noz eo ; darbet eo bet din koueza(ñ).*

Me eo klañv ma biz (Me a zo klañv ma biz) ; Ar re-ze eo dornet dê (dezo) (Ar re-ze a zo dornet dezo).

Implij emañ (ema), emaint

Emañ o skrivañ (Ema o skriva).

Greet e vez gand *ema* evid merka al leh :

Peleh emaint ? El leh m'emañ. Emaint en ti. Evel m'emañ, emañ. Emañ ar zoubenn war virvi (vervi). Emañ warnañ dond.

Emañ Yann o labourad. Emañ ma zud o labourad.

E Bro-Leon e heller lakaad eun ano-gwan doareet gand *ema* : *Me 'gred ema klañv ; E tregerieg e vo lavaret : Me 'gred eh eo klañv.*

Gand ar ger *kas* = *striva*, *klask d'ober eun dra bennag* : *Emañ kas dond* (= *ema o klask dond*). *Emañ o klask*.

An doare-disklêria

An amzer-vremañ

Sevel a ra ha kemer e gontell.

Goude *mar* : *Mar deu arhoaz, e welfet (welot) anezañ.*

Daoust ma

Daoust ma'h on klañv...

An amzer-da-zond

Eun Doue hepken 'adori.

A-raog ma kemerin dour benniget. A-raog am-mo kemeret dour benniget.

Ra ; Da

Ra vo meulet Doue ! Doue d'hen pardono ! (d'e bardono !)

An doare-divizoud

Mar ne vijen ket bet eno, e koue(z)e.

Mar be (befe) klañv arhoaz ne welfet (weloh) ket anezañ.

Ni ah ey (ay) da Bariz mar on-de (on-defe) arhant.

Mar be (befe) klañv ar bugel 'vid 'n inderv (enderv), ne (na) gontet (gontit) ket warnañ.

Ar bugel ah ey (ay) d'ho kweled arhoaz d'inderv, mar nefe (en-defe) labouret mad e-pad ar beurevez.

Am (Ma) dornañ (dorna) a rafe, mar larfen ze de(z)añ.

Am (Ma) dornet an-nije (en-dije), mar 'mije laret ze de(z)añ.

Mar karje = m'en-dije karet.

Ar pezh a hell beza : -fen... ; ar pezh na hell ket beza : -jen...

Me garfe mond da vale.

Mar gwelfen eur paour, e rofen de(z)añ an aluzenn.

Mar 'mije arhant, e rojen an aluzenn.

Notenn : Ne vez ket greet bepred an diforh er yez komzet.

Ne gredan ket e larfes ar wirione(z).

Aon am-eus ne larfes ket war wirione(z).

Ne gredan ket e ves pe e vefes gaouiad.

Ne gredan ket em-me pe em-mefe gone(z)et.

Ar stumm e -jen a vez implijet e-leh an hini e -fen :

Me 'grede e karje ma mignon mond da vale.

*Laret an-eus (en-deus) din e roje an aluzenn, mar kavje eur paour.
Kredi a ree am-ije komzet.*

Gand an amzer dremenet euz an doare divizoud e reer bepred gand **-je** :
*Mar 'mije gwelet eur paour, em-ije roet de(z)añ an aluzenn.
Ne ganje ket = n'en-effe ket kanet.*

oen (euz ar verb *beañ (beza)* + ano-gwan verb

Ne vez ket implijet kalz er yez komzet. En e leh e reer gand an amzer beurdremenet :
E-leh *p'am-oe klevet* e vo lavaret *p'am-oa klevet*.

Arru oah ? (Erru 'oah ?)

Implijet e vez an amzer dremenet p'ema an den oh erruoud.

Implij an ano-verb

*Mar plij din moned (mond) eh (ez) in.
Mad e vefe senti.
Eur pehed ê (eo) lared gevier.*

Implijet e vez c'hoaz pa n'eus nemed eur renadenn goude verbou 'zo :
*ankouâd (ankounac'haad), gouzoud, kredi, hastañ (hasta), diski (deski), deraoui, komañs,
karoud* ha goude *mar, pa, pe* :

*Disket (desket) em-eus sinañ (sina).
Mar keret (karit) senti.*

Goude verbou 'zo gand eur renadenn dieeun :
Gourc'h(h)emenni ; lared ; ober :
Me a rey (ray) de(z)añ kerzed.

Stummou goulennata hag estlamma

Petra ober ? Penaoz mond di ? Me, plegañ (plega) da henez !

An ano-verb gand eun araogenn

Da

Greet e vez gand *da* goude verbou dioberuz :
derhel, paouez, moned (mond), diwall :
Diwall da goueañ (goueza).

Greet e vez gand *da* goude verbzou 'zo oberuz :
pidi (pedi), lakaad, lezel, herzel :
Laket (lakait) ane(z)añ da lenn.

Goude ar verbou *dond, rei, kaoud* :
*Deut on da hoari. Roit de(z)añ eul levr da lenn. N'am-eus ket arhant da brenañ (brena)
bara.*

Lavaret e vez ivez :

Gortoz ane(z)añ da zond. Eur gouel a zo da veañ (veza).

De(z)añ d'en em dennañ (denna). Hag Erwan da gemer e gontell. De(z)añ da gerzed êzetoh.

Evidon da veañ (veza) klañv.

evid

Red eo kemer poan evid gonid ar baradoz.

An amzer da lenn.

Diêz d'ober.

dign da veañ (veza) meulet.

evid beañ (beza) karet.

N'on ket evid ober ze.

evid ma vefet (vioh) karet.

daoust da

Daoust din da veañ (veza) klañv. Daoust d'am zad da veañ (veza) klañv.

Araogennou all :

kent, a-raog : kent moned, a-raog moned.

kentoh evid (eged) plega(ñ)

hep, heb : heb labourad. Gwechou 'zo e vez lavaret : kuit da labourad.

anez : anez labourad.

goude : goude beañ (beza) c'hoarzet. Goude c'hoarzin.

gand : gand mond du-ze.

ouz

mired ouz

ouz on gweled.

war

Gand *war* e vez greet paz' eer war-raog

Mond a ra war greñvaad.

en eur, 'n eur, o dirag an ano-verb

Greet e vez gand *en eur* pa vez greet daou dra asamblez :

Lenn a ra 'n eur gerzed. 'N eur lenn gand aket e tisker (tesker).

Eveziadenn : Ma vez lakaet *en em* dirag ar verb e vez greet gand *ouz* e-leh *en eur* :

Kerzed a ra ouz en em glemm. Kalz a Vretoned o-deus mez ouz e gomz (e gomz = komz brezoneg).

Greet e vez gand *o* goude ar verbou a zo o ster *gweled, selled, kleved, santoud* :

Me 'm-eus gwelet ane(z)añ o ouela(ñ).

Ne vo ket greet gand *o* ma n'eus verb ebed, e stumm eun ano-verb, evel renadenn eeun :

Gwelet am-eus sevel an ti-ze.

setu

Setu ma zad o tond.

Gand ar verb **beañ** (beza) :

Eh (ez) on o lenn. Emaint o lenn.

Memez mod gand verbou a zo oh ober eun dra bennag :

Koll a ra e amzer o c'hoari.

Gand ar verb **beañ** (beza) a dalv kement ha **mond da** :

Me a zo bet o weled.

Gand ar verbou a zo o ster **kaoud plijadur, kaoud poan, kaoud mez, beza skuiz, beza e gaou** :

Mez am-eus o weled kement-se.

Skuiz on o klevet anê (anezo).

Poan 'zo o kerzed.

Gand an ano-wan displega :

Hag eñ o vond kuit.

Eveziadenn : Ma vez implijet eur ragano-gour, e vo greet gand **ouz** e-leh **o** :

Skuiz on ouz o hleved.

RENADENNOU AR VERB

Ar renadenn eeun

Me a gar Doue. Doue a garan.

Er stumm naha e vez lakaet *a* hag e teu evel-se da veza dieeun :
Ne gavfet (gavoh) ket a blijadur.

Ar renadenn dieeun

Lakaet e vez eun araogenn dirag ar renadenn dieeun : *da, a, euz* ; *gand* er stumm gouzañv :
Jenovefan en em ouestlto da Zant Per.

Tu a vefe da lavared :

Sant Per en em ouestlto Jenovefan dezañ.

Goude ar verbou ster founner ganto e reer gand *a* :

Kargañ (Karga) eun donel a win.

Goude ar verbou a verk dienez, diouer :

Mankoud a ra a zillad.

On dilivrit a beb droug. (On dieubit a beb droug). pe : euz a beb droug ; deuz a beb droug.

Goude ar verbou *en em zerviji, komz* :

Arabad komz euz a ze, pe euz a ze, deuz a ze.

Goude *kaoud soñj, kaoud ezomm, ober goap* :

Na rez ket goap ahanon.

Me am-eus ezomm a zour.

Pa vez merket eun dra gand ar renadenn e vez greet gand *gand* :

Kargañ (Karga) eun donel gand ar gwin am-eus prenet.

Goloet gand plouz (toenn eun ti-plouz).

Goloet eo a blouz.

gand :

Mond gand e hent.

euz, deuz

Mankoud a ra euz ar pezh a dleje kaoud.

Absolvit eo euz e behed.

Komzet (Komzit) din euz ma mamm.

Ne (Na) rez ket goap euz da vreur.

Roet (Roit) din euz ar bara-ze.

Goude ar verbou *kemer, lemel, tennañ (tenna), evañ (eva)* :

Kemer dour euz eur ster.

Kaoud keu (keuz) :

Kaoud keu euz ar pehed.

Da

Goude ar verbou *rei, diskouez, lared, skrivañ (skriva), kas, teurel ple, trei kein, kaoud c'hoant* : ***Kaoud keu (keuz) da.***

Goude *tennañ da, plegañ, plijoud* : ***ar bugel-ze a denn d'e dad.***

Goude *beañ (beza)* pa dalv "beza perhenn da" : ***An ti-ze a zo din.***

Eveziadenn : ***Dit eo mond, pe dit eo da vond.***

Goude ar verbou *gouelañ, huanadi, pokad* : ***Ar vamm a bokas d'he bugel.***

Goude ar verbou *me a fell din, me a gav din, me a gred din, me a blij din, gwellaad a ra din, brao ê (eo) dit.*

Gand eun nebeud verbou e heller implijoud *da* pe chom heb ober :

Respont dezañ, pe hen (e) respont.

Pardonet (Pardonit) din. Doue d'ho pardono. (er frazenn-ze n'eo ket *da* eur araogenn med eur ger-heta).

da, evid

Evid merka ar pezh emaer o vond d'ober e heller implijoud *da* pe *evid* :

Pilad lann d'ar hezeg, pe evid ar hezeg.

evid

Pa'z eus eur pal e reer gand *evid* :

Labourad evid gloar an Aotrou Doue.

Heb araogenn :

C'hoari boulou.

ouz

Goude ar verbou *stagañ, juntañ, lakaad e pign, ereañ, eren, tachañ, distrei, en em begañ* : ***en em begañ an-eus (en-deus) ouz eur weenn (wezenn).***

Goude ar verbou *senti, selled, evesaad, stourm, en em reudi, enebi, herzel, mired, kuzañ, klenkañ, serri, kaoud rukun, kaoud heug, en em dremen* : ***serret an-eus (en-deus) an nor ouzin.***

Gwechou 'zo e vez lavaret : ***sell ahanon, harz anezañ da vond kuit.*** Gwelloh e vefe ober gand *ouz*.

Memez mod gand ar verbou *c'hoarzin, difenn, anzav, komz, ober gaou, noazoud* : ***Difennet eo din butunad, pe, gwelloh : difennet eo ouzin butunad.***

ouz pe gand

Goude ar verbou *komz, goulenn, en em gannañ, en em ober, en em gustumi, skei, boutañ (bounta), stlepel, strinkañ* : ***Stlepel a reas dour uz e zremm, pe gand e zremm.***

komz : Komz dezañ euz e dad.

Gand ar verb *skei* e lavarer : *sko gantañ* pe *sko warnañ*.

Gand *stourm* hag *en em reudi*, e reer aliez gand *eneb* : *stourmet an-eus eneb din*, pe *en em eneb*.

ouz, e-keñver

Gand ar verbou *hardiad* (*hardisaad*), *sederraad*, *tristaad*, *kriad* (*krisaad*) : *Sederraad a ra ouz* pe *en em heñver*.

diouz

Goude ar verbou : *pellaad*, *kimiadi* : *Pellaet (Pellaït) anezañ diouz ar voger. Kimiadi a rey (ray) diouz e dad*.

gand

Goude ar verb *lezel* : *lez e vara gantañ*.

Goude ar verbou a zo o ster “c’hoarvezoud” pa vez eun ano den pe ano eun dra ha n’eer ket e-barz : *Sellet (Sellit), petra a zo digoueeet (degouezet) ganin. Arru (Erru) e oa gand an dervenn*.

Goude ar verb *kleved* : *Klevet am-eus gand Per*.

digand

Gand ar verbou *goulenn*, *reseo*, *lemel*, *tennañ*, *kaoud*, *laerez* : *Ne houlenin netra digantañ*.

e, en, er

Goude ar verbou *soñjal*, *kregi*, *tapoud krog* : *Soñjet (Soñjit) er maro*.

rag

Kaoud aon rag ar maro.

war

Goude *skei* : *Sko warnañ* pe *gantañ*.

N’eus mann da lared war ze.

diwar

Diskenn diwar varh. Bevañ diwar an aluzenn. Sevel diwar eur hreunenn fall.

gand (gand ar verbou en doare-gouzañv) : *Karet ê (eo) gand an oll. Santez Anna ah ê (eo) karet ar Vretoned ganti, pe ganti ar Vretoned*.

(E leoneg e vez greet gand *a zo* e-leh *ah eo*).

Renadennou divizoud

Al leh

e, en, er, el

e, en Gwengamp ; en ti ; el lorz.

Eet ê (eo) en toull.

e-barz
e-barz an ti, 'barz an ti.

da
Eh an da Boñdi.

etrezeg
Mond a ran 'trezeg Lannuon.

war-du
Mond war-du Lannuon.
Mond a rejont pep hini war e du.

E Goelo hag e Treger-Vihan e vez greet gand *da gê, kê* :
Mond da gê an tan. Ne devez ket d'am hê.

El lehiou-ze e talv *mond da gê* pe *kê* ez eer war-du eul loen a zo e-kichenn, dreist-oll ma vez dañjeruz : *mond da gêd an tan ; ne (na) deuz ket d'am hê.*

Daved, da gâd (da gaoud)
Eh an davedoh, pe eh an d'ho kâd (kaoud).
(E-abarz ar gwerziou koz e vefe posubl lavared : *eh an en ho pete*).

euz, diwar
Gand ar verbou a dalv kement ha *dond er-mêz*.

diouz, diwar
Gand ar verbou a dalv kement ha *mond pell diouz* :
Eet ê (eo) er-mêz euz an ti.
Pellaet (Pellait) diouzin.

a-beurz (a-berz), euz a-beurz, euz a di
Dond a ran a-beurz ma zad.
Laret (larit) de(z)añ euz ma feurz (ferz).

dre, dre di
Tremenet am-eus dre Landi.

kêr
Eh an dr'ar gêr ; Tremenet on-deus dre ar gêr.
(Merzit : *en kêr, dre gêr, euz kêr*).

du-mañ, du-ze, di
Me a ei (ay) du-ze. Emañ du-mañ. Tremenet dre du-mañ. Poent eo mond di.

mêz, mor
Emañ o chom war ar mêz. Diwar ar mêz e teu. Bezañ (Beza) war ar mor. Mond war ar mor.

o

Ar gêr-ze ah on o chom enni.

An amzer

Pegoulz ?

Pegoulz ? En amzer-ze.

Pegoulz ? E miz Ebrel.

Pegoulz ? En eur or maro. (En eur dimeuz or maro).

Pegoulz ? dilun,... dimerher... ; ar blâ (bloaz) tremenet.

da

Da hweh eur. Da guz-heol. D'ar zul. D'ar goañv. D'ar beure. D'an noz.

diouz

Diouz ar beure. Da deir eur diouz an abardae(z).

war

War ar pemde(z).

evid

Evid an noz ('Vid an noz). 'Vid ar zun (zizun). 'Vid an inderv (enderv). 'Vid ar blâ (bloaz).

Fete (feteiz) a dalv kement hag an deiz-mañ. Fenez, e leoneg, a dalv kement hag an noz-mañ.

a deu (a zeu)

Ar zun a deu. Ar miz a deu. Ar bloaz a deu.

*kent ; a-raog (e leoneg : a-barz) ; dindan ; a-benn, war-benn
kent eiz de (deiz) am-mo greet ze.*

beteg, ahann da

Beteg dilun e chomin. Ahann dilun e chomin.

ahann, e penn

'Benn eiz de (deiz) eh in kuit.

Dilun 'penn ar zun (zizun). Dilun 'penn eiz de (deiz).

Hirie 'penn pemzeg de (deiz). An de-mañ (deiz-mañ) 'penn pemzeg de (deiz).

amañ

'Ben eiz de (deiz) amañ eh in e-kuit.

e-pad, hed

Bet ê (eo) klañv e-pad teir zun ; hed eur miz.

Pegeid ?

Abaoe pegoulz ?

En pegeid ?

**Greet an-eus (en-deus) ze en eiz de (deiz). Greet an-eus ze en eun devez.
Greet an-eus ze 'n eur ober eiz de (deiz) (Se 'zo eur stumm poueza).**

abaoe

**Abaoe dilun eh a Yann d'ar skol ; adaleg dilun eh ei (ay) Yann d'ar skol.
(abaoe a zo eur ragverb ivez : N'am-eus ket gwelet ane(z)añ abaoe).**

diwar

Diwar dilun eh ei (ay) Yann d'ar skol. Diwar vremañ.

a oa, a zo

Eiz miz a oa e oa klañv.

Eiz de (deiz) 'zo emañ er gêr.

(Gand eur re-lavarenn : Abaoe eiz de (deiz) 'zo emañ er gêr).

on

Pemzeg vlâ (vloaz) eh on.

An doare, an abeg, eur benveg, ar perag, an darn

gand : gand hardiegez.

a : a vouez uhel.

war : war droad ; war yun. War nij emañ (ema bremañ o nijal).

diwar : diwar-nij (boaz eo da nijal).

e, en, er

er stumm-mañ ; trehi en kaerder.

dre

dre garante(z).

da

da gentañ.

gand

gand eur gontell ; gand eur hleze ; gand e droad.

Yann a zo bet lahet gand e vevel.

Spontet ê (eo) gand an drouz.

Mervel gand an naon.

Koll a rei (ray) e benn gand an dra-ze.

Tripal gand al levenez.

Krenañ gand an aon.

Er frazennou naha :

Ne welan netra gentañ.

*abalamour da, en askont da, evid
Abalamour dit ; evid da yehed.*

*war, diwar bouez
Me a dalh ar blei(z) dre e ziskouarn ; Me a dalh ar blei(z) diwar-bouez e ziskouarn.*

*en ere
Ar miliner laer a vleud.
'Vo krouget 'n ere e veud.*

Kementad (muzulia, pellder). Talvoudegez

*hed, evid an hirder ; treuz, led, evid al ledander pe eun hirder bihan.
Krennet am-eus ar vaz hed daou droatad.
Treuz daou veudad (meutad) am-eus moannaet an treust.*

*Greet e vez gand treuz goude an derez-uhelloh pe an derez-uhella :
Treuz daou viz (viziad) eh ê (eo) brasoh evidon.*

*a-hed, a-ledander, a-led, a-uhelder ; treuz
Daou droatad treuz ha pemp a-hed.
Pemp troatad a uhelder.*

*Eur voger a dregont troatad a hed, pe Eur voger a zo enni hed tregont troatad, pe Eur
voger a zo enni tregont troatad a hed.*

*hed, war hed
Teir leo, pe Hed teir leo am-eus kerzet war-dro gantañ.*

*diouz
Kreñv diouz e vent ; E zillad a zo diouz e vent.
Tapet ê (eo) bet diou lê (leo) diouz Alre.*

*Heb araogenn :
An dra-mañ a dalv kant lur.*

EREADUREZ AR RAGVERB

Pegementad

| | |
|----------------------------|---------------------------------|
| <i>Pegement a vugale ?</i> | <i>Pegement a dour (zour) ?</i> |
| <i>Nag a vugale ?</i> | <i>Nag a dour (zour) ?</i> |
| <i>Kalz a vugale.</i> | <i>Kalz a dour (zour).</i> |
| <i>Re a vugale.</i> | <i>Re a dour a (zour).</i> |
| <i>A-walh a vugale.</i> | <i>A-walh a dour (zour).</i> |
| <i>Muioh a vugale.</i> | <i>Muioh a dour (zour).</i> |
| <i>Nebeud a vugale.</i> | <i>Nebeud a dour (zour).</i> |

Ped a ? a vez heuliet gand eun ano-kadarn el liester :

Ped a vugale ?

Ma ne vez ket lakaet **a** goude **ped**, eun ano-gwan eo hennez, hag e vez heuliet gand eun ano-kadarn en unander :

Ped bugel ?

Meur a, liez a a vez bepred heuliet gand eun ano-kadarn en unander :

Meur a vugel.

hag a

Kement a zaout hag a gezeg.

Kemnt a dour (zour) hag a jistr.

re

Re a zo ahanoh amañ.

Ragverbou doarea

Greet e vez gand an ano-gwan :

buhon (buan), ano-gwan ; *buhon (buan)*, ragverb.

A-hend-all e vez greet a-wechou gand eur ragverb evel pa vefe eun ano-gwan :

dioustu ; eun den dioustu.

Ragverbou “ya“

ya, ya ‘vad (ya avad)

Brao ê (eo) an amzer hirie ? Ya, ya ‘vad.

Ma vez roet da wir ar goulenn gand an hini a zav ar goulenn, ha ma fell d’ar responder lavared ar hontrol heb ober gand ar stumm naha, e vo respontet gand **ya da !**, evid ober goap, pe gand **iê** :

Brao ê (eo) an amzer hirie ? Ya da ! pe iê.

Ma vez greet ar goulenn gand an hini a zav anezañ, e vo respontet gand **ya** er stumm **ya** :

Klañv out hirie ? Ya, pe Ya, klañv on.

eo, eus

Da dad n'eo ket klañv ? Eo.
N'eus den er gêr ? Eus.

Ne gani ket ket hirie ? Kanin.
Ne goue(z)o ket a hlao fete (feteiz) ? Koue(z)o.

Ar verbou *ober, gouzoud, mond, beañ (beza)* a gemer eur *g* dirag ar stumm respont :
Ne ri ket an dra-ze ? Grin.
Emichañs n'ouzout ket da gentel ? Gouzon.
Hirie n'i ket da vale ? Gin.
An dra-ze n'eo ket dit ? Geo.
N'eus den er gêr ? Geus.

Aliez e vez greet gand *geus*

Ne gani ket fete (feteiz) ?
Geus, me a gano pe kanañ a rin.

Fete (Feteiz) ne goue(z)o ket a hlao ? Grey (gray).

Ne oa ket da vreur ganit ? Boa.

Ragverbou naha

Yann na (ne) lavar netra ? pe Ne lavar Yann netra ?

Ne welan ket, med e Tregerieg e leverer kentoh '*welan ket*.

Ma breur n'ê (n'eo) ket yah.
Paol n'ey (n'ay) ket da Rom.
Per n'an-eus (n'en-deus) ken a dad.
N'eus ket a dabut du-mañ.

nan (e-leh *na*) dirag eur vogalenn :
Pôl (Paol) nan ey (n'ay) ket da Rom.

Nann a vez greet gantañ pa responder d'eur goulenn naha :
N'oh ket yah ? Nann.
N'oh ket yah, me 'gred. Nann.

N'on ket

Ma vez respontet d'eur goulenn "ya" en eur naha, e vo greet gand ar memez verb hag a oa er goulenn :

Klañv oh ? N'on ket.
Klañv oh, me 'gred. N'on ket.

avad a vez lakaet aliez goude *nann*
N'oh ket bet o vale ? Nann avad.
da bet lakaet goude *nann* a verk an digasted :

Nann n'oh ket o vale ? Nann da.

Ragverbou goulennata

ha ? ne vez ket greet gantañ.

Gand ar vouez e vez greet evid ar goulenn goulennata :

Dond a refet ? e-leh *Ha dond a reot ?*

C'hwi a deuio ? (*Ha c'hwi a deuio ?*)

Ne deuio ket Per ? pe *Per na (ne) deuio ket ?*

Pa gomzer e reer gwechou 'zo gand *na* :

Na c'hwi yah ? Ya. Na c'hwi ? (*Ha c'hwi a zo yah ? Ya. Ha c'hwi ?*)

kuita ? laka ? laka 'ta ?

a vez implijet gwechou 'zo evid lavared *ha n'eo ket ?*

Notenn bet lakaet gand Leclerc : E Kerne-uhel e vez greet gand *na on 'ta ?*

ha ? Hag-eñ ?

N'ouzon ket ha te a zo fur ? pe *N'ouzon ket hag-eñ eh out fur ?*

daoust hag-eñ ? c'hwistim hga-eñ ?

Daoust hag-eñ eh out fur ?

EREADUREZ AN ARAOGENNOU
(Studiet eo bet en a-raog an dra-ze gand renadennou)

Doareou-lavar

a

a-stroñs ; a-vern ; a-lammo(u).

da

Anvet eo bet da berson.

Dre

Gwerzañ dre bez.

Gwerzañ dre re.

Gwerzañ dre zousenn.

Daou dre gant.

Labourad dre ze(zeiz, zevez).

Labourad dre varhad.

Dre gaer pe dre forz.

Dre e gousk.

Dre e huñvre.

e, en

En o zouez, en o mesk.

En eun taol.

Gwisket en du.

Emañ en e zav.

Emañ en e goaze(z).

Emañ en e hourve(z).

Gand

Da ê (eo) ganin.

Droug ê ganin.

Gwell ê ganin.

Kerse ê ganin.

Mar plij ganah (ganeoh).

Neuze e teuas gantañ komzo(u) direiz.

Mond gand an hent.

Mad ê ar bed gantañ.

A-liou gand...

A-vent gand...

ouz

Bevañ diouz e froudenn.

Ober diouz ze (se).

Dispign diouz e zanve(z).

N'eo ket diouzin mond hirie en kêr.

En em gemer a rin diouz skoulmañ an daou benn.

Labourad diouz an de (deiz).

Diouz an tu-ze.

war

Beañ (Beza) war ar mêz.

Beañ war ar mor.

Beañ war varr.

Beañ war neu.

Eun evn war nij.

Beañ war ar bale.

Beañ war zav.

War zav !

Beañ war hed.

Beañ war evez.

Pres a zo warnon.

Klask a zo warnout

Kerzed a ra war e nañ (e Leon : war e horregez).

Deut ê war droad.

Deut ê war varh.

An dour ah a war griski (greski).

Mond a ra ar hlañvour war wellaad.

War goust.

War digare(z).

War arbenn da...

War goll.

War bouez eur gordenn.

War bouez nebeud a dra.

Diwar

Sevl gwirio(u) (taillou) diwar ar bobl.

Bevañ a ra diwar ma houst.

Diwar hirie.

Prezeg diwar-benn ar maro.

EREADUREZ AR STAGELLOU

ive (ivez) a vez lakaet bepred e fin al lavarenn.

Me ive.

avad, vise (evid se)

Ma zad vise, peleh emañ ?

eta

Dleoud a reom eta karoud an Aotrou Doue.

zoken, end-eün

Ar vugale zoken a zo deut.

ha

Ma zad ha ma mamm.

Eur ger goulennata eo *ha* ivez :

Ha te a deuio ?

Na

Na ma zad na ma mamm na (ne) deuio.

Ne deuio na ma zad na ma mamm.

Gwechou 'zo ne vez ket lakaet *na* dirag ar ger kenta :

Ne deuio ket ma zad na ma mamm.

Yann na gomz na na hoarz.

E-barz ar soniou pobl e vez kavet gwechou 'zo *na*, heb ster ebed, a dalv evid eur zilabenn :

Neuze tad ar martolod, 'n eur vond 'trezeg ar heur

A stouas na d'an douar, dirag an aoter veur.

EREADUREZ AL LAVARENNOU

Poueza war eur ger en eur frazenn asant

Poueza war ar rener :

Ar bugel a zo fur.

Ar bugel a zesk e gentel.

Ma zad eh ey (ay) fete (feteiz) da Bariz.

Ma herent a bedo evidon pa vin maro.

Poueza war an doareenn pe war ar renadenn :

Fur ê (eo) ar bugel.

E gentel a zesk ar bugel.

D'eur paour an-eus (en-deus) ma breur bara.

E-pad div eur (eurvez) an-neus (en-deus) kerzet ma breur.

Fete (feteiz) eh ey (ay) ma zad da Bariz.

Pa vin maro, e pedo ma herent evidon.

Ar verb er penn :

Gand ar verb *beañ* (*beza*) ; gand ar verb *mond* : (pe gand n'eus forz pe verb e stumm an ano-verb).

Bet ê (eo) fur ar bugel.

Beañ (Bez') 'vo fur ar bugel.

Desket an-eus (en-deus) ar bugel e gentel.

Diski (Deski) a rey (ray) ar bugel e gentel.

Roet an-eus (en-deus) ma breur bara d'ar paour.

Rei a rey (ray) ma breur bara d'ar paour.

Moned a rey (ray) ma zad da Bariz.

Pidi (Pedi) a rey (ray) ma zud evidon pa vin maro.

Goud (gouzoud) a ouzon ma hentel.

E penn ar frazenn ez eus tu da lakaad renadenn eun ano-kadarn, hini eun ano-gwan pe an hini deuz eur verb :

Per ah ê (a zo) melen e vleo.

Per ah ê (a zo) mezuz de(z)añ tehel.

Per am-eus laret de(z)añ chom.

hag a

Glav (glao) a goue(z), hag a goue(z).

Koue(z)añ a rei (ray), hag a rei (ray).

E-leh *hag a* e vez lavaret gwechou 'zo *nag a, ez a*

Frazennou naha

ne, na...ket

Yann na (ne) lar ket a hevier.

Yann na (ne) lar ket gevier.

Yann n'an-eus (n'en-deus) ket laret a hevier.

Yann n'eo ket koue(z)et.

Pa'z eus e-barz ar frazenn eur ger naha e-leh *ket, ebed, netra, mann, biskoaz, biken, morse,* ne vez ket lakaet *ket* :

N'am-eus gwelet den ebed.

Biskoaz kemend-all n'am-oa gwelet.

Bez' e heller lakaad *den, hini* e-leh *ebed* :

N'am-eus gwelet den.

N'am-eus kavet hini.

nemeur

Gand *nemeur* e vez lakaet *ket* :

Ne welan ket nemeur.

ken (mui e leoneg)

Ne vez ket lakaet *ket* :

Ne welan ken Per, pe Ne welan ket Per ken.

Ne goue(z) ken a hlao pe Ne goue(z) ket a hlao ken.

nemed, 'med

Ne ra nemed gouelañ pe Ne ra ket 'med gouelañ, pe Gouelañ ne ra ken.

n'eus forz, n'eus ket a forz

Ne ran forz pe Ne ran ket a forz.

Evid naha e vez greet a-wechou gand *tremen heb, chom heb* dirag eun ano-verb :

Yann a dremen heb lared gevier.

Tremen heb lared gevier (en doare-gourhemenn : *Ne (Na) laret (larit) ket a hevier*).

Med e heller lavaret :

Red ê (eo) kared gaou ebed.

Ma breur ne lar netra dit pe Ne lar netra ma breur dit.

Ma zad n'eo ket klañv pe N'eo ket klañv ma zad.

Ral a wech e vefe lavaret :

Dit ne lar ma breur netra.

evid

Gand *evid* e vez lakaet an ano-gwan doareenn war e lerh :

Evid klañv n'eo ket ma zad.

Posubl eo lakaad *evid* ivez dirag ar renadenn a zo e penn ar frazenn :

Evid dit ne lar ma breur netra.

ne... ket hepken, hag ive (ivez), ouspenn ze, e-tu-hont da ze, ha gwell c'hoaz, ha gwasañ 'zo, ha muioh c'hoaz, 'zo kaerroh :

Anave(z)et ê (eo) n'ê (n'eo) ket hepken en Frañs, mez er bed-oll.

Pinvig (Pinvidig) ê (eo), ouspenn-ze, madelezuz.

n'ê (eo) ket a-walh :

N'ê (N'eo) ket a-walh de(z)añ beañ (beza) pinvig, beañ (beza) ê (eo) ive madelezuz.

kennebeud

Na me kennebeud.

Evid poueza e vez lakaet *na ne* dirag ar verb :

N'ei (N'ey) ket ma breur da vale hirie, na n'eh ei (ay).

na n'eh ay : sur eo ne daio ket.

Frazennou goulennata

Dond a refet ? (a reoh ?).

Ha dond a refet ? (a reoh ?)

C'hwi na deufet ket ? (ne deuoh) ket ?

Piou a zo deut ?

Pesort tud a zo deut ?

Piou eo ar roue ?

Piou a glasket ? (a glaskit ?)

Piou a glasket c'hwi ? (a glaskit c'hwi ?) – a glasket-hu ? (a glaskit-hu ?)

Penaoz e teufet (teuoh) du-mañ ?

Penaoz e teuio ma mignon dumañ ?

Penaoz e teuio ma mignoned dumañ ?

Penaoz ober ?

Frazennou estlamma

pegen ! pegement ! pegeid !

Pegen treud ê (eo) !

O ! pegen hir eo an noz !

Pegement a dud ?

pebez !, na, nag

Pebez den !

Nag a dud !

Na hir ê (eo) an noz !

ken, kement, keid

Ken stank ê (eo) an dud diboell !

Keid ê (eo) bet oh ober war e dro !

Ken pell ê (eo) bet oh ober war e dro !

-ad

Brasad den !

Treutad eh ê (eo) !

Pellad ê (eo) bet oh ober e dro

IMPLIJ AN DOARE DIVIZOUD

*Me 'h afe eno gand plijadur.
Emichañs, n'oullfes ket mond eno.
Mond a-walh a rafes eno ?
Gadn pebez plijadur eh afen eno !*

An doare-gourhemenn

*Kerz !
Kerzet ! (Notenn gand an embanner brezoneg : **Ma kerzo eñ**).
Kerzent ! (Notenn gand an embanner brezoneg : **Ma kerzint !**)*

Implij an amzer-da-zond

*Eun Doue hepken 'adori.
Eun Doue hepken ah adori.*

Doare heta

*ra
Ra vin karet gand Doue !
Ra vo meulet Doue !
Doue ra vo meulet.
Meulet ra vo Doue !*

*da
Doue d'ho pêo (paeo) !
Doue da bardono an anon !
Doue da bardoni an anaon !*

*plijet !
Plijet gand Doue ma teuio ma mab en-dro !*

*ma (ma vez laket **O !** dirag).
O ! ma teuio ma mab en-dro !
(E Kerne-Uhel e vez greet gand **ma** e-leh **ra** pe **da**).*

EREADUREZ AN IZ-LAVARENNOU

*Me a gred e kavo ho preur e hent.
Skoet (Skoit) gand ho marh evid ma kemero an teh.
Pa gerzo ma bugel e vo stad vraz ennon.*

Gand ar verb *am-eus* :
Me a gred ho-peus sehed.

Gand ar verb *beañ (beza)* e vez lakaet an doareenn goude ar verb :
Lavar din hag-eñ eh eo klañv da dad.
Gand eur verb all e hell beza lakaet an doareenn goude ar verb pe e dibenn ar frazenn :
Lavar din hag-eñ e chomo kamm da dad pe Lavar din hag-eñ e chomo da dad kamm.

Notenn : Chom a ra ar verb en trede gour unan pa vez lakaet ar rener goude :
Me a gred e kavo ho preudeur o hent.

Pa vez lakaet an iz-lavarenn e penn ar frazenn e vez lakaet e dirag verb ar bennlavarenn :
Pa gerzo ma bugel e vo stad ennon.
Med : *Stad a vo ennon pa gerzo ma bugel.*

Rannig-verb ebed (stagellou) dirag ar verb :
*Me gred ne gerz ket mad (ne da ket mad en-dro) ma horloj (horolaj).
Me 'gred am-eus kollet ma zok.
Gra ne gollo ket da vab e amzer.*

Goude verbou 'zo : *lared, toui, diskoue(z), prometi, kridi (kredi), soñjal, kavoud, beañ (beza) en gortoz, esperi, kaoud doutañs (douetañs), gouzoud, kaoud soñj, kaoud koun, ankouaad (ankounac'haad), beañ (beza) sur, gweled, teurel ple, santoud*, e vez greet gand eun iz-lavarenn en doare-disklêria gand ar rannig *e* :

*Me 'gred e teuio ma breur.
Me 'gred ne deuio ket ma breur.*

Memez mod goude *seblantoud a ra din, kavoud a ra din, soñjal a ra din, kridi (kredi) a ra din, gwir ê (eo), eun dra zur ê (eo), anad ê (eo), sklêr ê (eo), eun dra sklêr ê (eo)* :
Seblantoud a ra din e teuio ma breur.

Penaoz

Greet e vez gwechou 'zo gand *penaoz* pa'z eus eul lavarenn bennag stag ouz an iz-lavarenn :

Ar Skritur Zakr a lar penaoz Doue, goude beañ (beza) krouet ar bed, a ziskuizas ar seizved de (deiz).

Med gwelloc'h eo lavared : *Herve(z) ar Skritur Zakr, Doue, goude beza krouet ar bed, a ziskuizas ar seizved deiz.*

Arabad lavared traou evel :
Me 'gred penaoz ma breur a deuio arhoaz. Red eo lavared : *Me 'gred e teuio ma breur arhoaz.*

Greet e vez gand an doare-disklêria hag ar rannig-verb *e* goude ar verbou-mañ :
beañ (beza) laouen, beza souezet, stad a zo ennon, droug a zo ennon :
Stad a zo ennon eh oh deut.

Gwechou ‘zo e vez lakaet *dre ma, abalamour ma, o veza ma*, goude ar verbou-ze :
Stad a zo ennon abalamour ma’h oh deut.

e a vez lakaet, er stumm asantadenn goude :
Me a fell din, me a vank din, ne houllan ket, me a garfe, aon am-eus, mired ouz, diwall ;
mad ê (eo), red ê (eo), arabad ê (eo), posibl ê (posubl eo) :
Me a fell din e teufe.
Red ê (eo) e vefe klañv pa ne deu ket.

ne er stumm naha :
Me a garfe ne deufe ket.

Notenn : Goude an oll verbou-ze e heller ober gand *da* + an nao-verb :
Mad ê (eo) de(z)añ labourad.

Goude *gand aon, bete (beteg) goud (gouzoud)* e vez greet gand an doare divizoud e *f* :
Beet (Bezit) war evez gand aon ne deufe.
Beet (Bezit) aon gand aon ne deufe.

Goude ar verbou *goulenn, gourhemenni, lared, ober* e vez lakaet *ma* gand an amzer da zond :
Goulennet (Goulennit) ma teuio warhoaz.
Gra ma tisko (tesko) e gentel.

Gand *da* :
Gra de(z)añ deski e gentel.

Goude *ne gred ket, n’eo ket laret* e vez greet gand an doare-divizoud e *f* :
Ne gredan ket e kouskfe ma breur.
N’ê (eo) ket laret e teufe ar medisîn arhoaz.

Med e vez greet gand an doare-diklêria, memez er stumm naha, pa vezer sur e vo greet an dra :
Ne oar ket eh on klañv.
Ne gredan ket e ree glao neuze.
Med gand an doare-divizoud e *j* :
Ne gredan ket e raje glao neuze (=ne gav ket din e vije bet glao neuze).
Ne gredan ket e raje glao mar savje an avel.

e, eh, ma
Me ‘gav eh ê (eo) yen an amzer.
Ne gredan ket e rafe glao.
Ne gredan ket an-nefe (en-defe) greet glao.

Greet e vez gand amzer beurdremenet an doare-divizoud e *j* :

*Eñ a felle de(z)añ am-mije komzet.
Eñ a grede am-mije komzet.*

Ar goulennata dieeun

Laret (Larit) din penaoz eh in da Bariz.

Pa vez eeun ar goulenn e lavarer :

Penaoz eh in da Bariz ?

hag-eñ e

Lavar din hag-eñ eh i da Bariz.

N'ouzon ket hag-eñ eh eo eet ma hoar d'ar gêr.

ha

*N'ouzon ket ha klañv e chomo ma mignon, pe N'ouzon ket ha ma mignon a chomo klañv,
pe N'ouzon ket ha chom a rey (ray) klañv ma mignon, pe N'ouzon ket ha chom a rey (ray)
ma mignon klañv.*

daoust ha, c'hwistim hag-eñ

Daoust ha te ah ey (ay) da Bariz ?

Daoust hag-eñ eh i da Bariz ?

C'hwistim hag-eñ eh ey (ay) da Bariz ?

C'hwistim eh i da Bariz ?

Notenn : *c'hwistim* ne vez implijet nemed e Goelo hag e Treger bihan.

Notenn : Gwechou 'zo, med eun dra fall eo, e reer gand *mar* e-leh *hag-eñ* :
N'ouzon ket mar gê (geo, deo) eet ma hoar d'ar gêr.

Ar goulennata eeun

Lavar din petra ober.

N'ouzon petra ober.

Laret (Larit) din hag-eñ e vo brao an amzer.

Ne ouien ket hag-eñ e vije brao an amzer.

evid ma, evid (Dirag ne... ket e reer gand evid e-leh ma).

Kerzet (Kerzit) dousig evid ne goue(z)fet (gouezfeh) ket.

Izlavarennou abeg

dre ma, abalamour ma

Berr ê (eo) warnañ dre m'an-deus (m'en-deus) kerzet re vuon (vuan).

mes

N'eo ket e vefe droug mes pleustri a ra tud droug.

penegwir (pa 'z eo gwir, peogwir), pa

Penegwir eh eo klañv ma breur, n'hell ket mond er-mêz.

*Pa'h eo klañv ma breur, n'hell ket mond er-mêz.
Pa oa klañv n'helle ket dond.*

Pa vefe red merka eun dra dremenet e reer gand an doare-divizoud e **j** :
Pa vije klañv n'helle ket dond.

o veañ (veza) ma, en damant ma :
O veañ (veza) m'eo louz an amzer n'in ket da vale.
Notenn : ne vez ket greet aliez gand *en damant ma*.

evel ma
Evel ma oa droug...

ya da, iê = hag-eñ
Ya da ! hag-eñ eh ê (eo) klañv.

Ne vez ket greet gand *ma* ma komañs an izlavarenn gand eun ano-gwan verb :
Ar foenn a oa ponner, glebiet ma oa bet.
pe : *Ar foenn a oa ponner dre ma oa bet glebiet.*

Izlavarennou pal eun dra

evit ma, ma
Deuet (Deuit), evit m'ho kwelin.
Kerzet (Kerzit) dousig evit na gouefet (gouezfeh) ket.

Goude *evit* e vez greet aliez gand an ano-verb :
Labouret (Labourit) evit gonid (gounid) ho puhe(z).

da
Deuet (Deuit) amañ, din d'ho kweled ervad.

Izlavarennou hed-ha-hed

en heveleb doare ma (e leoneg *ma* nemetken), *kement ha kement bihan ma*
Plijoud a reas d'ar roue, en heveleb doare ma teujont da veañ (veza) mignoned vraz.
Notenn ; E tregerieg ne reer ket aliez gand ar stumm-ze. Ober a reer kentoh gand : *Plijoud a reas d'ar roue ha dre ze e teujont da veañ (veza) mignoned vraz.*

ken, kement... ma, ken ; keid... ma, keid... ken
An heol a zo ken lugernuz ken n'heller ket selled outañ.
N'heller ket selled ouz an heol : ken luguernuz ê (eo) !
Kemend a venvio (vinviou) a doug ken n'hell ket kerzed, pe N'hell ket kerzed gand a venvio a doug (a zoug).

a-walh... evit ma, re...
Labouret a-walh an-eus (en-deus) evit ma vo kurunet.
Labouret a-walh an-eus (en-deus) evit beañ (beza) kurunet.

Izlavarennou aotreenn

daoust ma, petra bennag ma, goude ma
Daoust ma oa klañv, e oa seder.
Petra bennag ma oa klañv, e oa seder.
Goude ma oa klañv, e oa seder.

Daoust... da
Daoust de(z)añ da veañ (veza) klañv, e oa seder.
Daoust d'am mab de veañ (veza) klañv, e oa seder.

evid
Eviñ da veañ (veza) klañv, e oa seder.

Notenn : E leoneg e vez greet gand *evid* evel e tregerieg gand *daoust* :
Evid dezañ beza klañv ; evid d'am mab beza klañv.

hag-eñ
Ma zad a oa seder, hag-eñ e oa klañv.
Ma mamm a oa seder, heg-eñ he-doa poan-benn.

hag + ragano-gour
Skuiz ê (eo), hag eñ yaouank.
Chom a ra seder, ha hi en pred ar maro.
Delhel a reont da skei, hag i koue(z)et.

daoust, n'eus forz
Daoust pe deui pe ne deui ket.
N'esu forz pe deui pe ne deui ket.

Gand an doare-gourhemenn :
Deuet pe ne deuet ket. (Deuit pe ne deuit ket).

ha pa, hag e
N'halljeh ket ha pa 'vijeh roue.
N'halljeh ket hag e vijeh roue.
Ha pa vijen maro, am-ije soñj ahanoh.
Hag e vijen maro, am-ije soñj ahanoh.

Notenn : Aliez e vez greet gand *na, nag* e-leh *ha, hag*.

Lavarennou gand eur ster divizoud

mar
Mar deu e kanin.
Mar deufe, e kanfen.
Mar kane, an oll a dave.
Mar bijeh deut, am-ije kanet.
Mar 'n-eus (en-deus) an den-ze nebeud a vado(u), daoust ha c'hwi hen disprizo ?

Mar gê (deo) klañv, me a zo yah.
Mar be klañv, e teuio war e giz.
Ma ne vijes ket digoueet (degouezet), e oan maro.

Mar en doare kuzulia :
Mar gafen di ? (ma'z afen di ?).

mar

Pa vez heuliet *mar* gand amzer-vremañ an doare-disklêria e vez lakaet eur *g* dirag *ê* : *mar gê klañv (mar deo klañv)*.

Memez mod eo evid ar verb *mond* en amzer-vremañ, en amzer dreemenet an doare-disklêria hag en doare divizoud : *mar gra ; mar goar*.

ma, ma'h

ma a vez greet gantañ gwechou 'zo e-leh *mar* : *ma ne deu ket ; ma'h ez*.

paneved ma

Paneved ma'h on en em gavet eno.

Paneved ma'h out digoueet (degouezet).

Notenn ; goude *paneved* e vez greet kentoh gand *e* eged gand *ma*.

E Goelo e reer gand *merag* : *Merag eh on en em gavet eno*.

evel pa, evel pe

Lakaet e vez ar verb en doare-divizoud :

Komz a ra evel pa vije goui(z)ieg.

gand ma, beteg ma, mar

Mond a rin, gand ma teufet (teuot).

gand + an ano-verb

Gand dond du-mañ, am gwelfet (gwelot).

nemed, 'med ma

Ne ran ket forz, 'med ma kanfet (kanot).

Mad eh a an treo (traou), nemed ma'h ê (eo) braz on naon.

Notenn ; goude *nemed* e vez greet kentoh gand *e* eged gand *ma*.

nemed ha, 'med ha

E Goelo e vez greet gwechou 'zo gand *sepet ha*.

Dond a rei (ray) ma breur, nemed ha klañv e vefe.

Dond a rei (ray) ma breur, nemed hag eñ a vefe klañv.

Me am-eus laret de(z)añ tremen heb dond, nemed ha dond a raje e dad gantañ.

Lavarennou amzer

pa, pan, pe, pen ; evel ma ; ken, seul ; ken liez gwech ha ma, ken liez gwech 'vel ma ; seul liez gwech ha ma, seul liez gwech 'vel ma ; bep tro ma

Notenn : *pa* ha *pe* dirag eur vogalenn a deu da veza *pa'h, pe'h*.

Pa'h a an dud en kêr.

*Evel ma oa oh arruoud (erruoud) e koue(z)as.
Pa ve fur e ve (vez) meulet.*

*pa, pe
Bremañ pen ê (p'ema) kreñv.*

*e-pad ma
E-pad ma veve...*

*e-keid ma, e-keit ha ma, endra ma, tra ma
E-keit ha ma vevin...
Endra ma hallan...*

*goude ma
Goude ma oa koue(z)et.
E leoneg e vefe lavaret : Goude dezañ koueza.*

*kenkent ha ma, adaleg ma, dal ma
Dal ma oa digoueeet (degouezet), e koue(z)as klaañv.
Notenn : Gwelloh e vefe lavared : Dal ma oe...*

*abaoe ma
Aboe ma'h om e miz genver.
Setu tri bla (bloaz) abaoe ma'h on klañv.*

*Kent ma, a-raog ma, (a-barz ma e leoneg)
Skuiz e oa, a-raog m'an-doa (ne-doa) greet eur leo.*

*a-benn ma
Kempennet (Kempennit) an ti a-benn ma tigouein (tegouezin).*

*ken ma
Notenn : Sañset e vefe gwelloh lavared ken na.
Ken ma vefet echu (vefot).
Notenn : Ken ma vefet echu a vefe gwelloh eged Ken ma po echu.*

*a-boan, a-veh... ma
A-boan ma oa noz, ma'h arruas (erruas) ma breur.*

*setu ma
Setu ma teu ar paotr en ti.*

*ma
Arru (Erru) e oa er gêr, ma oan c'hoaz ouz hen gortoz (ma oan = pa oan).*

*goude, a-raog, kent
Goude goude, a-raog, kent e vez greet aliez gand an ano-verb :
A-raog dibri (debri).
Goude beañ (beza) debret.*

Goude dibri (debri).

Setu

Setu ma mab o tond.

Setu ma mab digouezet (degouezet).

Setu digouezet (degouezet) ma mab.

Lavarennou keñveria

evel ma + verb ; evel ma n'eo ket meneget ar verb :

Ar vuhe(z) a dremen evel ma tremen eur skeud.

Ar vuhe(z) a dremen evel eur skeud.

dre ma, beb ma (seul ma e Kerne)

Dre ma kresk e fura.

diouz ma, evel ma

Mervel a reer diouz ma ve bet bevet.

kement... ha ma, keit... ha ma, ken... ha ma ma vez lakaet ar verb ; ha, hag ma, koulz, kenkoulz ma vez goloet ar verb :

N'eus ket eur vro ken kaer ha ma'h ê (eo) on hini.

N'eus ket eur vro ken kaer hag on hini.

Me a rey (ray) ze kenkoulz ha c'hwi.

Ken fur den ha ma zo (ma'z eus) er vro eh ê (eo) Per eh ê (eo).

Kenkoulz evelдох (n'eo ket ken mad ha ha).

N'an-deus (N'en-deus) ket kement ha yehed hag a volante(z) vad.

kement ha + ano-verb

Kement ha mond da Lannuon eh ê (eo) koulz din tremen dre Blouared.

Kement ha lared...

kement ha

Da lod n'ê (n'eo) ket kement ha ma hini, e-leh n'ê ket ken braz ha ma hini.

kement... kement ; ken liez... ken liez evid an traou a heller konta anezo :

Kement e oa mad gwechall, kement eh ê (eo) fall bremañ.

Ken liez a daol ; ken liez a wenneg.

e wellañ

Ober e wellañ (wella) evid... (anad eo e hell cheñch an ano-gwan perhenna dirag "gwella")

ken... ken

Ar skrivagnerien, ken ar re goz, ken ar re neve(z) anê (aneze, anezo)...

evid ne (eged ne) goude an derez uhelloh. Ma vez goloet ar verb e vo greet nemed gand evid (eged) :

Kreñvoh ê (eo) evid ne greden.

Kerzet an-eus (en-deus) buhonoh (buannoh) evidout.

Kentoh evid a vez heuliet gand an ano-verb :
Kentoh evid souzañ, e varvin.

seul vui ma..., seul vui e..., seul ma...

Seul vui ma'h ê (eo) dare ar freuz (frouez), seul vui e plijont.

pe gwelloc'h :

Seul dareoh ma'h ê ar freuz, seul vui e plijont.

Gand an derez-uhella :

Muiañ keuneud, brasañ tantad.

Seul êzetoh e kerze al loen ma oa dizamm.

An derez-uhella + ***ma+*** ar verb ***galloud***

Ar gwellañ ma hellan.

abred

An abretañ ar gwellañ.

Seul abretoh, seul welloc'h.

endra

Endra ma hallan ; endra ma hallin...

e-leh + eur verb en doare disklêria, gand ar rener a-raog ar verb :

Te a hoarz, e-leh me a ouel.

Gwelloc'h e vez merket ar pezh a zo disheñvel eged ma vefe lavaret : ***e ouelan.***

Ni a hoarz, ind-i a ouel.

a-bell

Ne labour ket : a-bell ahane, c'hoari a ra.

heb ne + an doare-divizoud ***e f*** :

N'hallan ket komz heb ne drohfe ahanon.

hep + ano-verb :

Yann a gomz hep kaoud aon.

di- (eur verb gand ***di***) :

Ervoan (Erwan) a chomas dilavar.

ouspenn ma..., e tu-hont ma...

Ouspenn ma'h on klañv, eh on dilezet.

pe

Klañv on, gwasañ 'zo, dilezet.

pe

Klañv on, ha dilezet, 'zo gwasoh.

an ano-gwan verb

Ar hi, trohet de(z)añ e lost, na houlle ken kerzed.

evïd, goude, da + an ano-verb :
Evidon da veañ (veza) klañv...
Dit da zond du-mañ. (= *Gand ma teufe du-mañ*).

Izlavarennou suj

hag a
Me am-eus gwelet eun den hag a deue din.

er stumm naha : *na ra*
An den na ra ket e zever, n'eo ket eun den a-zoare.

Notenn : *pehini, pere* : implijet int bet abaoe pell 'zo evel pa vefent raganoïou suj. Eur fazi braz an hini eo.

ma
D'an amzer ma oa pinvig (pinvidig).
En doare ma komzez.

e leh ma...
E leh ma'h omp (om) e zo (ez eus) kalz a dud.
Ar park e leh ma'h omp (ma'z emaom).
Gwengamp, e leh ma'h on (ma'z emaon) o chom.

en (displeget), o kas en-dro d'al leh :
Ar park ma'h omp (ma'z emaom) ennañ.

Notenn : Aliez e vez greet gand *e* e-leh *ma*. Eur fazi an hini e vefe.

NOTENNOU OUSPENN

Eur stagell suj a zo war he lerh ar verb pe *en em* :
Pa zav an heol.
Evid m'ho kwelin.
Gand m'en em glevfomp (glevim).
Goude m'on-deus digemeret (degemeret) galvadenn Doue gand plijadur, mar n'oulomp (n'oullom) ket he heuill, e reomp (reom) eur pehed.
Fur ê (eo) en gwirione(z) an hini a briz an oll vado(u) euz an douar evel fank, evid gonid karante(z) Jezuz-Krist.

Lavarennou frank

C'hwi hoh-eus ma haret, deut (deuit) eta davedon.
Sant Frañsez a gare meurbed ar baourante(z) hag he anvoud (eñvel) a ree e Itron.
An den lezireg a blij de(z)añ chom heb ober mann : evel-se ive(z) an den a-boan a blij de(z)añ labourad.
Eur garante(z) vraz am-eus evitañ : biskoaz ken braz an hini n'am-eus bet evid den.

Implij an doare eeun :

Na diêsad ê (eo), eme(z)añ, senti ouz lezenn Doue !

Teulet (Taolit) ple : ar sklêrijenn-ze a zigas (zegas) en on halono(u) eur c'hoant braz da derri on gwall decho(u).

Laret (Larit) dah (deoh) hoh-unan : an oll vado(u) euz an douar nan int 'n'int) netra.

